

17-2-23 / 1936

Youenn OLIER

O SELLOUT

WAR VA C'HIZ

eñvorennoù ha deizlevr

I

ROAZHON
GEVRED

1967



O S E L L O U T W A R V A C ' H I Z ,

eñvorennoù ha deizlevr

gant YOUENN OLIER

LEVRENN GENTAÑ

R A K L A V A R

Abaoe pell em boa soñjet skrivañ va eñvorennoù pe, da vihanañ, darn eus va eñvorennoù, ar re a c'hellfe diskleriañ penaos ez on deuet da vezañ ur brogarour, diouzh ma c'hell ur c'halvedigezh a seurt gant va hini bezañ diskleriet. Tro am eus bet ivez da gregiñ gant ar stourm evit Breizh d'ur mare diaes hag arvarus, pa oa an eil brezel bed oc'h ober e reuz e pep lec'h er bed. Soñjet em eus eta eta e c'helle va zesteni hag eñ diglok, bezañ talvoudus d'ar re yaouank a zo o tont d'an Emsav hiziv an deiz peogwir n'anavezont ket kalz tra diwar-benn ar pratad-se.

Hogen n'emaon ket c'hoazh gant marevezh ar brezel ha karout a rafen a-ziaroak gouestlañ un nebeut pennadoù d'am gwriziennoù ha d'am bugaleerezh a ziskleir tamm pe damm eus va dibaboù politikel a-c'houdevezh. Kement-se a zo lavarout e klaskin dreist-holl displegañ an darvoudoù a devo gellet va heñchañ war-du Breizh e stumm pe stumm, daoust ma ne gontin ket ar re-se hepken, eveljust.

Roazhon, 11 a viz Mae 1967

Pennad kentañ

Ganet on bet e Gwaien d'ar seitekvet aviz c'hwevrer 1923, en un ti bihan kozh eus traon ar ru Doub, anvet bremañ ru "Danton". N'ouzon ket peseurt talvoudegezh en deus ar ger "Doub", moarvat hini merkañ e oa div ren-kennad tiez a bep tu d'ar straed. Bezet pe vezet, straed koshañ Waien ez eo ar ru Doub, a gav din. A-hed ar straed -se ha tost dezhi, izeloc'hik, e kaver tiez eus ar XVIvet ha XVIIvet kantved. Strizh eo chomet ar Ru Doub betek bremañ ha soñj am eus e rede ur riolenn dro he c'hreiz araok ar brezel. Abaoe un nebeut bloavezhioù ez eo bet diskaret darn eus an tiez-se hag ar re nevez savet a zo bet konstruet en adreñv a-benn ledanaat ar chaoser.

Eus ar XVIvet kantved ez eo, a gredan, an ti elec'h on bet ganet hag ur stal genwerzh a zo anezhañ hiziv. An ti-mañ ne oa ket d'am zud; feurmet e oa ganto. Diaes awalc'h e oa kavout lojeiz war-lerc'h ar brezel bed kentañ evel war-lerc'h an eil, e Gwaien evel e-lec'h-all. N'edo ket va zad er gêr d'an ampoent, e Beirout, e Bro-Liban ne lavaran ket. N'oa ket fellet d'am mamm e heuliañ keit all.

Dianav eo din tremened Gwaien koulz lavarret. Klevet em eus e oa bet anvet Uindoportus en henamzer (1) : Porzh-Gwenn. Un anv boutin awalc'h en hor bro, a soñj din, peogwir n'eo ket diank tamm ebet war hon aodoù ar bazenoù hag an traezhennoù a jibl gwenn. A-hervez e vefe bet, evel Pennmarc'h ha porzhioù all eus aod kreisteiz ar vro, ur porzh oberiant awalc'h en amzer an dishualded. Er sei-

(1) War ur gartenn stag ouzh "Histoire ecclésiastique et civile de Bretagne..." eus P.H. Morice, embannet e Gwengamp e 1835 e kavan an anv "Vindana Portus" a glotfe gant Porzh Gwenan.

tekvet kantved e oa c'hoazh un nebeut listri-kenwerzh eoriet enni. War-dro ar mare-se avat e voent kollet en ur barr gwall-amzer ha setu e peseurt degouezhennoù : Gwaieniz en amzer-hont o doa nac'het selaou ouzh kentelioù Mikael an Noblez ; graet goap o doa ouzh an abostol hag int tost awalc'h d'o danvez emichañs. Abarzh pell avat e voent kastizet : goueledet o listri gant ar gorventenn. Setu pezh a lennis atav ebarzh ul levr gouestlet d'ar misioner kozh em bugaleerezh. A c'hell bezañ. Sur eo ivez e tizerias hag e varvas porzh-mor Gwaien evit meur a abeg, marteze dre ma voe aloubet tamm ha tamm gant an traezh, sur mat ivez dre ma voe staget Breizh ouzh Bro-C'hall ha kaeet hor c'henwerzh gant ar Gall Colbert. War dalbenn iliz Waien avat, war lein an tour, eo mired eñvor an amzervezh-hont e stumm ur vag-kenwerzh dre lien, egiz ma oant er seitekvat kantved, kizellet er greunvaen (1).

Marteze e voe ankounac'haet anv kêr d'ar mare-se ivez. An anv "Odiern" a zo bet dalc'het nepell alese, war vaezioù Eskibien, en anv ar gêriadenn "Kerodiern".

A-hend-all n'em eus lennet netra a dennfe da istor Gwaien, nemet ur pennad eus un danevell veaj savet gant ar skrivagner gall Guy de Maupassant, ma n'on ket faziet, elec'h e tisleger penaos e oa Gwaien un doare "bourc'h vrein" egiz e Bro-Saoz ergentaou : eno, a-hervez, e veze lakaet an dud da vouezhiañ war-bouez chopinadoù. Ma ! N'on ket evit lavarout deoc'h hag ar wirionez eo an dra-se pe get ; mard eo gaou, liv ar wirheñvalded a zo gantañ rak petra a fell deoc'h o defe komprenet Gwaieniz e politikerezh ar C'hallaoued pa ne ouient en amzer-hont, anat eo, tamm galleg ebet.

 (1) Munudoù diwar-benn Gwaien a c'heller kavout ebarzh levr Le Scouezec : "Le guide de la Bretagne mystérieuse" (emb. Tchou). Ar skeudenn a gaver el levr-se a ziskouez ar gouent kabusined a zo goull abaoe an XIXvet pe an 18vet kantved. Ar vojenn displeget er pennad n'eo ket mui anavezet abaoe pell gant Gwaieniz.

E i l p e n n a d

N'anavezan ket kalz tra diwar-benn tiegezh va zad. E dad, va zad kozh, ne oa ket eus Gwaien : ganet e voe e Plounevez-Porze e 1852. E anv a oa Jean Ollivier ; a-hervez e oa skrivet da gentañ Olivier ha froudenn un implijad maerdi bennak a gemmas ar skritur. E Gwaien e oa distaget "Oliar" evel ma tistager "amzar" h.a.

Klevet em eus en devoa va zad kozh un tammig tachenn e Plounevez-Porze, gant saout, re nebeut evit bevañ moarvat rak abred awalc'h e oa deuet da glask fred e Douarnenez evel martolod. Ur c'houer a oa anezhañ avat, da gentañ, un den diwar ar maez : ne ouezas nepred neuñ, pezh na viras outañ a vont d'ar mor bemdez eapd daou-ugent vloaz bennak.

N'ouzon dare penaos e rankas va zad kozh mont da vartolod da c'hounit e damm greun. Goulakaat a ran e oa bet rannet douarou e dud - m'o devoa - stre meur a vugel ha n'en doa ket mui pep hini awalc'h evit bevañ ; pe c'hoazh en devoe graet eostou fall ha lakaet e oa bet ar werzh war e draoù ? E gwirionez n'eo ket bet lavaret din biskoazh. En amzer-se avat, en naontekvat kantved, n'oa ket Bretoned ar c'hornog evit divroañ aes rak ne ouient nemet o yezh. Setu, mont da vartolod a oa un diskoulm d'an dud diwar ar maez hanter rivinet a oa o chom tost d'an aod.

Deuet e oa eta da labourat e Douarnenez. Ur martolod e boch bara ne oa ken anezhañ ha chom a reas er stad-se betek diwezh e vuhez.

Eno en devoa kejet a-c'houdevezh gant an hini a oa da vezañ e bried, Louise Roussel, a oa ur gappenn eus Kleden. Houmañ a varvas nebeut amzer goude ma voen ganet hag evel-se n'em eus dalc'het tamm soñj anezhi. Du-mañ, e Gwaien, avat, em eus kavet ul luc'hskeudenn anezhi : dougen a rae neuze koef giz kozh ar C'hapenned a oa brasoc'h un tamm eget an hini a voe douget gant ar rummad a zeuas war he lerc'h.

Va mamm-gozh he devoa un tammig ti hag un tammig douar e Kleden hag eno e oa chomet da vevañ da gentañ goude hec'h eured. C'hwec'h a vugale a lakaas er bed. Diwar ar c'hwec'h-se avat e varvas tri abred awaloc'h. Ur verc'h a voe sammet gant ur c'hleñved bugale pa ne oa nemet pemp pe c'hwec'h vloaz ; ur breur all d'am zad a gouezhas diwar ziskoaz e vreur henañ o c'hoari, a dorras e vellgein hag a varvas da bevar bloaz. An hini a oa bet kiriek d'ar gwallzarvoud all a voe sammet e unan en ur gwallzarvoud p'edo oc'h ober e servij er verdeadurezh c'hall. Martolod e oa neuze war al lestr "Jules Ferry" e Toulon ; ul lestr all "Liberté" a oa o vont d'ar strad en un drouziwezh bennak. Kaset e oa bet va eontr en ur c'hanod da zastum an dreistveverion. Ar c'hanod-se avat a oa bet trec'hohiet e unan ha va eontr Jean a oa bet beuzet en drovezh-se. Da heul kement-se e oa bet lodennet ul leve d'am zad kozh.

Div c'hoar all en devoa va zad hogen n'em eus ket o anavezet koulz lavaret : divroet e oa va zad abred tre da Vro-C'hall war-lerc'h ar brezel bed kentañ.

Va zad a voe ganet eta e Kleden e 1890. Betek an oad a zek vloaz en doa bevet eno e ti e vaeronez rak d'an ampoent e oa deuet va zad kozh da vevañ e Gwaien

elec'h en devoa va zad kozh kavet fred a-benn ar fin. Prenet e oa bet ganto war ar Stiri - hent Beg-ar-Raz - un ti bennak a voe gwerzhet war-lerc'h marv ar vamm-gozh, a gav din.

Pa zeuas va zad da vevañ e Gwaien e tremenas da gentañ an testeni-studi da unnek vloaz (er skol edo neuze gant Jade a voe kannad an taolead a-c'houdevezh) ha diouzhtu war-lerc'h e rankas mont d'ar mor gant e dad. Ne vern penaos, goude marv e bried e tro ar bloavezhioù ugent, e vevas va zad kozh ar peurrest eus e vuhez e Gwaien - feurmet en doa div gambr er Stumm - ken na zeuas da chom ganeomp e Cambrai, en harlu.

P e n n a d 3

Anv va zad-kozh a-berzh va mamm a oa Piton, Jules Piton. Hervez ar brud e tenne an tiegezh-mañ e orin eus Enez Sun. N'on ket bet evit gwiriañ an dra-se, petra bennak maz eus bepred, a gredan, tiegezhioù o tougen an anv Piton en Enezenn-se hag a oa, war a lavare din va eontr Jean-Marie, Doue d'e bardono, baradoz al lonkerion, dre ma c'hellent eno en em harpañ ouzh an daou du eus ar straed, ken strizh ha ma oa, kuit a dreuzigellat penn-da-benn an hent evel marankont ober e kêrioù an douar-bras.

Pezh a ze sur eo e oa va zad kuñv o vevañ e Gwaien endev en hanterenn kentañ an naontekvet kantved.

Pesketour e oa eno, na petra 'ta. A-hervez ne oa na kaeoù na chaoser-mein betek Traezh-Kadeg en amzer-hont, netra nemet an aod gant kerreg hag ur c'hal bennak moarvat. Edo ti va zad-kuñv adreñv an ti-kêr a vremañ, war ribl an dour ha bemnoz e c'helle va zad-kuñv stagañ e vag ouzh e di, war a zo bet kontet din. Nebeut a ouzon diwar-benn e vuhez, evel m'eo kaer gortoz, nemet ez oa bet rediet ur wech bennak gant kabiten ul lestr saoz da leviañ e lestr dreist d'ar Raz, rediet, a lavaran mat, rak plantet e oa bet ur bistolenn dindan e fri ha me 'oar-me. E gwirionez meur a zoare a zo d'ar sorbienn-mañ hag a-dreuz dezho ez eo diaes awalc'h a-wechoù diverzout ar wirionez. Aet e vefe ivez ur wech da zougen testeni en ur prosez en Naoned hag ar veaj-se etre Gwaien hag an Naoned en devoa graet war e droad, penn-da-benn, mont-dont.

Kasausoc'h afer en em gavas gantañ ur wech. Un devezh mao aet d'ar Pont da brenañ e vutun - ar Pont a zo penn-kanton an taolead ; Gwaien ne oa nemet un barrez - e voe taget ... gant ur vleizez e traon Rozveur, er c'hoad : hent ar Pont a dremene dre eno en amzer-se ha n'eo ket dre ar Stumm ha Keristumm egiz bremañ. Ur pennbzh a oa gant va zad-kuñv avat en drovezh-se ha gouest e oa bet d'en em zifenn, na petra 'ta : lakaet en doa al loen gouez da dec'hout. Hogozik dibistig e oa choemet nemet evelato e oa bet drailhet e "votoù-kinoù" (un doare bodreoù stag ouzh botoù-koad, a gredan) ha gloazet e oa bet ivez gant dent al loen, eveljust. Ar gredenn e oa neuze er c'horn-bro penaos e oa bet diouennet ar bleizi endev ; setu, den n'houlas krediñ komzoù va zad-kuñv pa

zeuas da gontañ e oa bet taget gant ur bleiz ; gant ur c'hi klañv, ya, moarvat, a responte an dud. D'ar mare-se avat ne oa bet kavet louzoù ebet d'ar gonnar. Planedenn ar re a oa bet dantet gant ur c'hi klañv eta e oa mervel gant ar gonnar end-eeun, pe vouget gant an dud etre div vatarasenn abarzh na zeufent da vezañ dañjerus, a-hervez. N'ouzon ket ha deuet e vije va zad-kuñv a-benn d'en em dennañ diouzh an enkadenn-mañ paneve e voe kavet korf an anevañ war Menez Sant-Yann, en tu all d'an dour : treuzet en doa an aber diwar neuñv hag aet e oa d'echuiñ e vuhez war lanneier didud ar menez. Bleizez pe gi a oa eus al loen-se, n'oan ket aze evit gellout lavarout deoc'h, lennerion ; ma oa bleizez anezhi, bleizez diwezhañ ar C'hab ez eo bet sur-mat.

Un darvoudig all o tennañ da vuhez va zad-kuñv a c'hellan menegiñ amañ, evitañ da vezañ dister awalc'h, dre ma tiskouez ur stumm heverk eus ar "spered meuriad" a oa o ren e Breizh d'an ampoent-se. Un den kreñv a oa eus va zad-kuñv, startañ ha solutañ paotr a oa o vevañ e Gwaien d'ar mare-se, sañset. Un devezh ma oa aet ur wech ouzhpenn da gerc'hat e vutun er Pont e oa bet rediet gant tud kêr da c'houren ouzh "pout" ar c'horn-bro, da welout gant piv e vije aet ar maout. A-benn ar fin, hervez ar vojenn, hini ebet ne oa deuet a-benn da reiñ lamm d'egile, daoust m'o doa gourenet e-doug an deiz. Ar pezh a gaven fentus pa veze dibunet din ar sorbienn-mañ e oa an addisplegoù a veze graet dezhi a-hed ar wech, evel un diskan : un den ken mat, n'en dije ket graet droug d'ur gelienenn, e rediañ d'en em gannañ ouzh unan ha n'en

doa gwelet biskoazh zoken, ma n'eo ket un druez !

Va zad-kuñv ne varvas ket en e wele, dre wallzarvoud ne lavaran ket. Ur wech ma oa o tont d' an aod goude pesketa e chomas e vag sac'het e genoù an aber, dirak Lezarrouant, da goulz an tre, tost d'an douar. Ar vartoloded a oa gantañ hag int yaouank o doa gallet tizhout ar ribl diwar neuñv diboan kaer. Va zad-kuñv avat en devoa pevar-ugent vloaz d'ar mare-se (ne oa tamm kedskor ebet neuze, egiz ma soñjit awalc'h) ha ne oa ket mui gwall ouesk d'an oad en doa ; strobet e oa bet gant e votoù-kinoù ha n'en doa ket gallet diwiskañ hag a oa bet karget gant an dour : mont a reas d'ar strad ha beuzet e voe. Evel-se ez echuas e vuhez.

P e n n a d 4

Va zad-kozh a voe ganet e Gwaien eta er bloaz 1849. Daou vreur hag ur c'hoar en devoa. A-zivout ar re-mañ n'ouzon netra nemet e varvas unan eus va eontred kozh e Toulon, e degouezhennoù dianav din. Goulakaat a ran e kouezhas klañv hag e varvas p'edo o verdeñ war ul lestr-kenwerzh bennak egiz ma reas va zad-kozh e unan en e yaouankiz.

Va zad-kozh a oa aet un tammig d'ar skol, marteze ur bloavezh pe zaou, awalc'h da zeskiñ lenn ha skrivañ e anv. Ne gredan ket nemeur en defe desket galleg d'ar mare-se. An tammig bihan a ouie a oa deuet

dezhañ diwar verdeñ war listri kenwerzh a-c'houdevezh.

Gallet en defe chom er skol m'en defe karet, a-hervez. Eñ an hini eo a gavas gwell mont d'ar mor : pesked a oa da bakañ diouzh an druilh endro da Waiien d'ar mare-se ; ne oa ket diboblet an addoù evel maz int bet abaoe ha plijusoc'h e oa moarvat pesketa eget chom da selaou ur mestr arabadus a gomze en ur yezh estren outañ.

Da bemzek pe c'hwezec vloaz eta e emouestlas evel mous war "vatimantou" kenwerzh, listri dre lien a rae ar "gwechoù bras" (en un doare iskis awalc'h ez eo bet kemmesket ar ger "beaj" gant ar ger "gwech" ken e lavarer ivez "Itron Varia ar wech - vech - vat" eus ar chapel a zo bet savet a-us d'al Loc'h war hent Begar-Raz) (1) Listri dre lien teir gwern a oa eus al listri-se, a yae gorrek gant o hent hag int o lakaat daou viz bennak da ziraez an Antilhez ha war-dro c'hwec'h miz evit tizhout Buenos Aires (2). Aet e oa va zad-kozh ivez betek Bro-Rusia, da gerc'hat koad.

Kllevet em eus va zad-kozh o komz eus ar merdeadennoù-se, o tibunañ koñchennoù farsus awalc'h a-wechoù war o divoud (e aters a raendre hanterouriezh va mamm pe ur voereb a yae neuze da jubennourez) Evel-se en doa dezrevellet din e oa degouezhet ur wechad dirak Enez Martinikez da gerc'hat sukr ; evel ma c'hoarveze meur a wech e oa bet dalc'het ar skipailh war vourzh. Ar c'habiten avat en doa kefridiou d'ober e kêr ha karget e oa bet an daou vous - va zad kozh hag ur c'hamelad - da gas anezhañ d'an aod. O c'hortoz distro o c'habiten o doa ruzet an daou gavadand o zreid dre stredoù kêr

(1) Ar "wech" a oa implijet evit ar beajoù war vor moarvat rak a-hend-all e raed ivez gant ar ger gallek "voiaj".
(2) Va zad-kozh a oa aet betek Buenos Aires met ne oa ket bet aotreet da vont war zouar.

hep gouzout re vat petra ober ha da zeverrañ o amzer, na petra 'ta, e cant deuet tre en ostaleri ; eno avat o devoa kavet rom eus ar c'hentañ hag a oa c'hwec meurbet a-hervez. Meur a vanne sonn a oa aet ganto, ma oa badaouet mat d'o fenn a-benn ar fin. Ma ! Evit echuiñ an istor berr-ha-berr, ar c'habiten an hini eo en doa ranket kregiñ er roeñvoù ha degas d'ar gêr e zaou vartolod mezv.

Kement-se ne oa ket reizh eveljust, kaer a zo lavarout, ha kastizet e voe an daou vous kablus. E gwirionez ne voent ket kastizet garv tre, barnet hepken da zioueriñ ar banne rom a veze darnouet brokus bemdez da bep martolod, ar "boujaroñ" egiz ma rae va zad-kozh anezhañ. Nemet, setu, Jules Piton an hini eo a oa karget da ziskenn o banne d'e gamaladed. Kentañ a rae eta e veze lak-
zad a-gostez e lodenn ha klokaat gant dour pezh a vanke d' ar re all, ma rae ket kalz droug d'o yec'hod moarvat. Pa lavaren deoc'h e oa homañ un ibilh !

Dav eo din ouzhpennañ e kavas va zad-kozh mat atav e vanne rom. Koun am eus e tiskennemp d'ar porzh a-wechoù araok ar brezel ha c'hoarvezout a rae gan-
tañ ober un arsav en ostaleri, da evañ ur chopinad gant kamaladed kozh ; bep ar mare avat ez ae ur banne rom gan-
tañ, unan hepken a-dra-wir, rak fur e oa. Kement-se ne vi-
ras ket outañ a vevañ hogos 92 vloaz. Hag evit na vo ket di-
dines spered karourion ar vertuz e resiziz evelato ne evas
va zad-kozh a-hed e vuhez nemet dour en tu-hont d'en vanne
rom.

Un toullad koñchennoù all am eus klevet e ser ar gwechoù bras-se. Da skouer, hini ar posked nij a zeue da blavañ war bont al lestr p'edo o treizhañ an
trovanoù war-du Buenos-Aires. Dastumet e vezent ha

degaset d'ar c'habiten a lakae fritañ anezho : ur meuz
lipouz a zo anezho, a-hervez.

Marteze awalc'h hoc'h eus lennet ar pennad embannet gant Yeun ar Go, Doue d'e bardono, ebarzh
"Al Liamm" un nebeut bloavezhioù zo, diwar-benn ar c'has-
tizoù iskis a veze arveret er verdeadurezh kozh. Din-me
avat ez eo bet kontet istor ar c'heginour kaezh en devoa
fardet krampouezh brein d'ar c'habiten ha d'e skipailh
hag a oa bet barnet d'o lonkañ holl gwitibunan, ma oa bet
darbet d'an den paour kreviñ diwar re gofad. Houmañ a oa
c'hoazh unan eus eñvorennoù va zad-kozh diwar an amzer
ma oa o redek ar morioù e-kreiz ar c'hantved tremenet.

Ne chomas ket keit se a amzer da ver-
deñ a-hend-all. Pa oa o pacuez distreiñ diouzh unan eus
ar gwechoù bras-se am eus nevez veneget e voe skrapet e
Brest gant ar pennadurezhioù gall, gwisket dezhañ livrez
al lu gall ha dezouget da Paris. Brezel 1870-1871 a oa
oc'h ober e reuz d'ar mare-se hag abarzh pell e voe se-
zizet kêrbenn Bro-C'hall gant ar "Brusianed" (bepred e
komzas va zad-kozh eus ar Brusianed ha n'eo ket eus an
"Almanted"). Amzer ar seziz eta a dremenas en ur c'hreñv-
lec'h, maget mat a-hervez, o tennañ war ar Brusianed a
oa skoachet en o fozioù e-skoaz dezhañ, hag eñ goudo-
ret adreñv ar ramparzhioù. Moarvat e reas mat al la-
bour a c'houlennet digantañ rak div vedalenn en devoe da
c'hoarvezout ; tro am eus bet d'o gwelout e strad un ar-
mell pa zeuen da dremen an ehanou e Gwaien araok ar bre-
zel diwezhañ. Ne gav ket din koulskoude e oa ken gredus
se d'en em gannañ ; kounañ a ran e tiskoueze dalc'hmat

bezañ feuket ha brouezet gant ar soñj eus ur c'hast a vacuez - gwreg ur c'habiten a-hervez - a oa degouezhet ganto er c'hreñvlec'h - Doue a oar petra ' oa deuet d' ober eno! - a veze o kontañ an tennoù a ziskare an enebourion war an talbenn enep. Digarezomp ar vacuez : hi da vihanañ a gare Bro-C'hall. E spered va zad-kozh avat, ar re e oa bet rediet d'en em gannañ outo a oa tud evel-tañ, dezho kerent, gwreg ha bugale.

bec'h Va zad-kozh ne chomas ket da lugudiñ ar savas/etre ar C'hallaoued war-lerc'h ar brezel. Ana-vezout a rae ur mezeg , ur C'hernevad eus kostez Gwaien, hag a-drugarez dezhañ e c'hellas aes sachañ e skasoù. Disoudardet e voe ha dont a reas endro d'ar gêr. Eus ar brezel ne zegasas ket madoù bras nemet an div vedalenn am eus meneget hag a viras betek fin e vuhez.

Ne guitaas mui Gwaien goude-se. Chom a reas da besketa epad hanter-kant vloaz bennak, pe zoken tri-ugent, betek 1930, a gav din, paz eas war e leve a-benn ar fin. E diwezh an naontekvet kantved hag e deroù an ugentvet ne oa ket a vagoù bras (1) evel maz eus bre-mañ, gouest da vont betek Iwerzhon pe an trovanoù zoken, bagoù bihan dre lien ne lavaran ket. Pa veze gouzizet an avel e ranked ober bec'h war ar roeñvoù da zistreiñ d'ar porzh. Ne vern penaos ned ae ket va zad-kozh gwall bell da glask pesked, betek Beg-ar-Raz hag Enez Sun marteze. A-benn dek pe pemzek vloaz ez ae brein ar seurt bigi a oa dister a-hend-all - n'oa pont ebet dezho ha ken buan

(1) Al liester "bigi" a zo dianav e Gwaien.

all e c'hellent bezañ troc'holiet gant an disterañ barr -amzer - ha dav e veze neuze aozañ unan nevez, pezh a oa mizus awalc'h evelato (1).

Ha peseurt anvioù a roe d'e vigi, a c'houlennot marteze ; daoust ha brezhonek e cant da ne-beutañ ? N'on ket evit respont deoc'h ervat. Ne gav ket din evelkent e cant brezhonek. Daou a zo bet meneget din: an "Transvaal" hag ar "Boer" a ziskouez e taols va zad-kozh pled mat ouzh ar politikerezh etrevroadel daoust ma ne ouie nemet brezhoneg.

Ne gare ket nemeur ar Saizon, evel holl Vretoned e rummad ; ober a rae "Yann Saoz" anezho ha soñj am eus penaos seurt troienn, ton ar gasoni enni, a strafuilhe unan eus ma moerebed, gallekaet awalc'h a-hend-all, d'ur mare ma oa deuet ar Saizon da vezañ salverion ar bed epad ar brezel diwezhañ : n'eus netra breskoc'h eget un hengoun a chom poblek rik hepmuiken.

Kalet ha dañjerus e oa micher va zad-kozh. D'e soñj, an ifern ne c'helle ket bezañ kaletoc'h egeti ! Diasur e oa ivez : a-wechoù ne veze paket pesk ebet ; pa veze karget rez ar rouedoù avat, betek fregañ, e koazhe buan priz ar pesked pe ne ~~vaz~~ ket kavet gwerzh dezho. An hañvezhiad peskerezh a yae evit un darn vat da baeañ dleoù ar goañvezh araok, pa ne oa ket tu da vont er-maez gant ar wall-amzer.

Buhez unton moarvat hogen a zlee plijout dezhañ evelato. Diouti n'eus bet dezrevellet din

(1) Ne oa ket aet va zad-kozh biskoazh betek Beg-ar-Raz dre zouar; e 1936 evit ar wech kentañ ez eas d'ober e damm tourist eno a-gevret gant va zud, dre ar c'harr boutin.

nemet un toulladig litoriennoù evel hini ar c'hazh a gave ken mat ar pesked ma oa aet d'ar mor gant va zad-kozh hag eñ ken klañv goude-se war ar vag . ma chome disebl-ant krenn dirak ar sardined diniver a gouezhe a-vil-vern dindan e fri. Ur wech all ivez, a-hervez, e oa va zad-kozh risklet diwar vourzh e vag ebarzh ar mor. Ma ! Pa zivoras e talc'he bepred e gorn-butun en e c'henoù : brudet e oa va zad-kozh ivez e Gwaien en abeg d'e gorn-butun. A-hend-all n'em eus ket klevet nemeur va zad-kozh o komz eus e besketadennoù. Kontet en devoa deomp evelato e oa c'hoar-vezet gantañ pakañ ur morhoc'h, ur par, emezañ, ha, war a lavare ivez, e heulie ar barez ar vag en ur leñvañ (1). Dister eo kement-se, egiz ma weler, met n'eo ket souezh n'oufen ket muic'h rak n'oan ket evit kaout gwir zivizoù gant va zad-kozh dre-benn a skoilh ar yezh a ranne ac'ha-nomp dioutañ.

/ Pennad 5 /

Va zad-kozh a euredas un nebeut bloa-vezhioù war-lerc'h brezel dek-ha-tri-ugent. E bried a oa genidik eus Eskibien, ur barrez vihan war-laez, un hanter-lez diouzh Gwaien, er c'hornog, ha Chann ar C'here a oa hec'h anv. Kavout a ra din e oa kustum pesketourion

(1) Diwezhatoc'h, p'em boa kroget da zeskiñ brezhoneg a-zevri, em boa savet ur roll a anvioù pesked anavezet e Gwaien, dreist-holl gant sikour va zad hogen hemañ ne oa ket gouest atav da lavarout din eus peseurt pesked e oa anv e gwirionez.

Waien da glask o gwrazez er C'hab (Flouhinegiz ha ploueziz all ar c'hreisteiz a dremenent da dud ouez hag int kêriz, arabat disoñjal, ha ne brizent ket kemer pried en o zouez) ; va eontr Jean-Marie a voe martolod war-lerc'h e dad a reas diouzh ar c'hiz ivez hag a zibabas ur wreg e Priveilh, er C'hab.

Ar Gereed a oa un tiegezh diwar ar maez, o chom e Braneleg, hanter rivinet d'ar mare ma timentas va zad-kozh emichañs. Tad va mamm-gozh en devoa un dachenn vras awalc'h er barrez-se a-hervez hogen ren a rae e amzer o chaseal elec'h ober war-dro e atant hag eveljust e oa aet tamm ha tamm e stal da stalig hag e stalig da netra. Dimezet en doa d'ur plac'h yaouank a bemzek vloaz - pe lakaet e oa bet da zimeziñ, n'ouzon ket ; koshoc'h un tamm eget e bried e oa ne vern penaos ; houmañ a oa marv diwar wilioud dek vloaz war-lerc'h goude bezañ roet seizh bugel dezhañ. Seurt tonkadur ne oa ket divoutin e-touez mammoù an amzer-se, siwazh ! Gwir-heñvel eo ivez avat e oa aet an dachenn war zisteraat pa oa bet ret en rannañ etre an hêred.

Bezot pe vezot, bez e oa atav eus an tiegezh-se war-lerc'h ar brezel gall-prusiat. Kristenion c'hredus a oa o vevañ e Braneleg : bemnoz, goude koan e veze lennet "Buhez ar Sent". Ur voereb kozh, Mari-Anna, na ouie tamm galleg ebet eveljust, a oa karget eus al lennadur-se peurvuañ. Unan eus he nized en doa tapet un tamm deskadurezh hag a oa aet da skolaer a-c'houdevezh - tro am bo da gomz diwar e benn tuchañtik - en doa kiniget dezhi deskiñ galleg. Nac'het he doa. "Da betra e servije din gouzout galleg ? " emezi. Ha fur e oa he res-

pont : d'ar mare-se, er rannvro-se eus Breizh, deskiñ galle leg oa koulz ha deskiñ saozneg en hor c'hantved, war-bouez nebeut.

An tiegezh Kere a oa stag ouzh tiegezhioù all, Kervevan ha Chapalen hogen n'anavezan netra diwar o fenn nemet o anv. Darn eus bugale an tiegezhioù-se evelato a oa krog da vont war ar studi. Ur mab Chapalen en devoa tapet ar "Brevet", pezh a oa deskadurezh en amzer-se hag aet e oa da verour ur fritur a-c'houdevezh. Meneget em eas niz Maria-Anna Kere a felle dezhañ deskiñ galle leg d'e voereb. Ar mab henañ eus an tiegezh a oa anezhañ - Jean-Laurent a oa e anv. Donezonet kaer e oa ha kaset e oa bet d'ar c'hloerdi d'ober e studi da vont da veleg (an hent e oa d'ar mab henañ en un tiegezh war ar maez da sevel er gevredigezh). Jean-Laurent avat n'en doa ket kaset e studi da benn ; kuitaet en doa ar c'hloerdi eta, pezh en doa plantet droug leizh korf person Priveilh a lavare bepred goude-se : "Pa soñjan e vije aet hemañ da eskob..." Eskob ne voe ket a-dra-sur, skolaer ne lavaran ket. A-benn ar fin ez eas da zerc'hel ur skol e bro-Leon, war-dro Plouenan. Ur genveniterv bennak am eus atav er rannvro-se hag am eus bet tro d'anavezout p'on bet o tiskuitzañ e Rosko epad va c'hleñved, e 1960.

Eus un contr all d'am mamm em eus klevet komz ivez : Michel oa e anv. Hemañ a yeas da zouger-lizhiri ha setu penaos e voe dezhañ kemer ar vicher-se. P'edo o voueta an dornerez e-doug an eost e oa bet paket e vrec'h er mekanik ha drailhet gantañ. Diglemm e oa cho-met met keit ha ma oad bet o prederiañ anezhañ nemet en

doa staget da zifronkal kentizh ha m'en doa merzet e zavez-pried o tont d'e ziambroug war-lerc'h ar gwallzarvoud. Evel-se eo, gant e vrec'h voñs, en doa ranket dilezel al labour-douar ha dibab ur vicher all.

Eveljust, kendirvi ha kenitervezed e-leizh he doa va mamm ez vihan er C'hab pe e Gwaien. Eus anv unan hepken em eus dalc'het soñj dre ma oa diseurt awalc'h : Hippolite, mab Jean-Michel, a voe lazhet epad ar brezel bed kentañ.

Merzet en devo al lenner e oa gallek an anvioù-badez am eus treuzskrivet evel m'em eus o c'hlevet. Dija e deroù ar c'hantved-mañ, er c'horn-bro-se a oa brezhonek rik, e rae ar gallekaat e reuz. Ober a raed awalc'h gant "Chann a C'here" evit envel ar vamm-gozhho-gon an anv "Jeanne" a veze roet d'ar merc'hed a-c'houdevezh. Ar stumm "Laorañs" a oa enlec'hiet gant an hini gallek "Laurent". Evit "Youenn", diwar neuze, e oa sellat evel un anv diwar ar maez ha kemeret e voe e lec'h gant an doare gallek "Yvon" (ha n'eo ket "Yves") a oa kalz cheurc'ho-c'h. Gwir eo e rae Gwaieniz kêriz anezho o unan.

Eus an tiegezh Kere n'em eus anavezet hini ebet war-eeun. Ur wech evelato, e 1930, epad an hañv - ar wech kentañ e oa din distreiñ da Waien evit an ehanoù ha n'em boa neuze nemet seizh vloaz - e oamp pignet war hon troad betek Eskibion d'ober ur gwel d'ur voereb kozh, Anna hec'h anv, a oa o chom bepred e Braneleg. Hir am boa kavet an hent. Erru du-se e oa bet servijet deomp fars buan gant ar voereb kozh ; poan am boa bet da lonkañ ar boued stambouc'hus-se. Eus an diviz a voe graet etre

va mamm hag ar voereb kozh avat ne intentis grik evel-just : ne oa nemet brezhoneg ganto - Anna Kere ne ouie nemet ar yezh-se ha din-me ne oa bet desket tamm anezhi.

Pa voe bet dimezet va zad-kozh eta, e gentañ dezv e voe sevel un ti. En em glevout a reas gant ur rumm all a dud evit prenañ un ti-plouz er Gêr-vihan, e-harz ar Roz-Kribenn hag ar Stiri ; war-dro ar bloavezhioù-se, e 1880, ne oa nemet tiez-plouz izel er rann-gêr-se. Diskaret e voe an ti kozh ha konstruet en e lec'h un ti toet e mein-glas, pevar fezh ennañ, ur c'hraou, i-ur porzh dirak hag adreñv, enk tre e gwirionez rak serzh tre eo an tarroz a gas war-grec'h adreñv an ti; ur c'hriagnol da renkañ ar rouedoù hag an d'faroù pesketa all a oa el laez. Seurt tiez egiz ma saved diouto war an aod d'ar mare-se a zo dezho mogerioù tev tre, c'hwegont kentimetrad treuz marteze, hogen en diabarzh n'eus nemet speurennoù prenn ha treustoù ; en traon -ahend-all ne oa nemet ul leur-zi.

Ar rumm dud all a oa kenberc'henn gant va zad-kozh a oa o anv Fili. A-c'houdevezh e voe prenet an ti penn-da-benn gant va zad-kozh. Evelato: em eus koun bezañ anavezet ar vamm-gozh Fili er bloavezhioù 1931-1933, ur vaouezig dister gwisket gant ur skerb gloan du, a zouge koef Gwaien, en em ruze a-dastorn en diri rak dall e oa deuet da vezañ en un taol ; edo o sellout ouzh tantad Sant-Yann un drovezh hag a-greiz-holl he doa goulennet ouzh ar re a oa war he zro: "Biskoazh c'hoazh! Daoust ha kroget eo an tantad?" Abaoe ur pennad dija e

oa o flammañ hag o strakal. En un taol he doa kollet ar gweled. Hi ivez ne ouie nemet brezhoneg.

An ti-mañ a zo chomet war-bouez nebeut egiz ma oa paz eo bet savet, gwennrazhet bepred, nemet ez eo bet ledanaet unan eus ar prenester, lakaet dour, tredan h.a. Araok an eil brezel bed ne oa nemet va zad-kozh o vévañ en ti-se gant unan eus va moerebed, Louise, hec'h anv, a oa chomet seizet gant ar poliomiélitis d'an oad a bemp bloaz. Ne oa den ebet o chom en traon clec'h ne vane nemet kozh gweleoù-kloz a voe difoeltret un devezh bennak ha plantet en tan.

/ Pennad 6 /

Kalet e oa ar vuhez evit an darn-vuiañ eus an dud war an aod-se a Gernev-izel e diwezh ar c'hantved tremenet pe e deroù ar c'hantved-mañ. Ar pep brasañ eus an tiegezhioù a oa en dienez ha daoust ma ne oa ket va zad-kozh e-touez ar re baourañ, evalkent ne oa ket druz ar geuteurenn gantañ. A-dra-wir e oa mestr ur vag hag an dra-se a roe dezhañ gwir da gaout div lodenn eus gwerzh ur besketadenn bennak tra m'o devoa ar vartoloded all pep a lodenn hepken hogen ret e oa dezhañ pourchas ur vag nevez bep dek pe bemzek vloaz, en tu-hont d'ar rouedoù, d'al linennoù ha d'ar binvioù labour all, a oa mizus awalc'h, a soñj din. Va zad-kozh a gawe dezhañ da en devez graet un devezhiad mat pa zegase pevar real d'ar gêr.

Pevar real ne oa ket kalz hogen ur c'hiload bara ne goustete ket ouzhpenn daou pe dri gwenneg, a gav din. Evelato e oa diaes skoulmañ ganti en un tiegezh niverus evel hini va zad-kozh, dreist-holl epad ar goañv pa ne oa tu ebet d'ar bigi da vont er-maez. Uheloc'h priz a veze war ar pesked neuze hogen n'oant ket stank kennebeut, anat eo. Setu e oa ret prenañ war dermen e ti ar varc'hadourion o c'hortoz ma vefe kaeraet an amzer.

Evit darn e veze an tiegezh diwar embourvezerezh. Bep bloaz e veze maget un hoc'h pe zaou, diwar restajoù ha gwelien an ti ; ul loen-poubal a oa anezhañ, priziüs e pep keñver ; mont a raed da gutuilh ... linad evitañ ; ur pred hep e bar e oa evit an otrou-mañ. E miz du pe Kerzu, e deroù ar goañv, e veze lazhet ar pemoc'h kaezh ha pourchas a rae kig-sal d'an tiegezh betek an nevez-amzer (1).

Pesked fresk gant avaloù-douar ha legumaj a veze debret forzh pegement epad an hañv eveljust. A-benn ar goañv e veze lakaet ivez da sec'hiñ er c'hri-gnol ; pa oa deuet poent o debriñ e vezent disalet en dour tomm ; a-wechoù e vezent mogedet. Kig avat ne veze ket prenet nemet da sula ve.

Da vintin ne veze ket kemeret kafe dre laezh pe chokolad evel bremañ, soubenn ne lavaran ket, da vihanañ er penn-kentañ.

Bout ma oa ha maz eus bepred kouerion o vont da vartoloded epad an hañv n'en doa va zad kozh tamm douar ebet. Bep bloaz evelato e feurme ur park benak evit plantañ patatez. A-hervez e oa douar pounner

(1) Ne veze prenet amann nemet epad an hañv ha c'hoazh ne veze lakaet war ar bara nemet ur gwiskad tanav, peadra da livañ anezhañ. Aczet e veze ar boued diwar lard bevin : ar vugale a zicouere kement druzoni ma tebrent anezhañ en kriz, egiz pa vije bet amann.

er parkoù-se a veze feurmet d'ar vartoloded gant ar beizanted fin-se ; d'ar re-se oa e wellaat o treiñ-distreiñ anezhañ. Va zad-kozh avat ne rae ket nemeur war-dro an dra-se : fae oa gantañ labourat an douar. Bezet pe vezet, an avaloù-douar ne raent ket diouer er gêr atav : diazez ar bevañs a oa anezho, evel en Iwerzhon. (1)

Lavaret em eus e oad kustum da zebriñ soubenn da veure. Ret eo ouzhpennañ ne oa ket deuet ar c'hiz kennebeut da zebriñ bara gwenn : bara segal an hini a veze war an daol peurvuiañ. Limigoù ne vezent roet d'ar vugale nemet rouez a wech, da geñver gousel Nedeleg peurliesañ ; hag eveljust n'oa ket a c'hoarielloù evit ar vugale.

Breizhek rik e oa chomet ar vro bepred en amzer-se, e deroù an ugentvet kantved. Va mamm he deus soñj bezañ gwelet Bretoned kozh diwar ar maez, fichet evel en amzer wechall, gwisket ganto otoù-brozhek, hir o blev. Ar baotred a chome e sae betek pemp bloaz (va zad, da skouer) ; ar plac'hedigoù a zouge bonedoù. Ar "pennsardin", koef porzhioù Kernev izel a oa koef Gwaien ; douget e oa gant ar chal bras. Adal Plozeved avat, dek kilometrad er c'hreisteiz, e krog bro ar bigoudenned.

Ar c'hoefoù, padal, a zo aet da get primoc'h c'hoazh eget ar yezh e Gwaien. Meur a ziskleriadur a zo d'ar c'holl-se eno evel e-lec'h-all, armerzhel peurgetket : er C'hab atav eo steuziet gouenn ar c'hema-nerzed a-ocze dilhad ar merc'hed.

(1) Ne veze evet nemet dour e Gwaien. Ne oa ket chistr er C'hab, a gav din. Abaoe ar C'hallaoued o deus degaset o gwin hag ar vezventi.

E deroù ar c'hantved ne oa ket prederiet an dud kennebeut. Biskoazh ne veze kerc'het ar mezeg war-dro ar re glañv. Pa voe skoet va moereb gant ar seizerezh e voe plantet en ur gwele ha gortozet e voe ma vije tremenet ar barrad. A-wechoù koulskoude e c'houlenned skoazell digant ur pareour bennak. Ez yaouanik flamm e oa bet tizhet va mamm gant un droug damheñvel ouzh an hini en doa nammet va moereb : n'oa ket mui gouest da vale; en em ruzañ a rae war he daoulin. Neuze e oa bet kaset davet ur "surjian" bennak, un den eus ar bobl, en devoa distagellet un dra bennak en he c'horzailhenn. Gwelllaet e oa bet dezhi kerkent. Pemp bloaz bennak he doa d'ar mare-se.

Kleñvedoù all avat n'oa pare ebet dezho, dreist-holl an droug-skevent, an dorzhellegezh, a rae ur reuz spontus e-touez tud disvouedet, hep kontañ ar c'hleñvedoù-red a skoe ar vugale, droug ar c'hroc'henoù-tag (1). Klañvourion zo avat ne welent fin ebet d'o foanion. Neuze e veze pedet evit ma prizfe an Aotrou Doue o fareañ pe o disammañ diouzh ar vuhez. Nav maouez a yae neuze da chapel Santez-Eved, pelloc'h eget traezh-Kadeg, war an aod hag eno e tibunent nav chapel en ur ober nav gwech tro ar chapel. Hag, a-hervez, o fedennoù a veze selaouet neurvuiañ.

 (1) An derzhienn-alter a voe stank awalc'h e Gwaien epad pell amzer, hag ar vrec'h zu en naontekvet kantved. Gwir eo ne oa ket kalz a yec'hedouriezh gant an dud. E ser ar c'hustum am eus meneget eo ret notañ e oa boaziet e Breizh dre vras.

P e n n a d 7

Mat e ve, a gav din, gouestlañ ur penad da gudenn ar yezh e Gwaien e deroù ar c'hantved, a-benn klask diverzout penaos e kilrae ar Vretoned en amzer-se ouzh o stad a Vreizhiz. Evel ma welor, e oa ar stad-se ur stad a zismegañs.

Va digarezet al lenner : distreiñ a rin da afer ar c'hoefoù am eus damvenaget a-ziagent. Hama! An dismegañs a oa stag eveljust ouzh ar c'hoef hag ar gwiskamant broadel dre vras. Pa zeue ur vaouez e tog e-barzh ur stal-genwerzh bennak e e veze hopet evel hen gant ar bugel a oa o c'hervel e vamm : "Mamm, amañ ez eus un itron!" Pa veze ur c'hoef er stal avat ne oa mui nemet ur vaouez. C'hwi 'wel pebezh kemm a oa.

Evelato, trec'h e oa ar boaz da bep tra ha va mamm, da skouer, a zalc'has d'ar c'hoef ken na zivroas da vat da Vro-C'hall goude ar brezel bed kentañ.

Evel maz eo kaer gortoz ne oa nemet brezhoneg e Gwaien hanter-kant vloaz zo. Hogen dija e oa krog ar galleg d'en em silañ e kêr : ar gerent o doa tapet un tamm galleg er skol pe e-lec'h-all a zrailhe al lañgaj-se d'o bugale. Va zad-kozh n'ouie nemet brezhoneg koulz lavaretha va mamm-gozh n'ouie tamm galleg ebet ; evel-se n'oa nemet brezhoneg er gêr. Unan eus va contred avat en doa da gamalad e oa komzet galleg outañ er gêr, galleg saout moarvat, galleg evelato. Gant va eontr an hini eo en devoa desket brezhoneg.

Kement-se a zegas ac'hanon da gomz eus kudenn ar skol. E diwezh ar c'hantved tremenet ne gaved e Gwaien nemet skolioù ar gouarnamant gall. Ur skol gristen evit ar merc'hed a voe savet diwezhat awalc'h ha diwezhatoc'h c'hoazh unan evit ar baotred. Evel-se eta ez eo aet va c'herent da skol ar gouarnamant gall an eil koulz hag egile.

Evel-just, ar skol-se - evel an hini gristen a voe savet a-c'houdevezh - a oa mennet da stourm ouzh ar brezhoneg ha da zistrujañ anezhañ. Ar vistri, koulskoude, a oa eus ar vro hag a ouie yezh ar vro. Ar wech kentañ ma oa degouezhet va mamm d'ar skol e oa bet goulennet hec'h anv outi e galleg ha chomet e oa digor he genoù hep kompren grik er pezh a oa bet lavaret dezhi. Neuze he doa graet ar skolaerez ar memes goulenn e brezhoneg.

Daoust ha va c'herent o deus anavezet ar Simbol ? Ya, eveljust, hogen n'em eus ket klevet anezho o klemm en abeg d'an ensavadur-se. Pa rejont e voe dindan levezon an emsav. C'hoarvezet eo ganin, a gredan, menegiñ un diviz a oa savet etre va zad hag ur c'hamalad dezhañ eus Kleden e ser ar Simbol en o skol : neb a veze paket a ranke chom da skubañ ar c'hlas war-lerc'h ar re all. Mignon va zad a oa bet pell amzer en "Indez-Sina" elec'h en doa anavezet an emsav vietnamat ha kement-se en doa sikouret anezhañ da gompren kudennoù zo. Diskleriñ a rae da e oa reizh ober gant ar simbol adal ma anavezet e oa Gallaoued eus ar Vretoned. D'e soñj ivez ne dalveze ar boan kelenn ar brezhoneg nemet lakaet e ve

e vefe savet ur stad e Breizh un deiz. A-hend-all, a lavare, ne oa d'ober nemet lezel ar brezhoneg da vont da goll. Va zad a oa ali gant an den-se hag ar menoz-se, dre vras, a zo hini tud ar bobl e Breizh diwar-benn ar yezh. Evito n'he deus an divyezhegezh nag ar rannvroelouriezh ster ebet.

Petra oa eta kilemzalc'h ar vugale a oa taolet en un taol en un aergelc'h estren a-grann ? N'oa ket unan a emsaverezh, egiz ma vefed o c'hortoz marteze. Ar wech kentañ ma oa aet va contr Jean-Marie d'ar skol e oa bet kastizet evit ur felladenn ha n'en doa ket graet. Unan avat a oa bet tapet war un dro gantañ a oa bet didamallet dre m'en doa gellet diskleriañ e soñj e galleg. Ha setu petra a zezastume va contr : m'em bije gouezet galleg em bije gellet en em zifenn. An hini a oa tamalletne oa ket ar stad a oa darn eus an natur, koulz lavaret, divrall ha divreutaus evelti, ar gerent ne lavaran ket, ar gerent digalon-se o doa ganet ac'hanoc'h brezhoneger evel ma c'han re all bugale vorn pe voñs.

Deskiñ ar galleg eta a oa stourm evit bevañ, tec'hout diouzh ur reuzeudigezh ha n'oad ket evit kompren e oa ar stad d'hall kiriek dezhi end-eeun (a belec'h ivez o dije gouezet ar geizh-se ?) Ne c'helle ket ar vrezhonegerion eta ivez hag int o c'houzañv kement dre berzh o yezh kompren tamm ebet an divyezhegezh.

E diwezh ar c'hantved tremenet, war-dro ar bloavezhioù 1896-1898, e oa troet ar veleion e Gwaien a-du awalc'h gant ar yezh, evit abeg pe abeg, hanter dre

garantez eviti moarvat, hanter dre ma welent enni ivez un harz ouzh ar menozioù nevez a oa skignet dre ar galleg, un tamm ivez emichañs dre enebiezh ouzh ur stad c'hall c'hall pe kentoc'h ur republik c'hall a oa o kemer an hent fall muioc'h-mui. Mont a raent en tiez eta da c'houlenn digant ar gerent - ar re a oa brezhonegerion evel-just - kas o bugale d'ar c'hatekiz brezhonek. Pergen e felle dezho e ve aet va mamm d'ar c'hatekiz-se. Va mamm avat he doa nac'het. E-touez an abegoù he deus roet din goude-seda ziskleriañ he dibab e oa hemañ : ret e vije bet dezhi mont da zeskiñ he "c'hatarisis" - e-giz-se e veze distaget ar ger e Gwaien - gant maouezed kozh o defe roet dezhi da gentañ kentelioù lenn brezhoneg. Moarvat e rae ar veleion war-eeun war-dro ar c'hatekiz galleg. Krediñ a ran ivez ne felle ket d'am mamm, evel maz eo natur, bezañ sammet hep ezhomm gant ul labour skol ouzhpenn : deskiñ lenn ur yezh ha na servijfe da netra a-hend-all n'he dije gallet ober nemet dre ur garantezvro ha na wele skouer ebet anezhi war he zro. Padal e oa ar brezhoneg yezh ar relijion penn-da-benn en amzer-se. En iliz ne oa nemet brezhoneg koulz lavaret. Er gêr zoken e veze lakaet ar vugale da zibunañ pedennoù hir e brezhoneg gant al lezvamm - marv eo ar vamm-gozh Kere abred tre - ; gouest e oa va mamm d'o dibunañ evel an holl hogen anzav a rae ne gompren ket pep ger enno, pell edo. Petra oa ster ar ger "feiz", da skouer, me fell din komz eus ar ster resis ? E galleg, er c'hontrol, goude un nebeut bloavezhioù skol e intende va mamm mat awalc'h ar yezh lennek ha n'he doa ket mui ezhomm ur yezh lennek all.

A-hend-all e c'helled arvariañ diwar-benn gwirionded ar veleion o tifenn ar yezh. An nebeutañ a c'heller lavarout eo e oa diakuit hag amparfal o doare da ziskouez o "c'harantez" evit ar yezh ken e c'helled en em c'houlenn ha ne oa ket houmañ, hep gouzout dezho marteze, ken natur e oa dezho seurt stumm soñjal, un tu evito da zerc'hel pep hini en e renk (1), ar vourc'hizion-gallegerion diouzh un tu hag ar geizh-brezhonegerion diouzh un tu all. A zo gwashoc'h, an holl enor a yae gant ar galleg. Taolet e oa pled kalz muioc'h ouzh ar c'hallegerion eget ouzh ar vrezhonegerion. Va mamm-gozh a-berzh va zad a oa taeret un drovezh p'he devoa gouezet e oa bet kaset bugale ar c'hatekiz brezhonek d'an ...ospis tra ma chome ar c'hallegerion en iliz. "Ma n'eo ket ur vezh..." emezi. An "ospis" e Gwaien a oa - hag a zo bepred moarvat - koulz hag ar "workhouse" e Breizh-veur ergentaou : repu ar geizh, un doare sailh-blodoù ar gevredigezh ma veze difoaret enni ar re gozh lous na brizedken d'erc'hel er gêr - hag euzhiñ a rae ar vamm-gozh gant ar soñj e c'hellje he mab bezañ kaset di, pa ne ve nemet evit deskiñ katekiz. E gwirionez edo va zad e Kleden d'an ampoent ha du-se, war ar maez, ne oa kudenn ebet o vezañ ma ne oa nemet katekiz brezhonek.

Kounañ a ran avat e save breud a-wechoù etre va c'herent diwar-benn kudenn ar relijion hag e lavare va mamm d'am zad n'en doa ket kompren mat biskoazh dalc'h ar gravez kristen dre m'en doa desket a gatekiz e

(1) An dro-spered-se e gwirionez a gaver bepred en holl renkadoù hag is-renkadoù ar gevredigezh hag a c'hell bezañ diskleriet e meur a zoare.

Brezhoneg. N'on ket evit barn hag e gwir pe e gaoz e oa graet an tamaal-se. Koulskoude on techet awalc'h da grediñ ne oa ket fur deskiñ un danvez ken amjestr hag ar relijion en ur yezh a oa dizesket d'ar vugale. Kentelioù war ar yezh a oa da reiñ da gentañ abarzh kregiñ da gelenn ar relijion d'ar vugale. Kement-se avat a c'houlenne re a faltazi ha re a boan digant renerion an Iliz e Breizh d'ar mare-se ha gwell e oa ganto, evel boaz, hentoù aes ha plaen ar brizh-voazamant.

En un doare eta ne c'heller ket kavout abeg hiziv en dud a iliz evit bezañ taolet ar yezh d'ar blodoù : an trefoedajoù a raent bezhoneg anezho ne oant ket mui gouest abaoe pell dija da glotañ gant ezhommoù ur bobl diorreet. Ar pezh a c'heller rebech outo avat eo bezañ chomet hep klask a-zevri pourchas da bobl Vreizh ar benveg a zerec ouzh hec'h ezhommoù sperelel koulz hag ouzh hec'h ezhommoù all. Galloudus dreist evel ma oa an Iliz e deroù ar c'hantved-mañ el ledenez-mañ ne oa ket an embregadur-se en tu-hont d'he nerzh. Ar "Bleun-Brug" barnet ganto d'an dic'halloud n'eo bet biskoazh nemet un alibi pilpouzion, aotreet ha ne oa ken, pe, kentoc'h, gouzañvet ganto en abeg da n'ouzer peseurt morc'hed. Ma vije bet eeun ha gwirion ar re a oa e penn an eskoptioù e Breizh o defe anzavet pellzo ne c'helle ket ar yezh bezañ saveteet hep ma vefe adsavet a-ziaroek ar vro hag ar stad. Re aes e ankounac'ha an dud a iliz o deus dleadou politikel dre m'o deus levezon er gevredigezh. Neb na harz ket ouzh galloud ar mac'homer a harp anezhañ dre e ziegi end-eeun ha seul c'hrevusoc'h eo e gablusted maz eo bra-

soc'h e zelanvad.

Kement-se eveljust a c'hell bezañ diskleriet, ma ne c'hell ket bezañ digarezet. Ur framm amstadel ez eo an Iliz. Fellout a ra din lavarout ez eo loddek, mennet pe get, e galloud ar stad a ro goudor dezhi. O vezañ maz eo gall ar stad e Breizh ne c'hell an Iliz nemet bezañ gall. He renerion e Breizh a zo Gallaoued, pe a ouenn pe a spered, ne vern pezh a gontont a-hend-all hag eveljust o deus stummet kloer diouzh o skouer. Spered dañvadel Bretoned rummadoù mezhiek ar c'hantved-mañ a zo kiriek d'ar peurrest.

Ar relijion hec'h unan a zo er-maez eus eus an afer. Ken diboell e vefe bezañ a-enep d'an Iliz dre dre vras war zigarez ez eo gall ha bezañ a-enep d'ar stad dre vras ivez dre maz eo bet gall en hor bro (meur a emsaver koulskoude a zo deuet da vezañ beligasaour war an digarez-se). Hogen sklaer eo e tegouezho d'an emsaverion gatolik ar garg a neveziñ an Iliz adal ma soñjont ez eo ar gravez un dra vat.

Kas a c'hellfen pelloc'h ar prederiadennou-mañ. Re bell ez afen ganti avat ha gwell eo ganin o c'hlozañ amañ. War un tu all e rin an evezhiadennoù-mañ da heul. Kavout a ra din ez eo bet kiriek da ziskar ar gravez e Breizh, ouzhpenn emdroadur ar bed arnevez, diouer ur yezh sperelel ha bredel he defe klotet gant an emdroadur-se. Ne vern penaos, n'eo ket bet ar galleg nepred - lakaet o defe ar Vretoned desket anezhañ ervat diouzh-tu - stummet diouzh ezhommoù ar brederouriezh nag ar spe-redelezh.

Aes eo kompren ivez ez eo devoùoù a seurt gant ar re emañ o paouez dezrevell o deus va fel-laet diouzhtu diouzh an divyezhegezh hag ar rannvroelou-riezh ur wech ma teuis da bleidiñ gant an emsav. Ar bobl, e Breizh, anat e oa an dra-se din, a zibabo etre ar brezhoneg hag ar galleg, etre Breizh ha Bro-C'hall met biken ne zibabo an daou war un dro, hag, a-hend-all, seurt troienn n'he defe e gwirionez ster ebet.

Pe n n a d 8

Roet ez eus bet kalz pouez d'ar werinoniez en hon amzer. E peseurt stad eta edo ar "folklor" e Gwaien e deroù ar c'hantved-mañ ? War a lavare va mamm din ez eus bet gwechall gozh korolloù breizhek e Gwaien, dreist-holl da geñver ar festoù eured. Neuze avat e veze kerc'het ar viniacuerion eus Plozeved, e rannvro ar Bigouden. C'hoarvezet eo gant va zad-kozh ivez dañsal ar gavotenn gant Bigouden - an dra-se am eus klevet gantañ - hogen moarvat n'oa ket ur folklorour mat anezhañ rak diskouez a rae bezañ prizet muic'h ar bigouden eget ar gavotenn hec'h unan. A-hend-all, buan awalc'h e voe dilezet ar biniou evit an akordeoñs hag epad yaouankiz va c'herent, e Gwaien, e oa deuet hemañ da vezañ benveg-sonerezh poblek ar c'horn-bro.

Hag ar c'hontadennoù pobl, ar mojennoù ha me 'oar-me ? Klevet o deus va c'herent kontaden-

noù ha mojennoù seurt se en o yaouankiz. Va mamm a yae da selaou ur wrac'h kozh e lein ar Gêr-vihan : karrig an ankoù hag eñ sachet gant roñsed a zifaragoelle gant stroñs ha reuz betek ar porzh ; an anaon a zeue endro hag a zañse ar jabadav en tiez dilezet ; an diaoul en em ziskoueze d'an dud egiz ur maeziad bennak hag a veze anavezet diouzh e garnoù. Va zad-kozh a-berzh va zad a ouie koñchennoù o tennañ d'an destenn-se, a gredan, - n'ouzon ket ha krediñ a rae enno pe get - ; va zad avat en devoa an dispriz brasañ evit sorbiennoù seurt-mañ ha va mamm, eveljust, ne roe pouez ebet dezho.

Va c'herent n'anavezent ket kennebeut gwerz na son ebet ha m'o deus klevet kanerion n'o deus ket meneget an dra-se din biskoazh. Dre vras eta, evit ar rummad a zo deuet d'an oad gour war-dro ar brezel bed kentañ e oa ar folklor un danvez tost marv, da vihanañ, a soñj din awalc'h, e Gwaien hag er C'hab elec'h n'eus ket bet kalz korolloù nepred, evel e Bro-Leon.

Anzav a ran a-hend-all n'on ket bet dedennet kalz biskoazh gant ar folklor, gizioù, korolloù ha lennegezh poblek. Ar werinonourion vrogar zoken e Breizh n'o deus ket meizet, war a hañval, e chom ar folklor war dachenn an diduellerezh (ha rak-se, da skouer, ez eo bet distroadet ken aes ar biniou gant an akordeoñs)

(1) Ar c'hontadennoù ivez, koulz hag ar gwerzioù pe ar sonioù a vane rez an diduellerezh ha n'eus abeg ebet da

 (1) Ar c'helc'hioù, gant o dañsoù, o biniou, bombard h.a. n'o deus netra da welout gant ar folklor. Diwanet int diouzh an emsav, evel ar festoù-noz evit darn.

ober anezho un doare relijion, evel ma vefe techet dres darn da ober.

Me ' oar ez eus danvez kozh tre e kontadennoù pobl zo hogen ledet eo an testennoù anezho en Europa a-bezh ha pelloc'h ; etrevroadel int koulz lavaret; n'int ket breizhat na keltiek rik zoken. Perak, d'ar c'houlz -se o lakaat e diazez hor broadelezh ?

Ar pouez a roer d'ar werinoniezh, e-touez ar vroadelourion zoken, a zeu e gwirionez eus amzer ar romantelezh. Graet ez eus bet eus ar bobl, eus ar werin, un doare boud marzhek - gant tud a-hend-all ha n'o defe roet gwir politikel ebet dezhi. Roet ez eus bet korf d'un "Ijin ar bobl", hollek ha dizanv. Ur c'hemmesk a vezadoù berrboell a zo e diazez ar vrizh-kredenn-mañ. Goude ma n'eo ket anavezet bepred anvioù an aozerion e chom ur skrid pe un oberenn bennak labour un den hag an den-se dizesk ha diijin alies, hanter gallekaet peurvuiañ : netra ker-señsoc'h er c'heñver-se eget lenn^{an} aridennadoù gwerzennoù embannet ebarzh ar rummad-skridoù "Gwerin" a dennfe da ziskouez a-benn ar fin e oa krog gallekadur ar speredoù e Breizh d'ober e reuz arak ma vefe diazezet zoken skolioù argouarnamant gall el Ledenez-mañ.

Kervarker moarvat a zo kiriek d'ar gwarriadur-mañ. E zigareziñ a rankomp. Klasket en deus an teñ-zorioù a rae diouer d'eo vro e-touez ar gwizadoù kevnid hep gellout anzav n'en doa diskoachet a-benn ar fin nemet gwizadoù kevnid end-eeun. Talvoudigezh wirion "Barzhaz Breizh", eus personelezh dedennus ha ijin Kervarker eo e teu ha n'eo ket eus Ijin ar bobl a-hervez. Rak ur sevenadur a zo savet

gant un nebeut personelezhioù dieub a gav krog ar bobl hag a oar imboudañ anezhi, koulz lavaret, d'he lakaat da deurl frouezh.

Kudenn "vBarzhaz Breizh" - istorelezh ar pezhioù embannet gant Kervarker - a zo anezhi ur fals-kudenn e gwirionez. Perak mennout o defe Bretoned ar werin dalc'het soñj eus istor o bro ? E Bro-C'hall zoken n'o deus kroget tud ar bobl da gemer skiant eus o istor, pe kentoc'h eus istor ar stad he doa o stummet nemet en deiz maz eus bet savet skolioù gant ar stad-se end-eeun evithen deskiñ dezho. Kelennadurezh an istor a zo an tu nemetañ d'ur bobl pe d'ur gevredigezh bennak - evel an Iliz - da gemer skiant eus he fersonelezh hag eus he zonkadur.

Komz a rin bremañ eus un danvez a zo damstag ouzh an hini emañ o paouez merat, hini ar politikerezh e Gwaien e deroù ar c'hantved-mañ.

Abred awalc'h, a gav din, ez eo bet gonezet un darn-vat eus Gwaieniz da venozioù ar gostezenn gleiz c'hall. Natur awalc'h eo bet an emdroadur-se pa ouzer pebezh tavantegezh a oa o ren e-touez ar vartoloded dizouar, martoloded o foch bara am eus meneget hag a yae d'ober ar pep brasañ eus poblañs ar porzh. Kment-se avat n'eo c'hoarvezet emichañs nemet adal ar rummad a zeuas war-lerc'h va zad-kozh hag a voe ganet etre 1885 ha 1900, dindan levezon ar skolaerion stummet gant ar Republik c'hall. Padal, da vare an Disparti etre an Iliz hag ar stad c'hall e oa c'hoazh an darn-vuiañ eus Gwaieniz a-du gant an Iliz ha deuet e oant da zifenn ar veleion da geñver

an "Inventaire". Diwar neuze e oa aet war zonzat ar foz etre Plouhinegiz ha Kaperion an Hanternoz a oa chomet "gwenn". Seurt c'hoarvezadoù hag emdroadurioù politikel -relijjiel a vefe da studiañ dre ar munud gant an emsav-erion ma fell dezho tizhout un deiz diazezañ ur gevredigezh unvan e Breizh, ar muiañ ma vo tu (1).

Ne oa hengoun ebet a chouanterezh e Gwaien e deroù ar c'hantved, din da c'houzout ha n'on ket evit lavarout ha bez ez eus bet er c'horn-se gwech-all un emsav chouant pe get. Dav eo din merkañ n'eus forzh penaos ned eo ket ar chouanterezh breizhat rik nag a orin nag a spered (broadeloc'h e vefe bet en ur stumm emsavadeg ar Bonedoù ruz, da nebeutañ "envroeloc'h") Gant eo bet emsav ar chouanterezh - lakaat a ran a-ziforc'h arnod Ar Roueri gant an "Association bretonne" - er-maez eus Breizh ; deuet eo e Breizh dre ar Reter ha Gallaoued a zo bet evit darn er penn anezhañ ; ar renerion vreizhat o unan o doa kollet pep spered emrengar, ha Kadoudal da gentañ penn (2).

Bezot pe vezot, epad va bugaleerezh ha va yaouankiz e oa ar vouezh endro din a-enep d'ar Roue, a-du gant ar Republik. Moarvat eo bet kiriek da "republikanelezh" va c'herent levezon ar skolaerion c'hall. Evit un abeg all, a gav din, n'eo ket bet techet va c'herent da glemm eus ar gouarnerezh gall a oa o ren d'

(1) Perak ivez ez eo troet ruz ar Menez ha pastelloù-bro eus Kernev-Uhel war-dro an hevelep mare, da skouer ?
(2) Ne lavaran ket ne oa ket reizh ha natur stourm ouzh mac'homerezh ar Republikaned c'hall a oa gwasoc'h mistri eget ar ruaned hogen anienel rik eo bet kilstourm ar Vretoned, hep dremmwel ebet.

Lenn war an divoud-se ar pennad embannet war ar ge-laouenn "EMSAV", niv. 5, miz Mae 1967 : "Ster hon Istor".

an ampoent : aet e oa stad ar werin war wellaat un tammig en abeg d'ar skoliadurezh nevez diazezet hag a zo bet degemeret gant gred er c'horn-se eus Breizh da vihanañ : un tu e oa an deskadurezh da dec'hout diouzh ur vuhez reuzeudik ha dispi, koulz lavaret. Moarvat e oa ar skoliadurezh ur c'hoarvezad hollek en Europa penn-da-benn d'ar c'houlz-se e Kembre koulz hag en Iwerzhon, a oa o vevañ dindan ur rouanez saoz, pe e Bro-Alamagn a oa renet gant un impalaer hogen evit kalz Bretoned ez eo bet ar Republik heñvelster ouzh deskadurezh ha kement-se a ziskleir penaos o deus gallet en em stagañ ouzh ur stad estren, dres evel m'o deus graet kalz Kembreiz hag Iwerzhoniz d'an hevelep mare.

Un abeg all a zo choazh ouzhpenn, a gredan awalc'h. Bez ez eus bet mui pe vui er c'horn-se eus Kernev da vihanañ un hengoun enep-noblañs (a-hend-all, emsavadeg ar Bonedoù ruz e Kernev, a c'houlenne an ingalder hag a dage dreistwirioù an noblañsoù er seitekvet kantved). Pezhen diskouez eo ur goñchenn displeget gant va zad a-zivout un noblañs eus ar C'hab, e parrez Priveilh, a gav din, o chom e "Lezurieg" (?) a oa taolenet evel un den kriz meurbet, o leuskel tennoù fuzuilh war e verourion, egiz pa vijent bet konikled. Daoust hag un diazez istorek a zo d'ar vrozenn-se, n'oufen lavarout. Evidon-me avat e tiskoueze hepken un enebiezh ouzh renkad an noblañsoù dre vras. Seurt enebiezh a-hend-all a adkaver ebarzh kontadennoù pobl zo a vefe da studiañ er c'heñver-se.

An iskisañ tra eo n'em eus .ket klevet

anv eus noblañs ebet er C'hab gant va c'herent. Hervez lod, va mamm en o zouez, e vefe divroet noblañsoù ar C'hab da goulz an dispac'h gall ha ne vefent ket distroet a-c'houdevezh. Ne vern penaos, n'eus ket kestell bras er c'horn-bro-se. Maz eus bet noblañsoù eno eta eo gwir-heñvel awalc'h e oant paour evel ar peurrest eus ar boblañs. Ar re anezho a felle dezho ober berzh un tammig a ranke kuitaat un taolead a oa pelloc'h diouzh Roazhon ha Paris eget ar C'hamchatka hiziv. Lod all a zo bet teuzet er werin marteze a-benn ar fin.

An'noblañsoù" a oa o vevañ e Gwaien e deroù ar c'hantved - an "de l'Escluse" (?) da skouer o deus savet kestell Lokeran, perc'henmet bremañ gant kêr, ha Keristumm ma ne fazian ket - ne oant tamm ebet eus ar vro. Evel un nebeut bourc'hizion all deuet d'ober o annez du-mañ. e klaskent er c'horn-bro dornoberourion marc'had-mat ha sentus, egiz en holl vroioù trevadennet. Un tammig kevala a oa bet degaset ganto ha savet e oa bet un nebeut greantioù elec'h e veze implijet ar merc'hed, na petra 'ta, dre ma c'helled o goprañ evit ur priz dister tre. Ebarzh unan eus ar greantioù e oa aozet tokoù plu. Merc'hed eo ivez a oa implijet er "friturioù" a oa kalz stankoc'h eget bremañ. Dre maz eas ar sardin war rouesaat e voe ret o serriñ an eil war-lerc'h egile. Setu maz eas an divroañ war washaat ivez a-c'houde ar mare-se.

/ P e n n a d 9 /

Garv e voe ar vuhez evit va zad-kozh a-berzh va mamm ivez. Diwar an nav bugel en devoe e kollas tri pa oant yaouank awalc'h. Unan anezho a dapas an danienn-skevent goude bezañ aet da gerc'hat buzhug evit pesketa. Ne oa anezhañ nemet ur c'hrennard pa varvas. Un eil a voe lazhet war ar "Somme" epad ar brezel bed kentañ: ne voe ket adkavet e gorf. Yvon e oa e anv. Un trede, Laurent, a glañvas war-lerc'h ar brezel hag a varvas diwar an dorzhellegezh. Meneget em eus endev ur voereb, Louise hec'h anv, a dapas ar poliomyelitis da bevar bloaz ben-nak hag a chomas war he gwele betek fin he buhez e 1939. En em zeskiñ he doa graet hec'h unan ; gouest e oa da lenn galleg. D'en em vevañ e rae brouderezh.

Teir merc'h all en doa bet va zad-kozh. An teir-se, va mamm en o zouez, a rankas divroañ da Vro-C'hall. Unan anezho, Rose hec'h anv, va maeronez, a zimezas d'ur c'homunour, Killivig, eus Gwaien (c'hor hemañ avat a oa leanez) ; un temz-spered a zispacher a oa da hemañ moarvat hag en amzer-se e oa ar strollad komunour ar strollad dispac'hel nemetañ e Breizh.

Marvet e oa pried kentañ va zad-kozh diwar an eizhvet gwilioud. Va zad-kozh a addimezas neuze gant ur gapenn eus Priveilh, Thérèse Riou hec'h anv. Va mamm a voe savet ganti. Ne oa ket ur vaouez fall, a gredan, hag ober a reas mat war-dro an tiad. Evelato, ul lezvamm n'eo ket ur vamm an hini eo ha bep an amzer e save bec'h etrezi hag al lezvugale. Unan eus va moerebed, Rose,

a zalc'he penn ouzh ar vamm-gozh ha c'hoarvezout a rae ganti zoken, aet droug da vat enni, kunujañ anezhi oc'h ober anezhi 'Kapenn vreïn' ! Moarvat n'emañ ket Eskibien er C'hab. Egiz ma weler, bev tre e oa ar spered parrez en amzer-se.

Ar vamm-gozh Thérèse he devoe ur mab, Henri e anv, a zeuas un tamm war-lerc'h ar re all. Evelato e voe cadet awalc'h e 1914 evit bezañ kaset d'ar brezel gant ar pennadurezhioù gall. Fuzuilher-martolod e voe, hag e Diksmuide en em gannas. War-lerc'h ar brezel e tivroas da Vro-C'hall d'e dro hag en em staliañ a reas e Paris a-benn ar fin. P'en anavezis e oa deuet da gemer menozioù ar gostezenn gleiz c'hall ; sokialour e oa ; ne oa ket komunour avat.

Peogwir emañ o komz eus ar brezel bed kentañ eo ret din menegiñ e voe soudardet va contr Jean-Marie evitañ da vezañ cadet awalc'h ha bugale dezhañ pa darzhas ar brezel. Kaset e voe d'an talbenn, war al linennoù kentañ, gant ar re yaouankañ. Hervez a lavaras din e teue a-benn ar pennadurezhioù gall da lakaat brezhonegerion ha n'ouient ket paot a c'halleg da sinañ papereñoù enouestlañ hep ma oufent re vat pezh a raent e gwirionez. Goude-se n'oa mui nemet o c'has d'al lazhadeg. Ma! En amzer-se e oa mrc'had mat ar c'hig kristen hag ar C'hallaoued ne oant ket figus : du pe wenn, ingal oa dezho gant ma vefe tu da voueta o benveg-brezel.

Va contr Jean-Marie ne oa ket brogarour gall (brogarour breizhat ne oa ket kennebeut). Pa oa deuet va contr. Yvon d'ar gêr evit e berrmision diwezhañ

e ouie mat ne vije ket distroet diouzh an argadadeg a oa da vezañ kaset da benn un nebeut devezhioù war-lerc'h. Ha lavarout a rae va contr Jean-Marie en defe harpet e vreur d'en em guzhat m'en defe bet an disterañ chañs d'en em dennañ evel-se. Met dic'hallus e oa. Da zibab a oa hepken etre ur marv enorus hag ur marv dizenor. En amzer-se, savet ha ma oan bet en un aergelc'h impalaergar gall e oan bet feuket hag anoazet gant ar c'homzoù-se. Hiziv avat em eus roet ur ster dezho : diskouez a raent hepken e oa sammet ar stad c'hall e spered ar Vretoned evel ur galloud diavez estren outo, na gemerent gwir perzh ebet ennañ, a rankent degemer evel urzh tregorgoniell an Natur hec'h unan.

Peogwir emañ ganti e notin amañ e voe va contr Jean-Marie an hini nemetañ a chomas e Gwaien da labourat war vicher e dad. E gwirionez en defe karet chom er skol evel meur a hini all, va zad da skouer. Deuet e oa ar mestr-skol da gavout an tad-kozh da c'houlenñ digantañ lezel e vab da vont war ar studi. Hogen re baour e oad evit dioueriñ ar sikour a c'helle degas labour ar mab henañ d'an tiegezh. Me 'oar e kaver Bretoned o deus e-leizh a anaoudegezh ouzh ar stad c'hall dre m'he deus aotreet houmañ dezho sevel betek uhelañ derez ar gevredigezh dre hent ar Skol-veur. Hogen n'o deus gallet ober, gwechall da vihanañ nemet dre m'o doa o zud un tamm peadra ; hag ouzhpenn, kement-se ne zle hol lakaat da ankounac'haat ar c'hantmiliadoù a Vretoned o deus ranket mont d'en em werzhañ er gwashañ degouezhioù er broioù krec'h dre ma oa stag o bro ouzh ur stad a gavo he mad bepred, ne vern peseurt gouarne-

rezh bennak he defe, a-gleiz pe a-zehoù, o
terc'hel en he faourentez hag hec'h isdiordreadur
ur "rannvro" a vo da viken eviti ur samm armerzhel hep-
muiken.

Va eontr eta^a yeas d'ar mor evel e dad.
Ar vag kentañ en devoe savet he devoa da anv ar "Philan-
thrope", peadra da lakaat ar vartoloded d'ober goulennoù
ha marvailhoù e-leizh, hervez a lavare va eontr e unan.
En anv-se e c'heller damwelout daou ratozh, a soñj din :
hini diskouez an doujañs en devoa bepred evit an "Deska-
durezh" n'en doa ket gallet tizhout ; hag hini embann un
tamm ar menozioù en devoa dastumet o taremprediñ e vistri
a-ziagent ; an holl e Gwaien a oa bet levezonet mui pe
vui gant "radikalouriezh" ar skolaerion stummet en "Ecole
Normale". Diwezhatoc'h e teuas va eontr da vezañ dise-
blant ouzh ar politikerezh hag e vag ziwezhañ a zougen
an anv a "Jeanne", hepmuiken, hini e verc'h.

A-c'houdevezh ne voe mui o chom e Gwa-
ien nemet ur c'henderv kompez, a voe ganet arnok ar brezel
bed kentañ, hag a chomas emzivad e 1918. Div verc'h en
deus bet hogen n'eo ket sur e chomint e Kernev pe zoken
e Breizh. Evel-se eta ez eo aet da get e Gwaien gouenn
va zadoù kozh o devoa bet koulskoude c'hwec'h ha nav
bugel. An holl avat a zo divroet hag a zo bet kollet e
Bro-C'hall.

Pennad 10

Va zad a voe ganet e Kleden e miz
Gwengolo 1890. Er vourc'h-se end-eeun e tremenas e vlo-
avezhioù kentañ. Un eñvor dudies en devoa dalc'het eus
e vugaleerezh : mignet e oa gant e vamm a-hervez, ha
kafe laezh en deveze diganti. Redek a rae ar maezioù o
c'hoari gant e gamaladed. Egiz-se betek 11-12. Neuze e
tremenas an"testeni-studi". Evel ma ne c'helle ket chom
er skol e rankas gonit e damm greun diouzhtu. Eñ ivez a
yeas d'ar mor, da gentañ gant e dad war ar memes bag.
Goude-se war ur vag all. Kontet en deus din e oa aet be-
tek ar Groazig, e rannvro an Naoned, da glask fred gant
ur c'hamalad hogen tro-wenn o devoa graet eno. Dav e oa
bet dezho neuze distreiñ war o zroad betek Gwaien rak
n'o devoa gwenneg toull ebet. Kousket a raent er mereur-
ioù war ar maez. Treuzet o devoa penn-da-benn rannvro
Erec'h ha tro o devoa bet da verzout pegen disheñvel e
oa rannyezh Wened diouzh o hini. A-benn ar fin e oant
degouezhet da Waien da sul diwezhañ miz Eost, da zeiz ar
pardon. A ziwar laezhoù Plouhineg e arvestent ouzh ar
c'haeoù sklerijennet gant ar c'hezeg-koad ha stalioù pa-
otred an termaji, ken skuizh avat ma oant manet azezet
war ur bern mein hep gellout ober ur c'hammaed ouzhpenn
war-du ar gouel o gortoze.

Micherioù all estreget hini vartolod
a reas va zad pa oa krennard : darbarer e voe, e Gwaien
bepred. Neuze, egiz an holl, egiz e vreur, e klaskas mont
da vartolod e merdeadurezh-vrezel ar stad c'hall da 18

vloaz e vel e vreur, evel nouspet re all en e gorn-bro ; ne c'helle ken kenderc'hel gant ur vicher diasur, na zegase da c'hopr nemet peadra da chom hep mervel gant an naon, hag a oa dañjerus ouzhpenn ; bresk e oa ar bigi pesketa arack ar brezel bed kentañ. Va mamm a lavare ahend-all n'he dije kemeret da briz ebet ur martolod da bried ha kalz merc'hed yaouank a oa heñvel outi e Gwaien.

Va zad evelato ne c'hellas ket dont tre er verdeadurezh. Distaolet e voe e c'houlenn-emoues-tlañ er morlu dre m'en devoa ul lagad un tammig gwanoc'h eget egile. Evel-se e troas war-du an tirlu gall. Lakaat a reas e anv e 1908 ha kaet e voe da Lunéville e reter Bro-C'hall, war an harzoù.

Un eñvor fall awalc'h a zalc'has va zad eus e vloavezhioù kentañ el lu gall. N'en doa nemet triwec'h vloaz pa oa degouezhet du-hont en ur gêr estren, pell diouzh Breizh, hep kar na par endro dezhañ. Allies em eus e glevet o komz eus an amzervezh poanius en devoa aprouet d'ar mare-se. Ankounac'haet en devoa tost da vat an tamm galleg en devoa desket er skol hag en e brezeg e veske an div yezh, ma rae goap outañ an holl C'hallaoued a oa war e dro. Dav e oa bet dezhañ deskiñ marc'hegezh - ha zoken ober troioù ouesk a bep seurt war varc'h - hag, egiz ma lavare, n'en doa gwelet marc'h ebet biskoazh en e vuhez. Ar gwashañ zo eo ne oa ket deuet mat d'e gamaladed a oa oc'h ober o c'hoñje war un dro gantañ, ha kement-se evit meur a abeg : n'ouie ket galleg koulz lavaret hag un emouestlad a oa anezhañ. Setu e oant bepred ouzh e heskinañ e pep doare, oc'h ober

anezhañ 'sàle Breton' ha 'sale vendu', o tiskanañ dezhañ pa zeue tre en hunva 'A la nigous-gous-gous, les pommes de terre pour les cochons, les épluchures pour les Bretons', egiz ma oa ar c'hiz e-touez Gallaoued an amzerse. Ma oa aet va zad skuizh brein gant ar vil e oa graet dezhañ : daet en doa unan eus e heskinerion ; ur paotr kreñv hag hardizh a oa anezhañ ; egile en doa bet lamm ha paket ar roustad. Diwar neuze, a daolioù dorn, en doa gonezet doujañs ar C'hallaoued a oa war e dro ha paouezet e oa ar re-mañ a hegal anezhañ.

Va zad ne chomas ket gwall bell e Lunéville. Fellout a rae dezhañ tapout un nebeut galoñsoù ha gwellaat e stad. Heuliañ a reas eta skol an isofisourion ha goulenn a reas mont d'ar broioù tramor. Kaset e voe eta e 1911 d'ober brezel e bro Varoko e-lec'h e oa reuz ha freuz d'an ampoent ; darn eus ar meuriadoù a nac'hhe sujañ d'ar roue en doa degemeret "gwarez" Bro-C'hall. A-enep d'ar re-se en devoe va zad da stourm. Kalet e voe ar brezeladennoù-se - dreist-holl an hini gaset da benn a-benn tizhout Fez, dindan urzhioù ar jeneral Gouraud, a gav din : ur gerzhadeg hir a-dreuz ur vro enebour, hep tamm pourvez ebet koulz lavaret, nemet un nebeut busku, ma oa ar soudarded tost da zizeriañ gant an disvoued. Kalz o devoe ar soudarded da c'houzañv diouzh ar yenijenn, pezh a seblant souezhusen ur vro greizdouarek, hogen e-kreiz ar goañv edod hag en ur rannvro veneziek. Kruz e oa an enebour, gouest da seveniñ euzhusterioù a seurt gant ar re a vez sevenet gant tud ar gouennoù-se ha n'on ket evit dezrevell amañ, herr ha dispont ivez, ha

c'hoarvezout a reas gant va zad rankout tennañ warnañ gant e ganolioù war-hed gwel.

Kalz a vorianed a oa ivez e lu ar C'hallaoued ; va zad a rae anezho "Senegaliz" hepmuiken. N'oant ket gouest tre avat da herzel kalz ouzh an dis- voued koulz hag ar yenijenn. Pa oant re skuizh en em le- zent da gouezhañ war ribl an hent, hep klask ober ur stri- vadenn ouzhpenn, en ur lavarout e galleg "Moi comme cha- meau!" Ha chom a raent da vervel eno evel al loened-samm -se end-eeun a yae war o daoulin pa oant diviet hag a nac'he a-grenn sevel endro goude-se.

C'hwec'h vloaz eo chomet va zad e Ma- roko, betek ar bloavezh 1916. Er c'hanolierzh edo, evel m'em eus lavaret. Gonit a reas un toullad medalennoù, c'hwec'h pe eizh, n'em eus ket mui soñj mat pere, en o zouez medalennoù marokat a oa bet lodennet dezhañ gant parchoù kaer en arabeg ha bennozh-Doue roue Marokiz da vezañ e sikouret da unvaniñ e vro, dindan gwarez madele- zhus ha dic'hoantek a-grenn Bro-C'hall eveljust (1) Va zad a soñje dezhañ en devoa labouret evit astenn impa- laeriezh Vro-C'hall en Afrika. Maroko a oa tonket dezhi, war a soñje, da zont da vezañ ur rannvro c'hall evel Breizh end-eeun (lakaat a rae an div vro war ar memes pazenn). M'en dije bevet pelloc'h en defe meizet n'en doa ket labouret evit roue Prus, moarvat, evit hini Ma- roko ne lavaran ket.

E 1916 e tistroas va zad da Europa.

(1) Me ' gred e oa bet graet marc'heger eus an urzh "Mechalemlawit" (?), ma ne fazian ket

Neuze eo e timezas. Anavezout a rae va mamm abaoe un ne- heut bloavezhioù dija ha skrivañ a rae dezhi eus Maroko. Ul luc'hskeudenn eus an eured a zo bet miret e-lec'h e weler ar vamm-gozh gant koef kozh ar C'hab. Va mamm a zou- ge koef ha dilhad merc'hed Gwaien.

D'ar c'houlz-se e oa va zad "maréchal des logis fourrier", da lavarout eo "skrivagner hag e gwi- rionez e oa gouest da "heskrivañ" e lizherennoù ront ka- er, gant pluennoù dir, ur vicher hag a zo aet da get a- grenn hiziv an deiz, a gredan.

Ar brezel avat ne oa ket echu hogen va zad ne voe ket kaset diouzhtu d'an talbenn. Epad ur pen- nad e voe gourdonour en Oriant, er skol soudarded. Neuz- e eo e c'hoarvezas gantañ terriñ e vrec'h o tiskouez pe- naos bannañ ur c'hreunadenn. Rankout a reas eta chom er gêr adarre. A-benn ar fin ned eas d'ar brezel nemet en nevez-amzer 1918, pa oa ar brezel o vont d'echuiñ.

War-lerc'h ar brezel e tistroas va zad d'an Oriant. E-keit-se e chome va mamm bepred e Gwai- en (start e oa kavout ul lojeiz goude ar brezel kentañ evel goude an eil ha diannañ a reas meur a wech o tont eus ar "Menez" d'ar ru Doub). Da gantañ e teue va zad en- dro bep sizhun, a-wechoù war varc'h-houarn, daoust maz eus ur frapad hent etre an Oriant ha Gwaien. A-benn ar fin ez eas va mamm d'ober hec'h annez en Oriant, napell diouzh ar c'hazarn elec'h e laboure va zad a dremene bem- dez war varc'h dirak he frenestr. E 1922 avat e voe ka- set va zad d'ar Reter nesañ, da Siria, al "Levant" egiz ma lavare, e Beirout, hag eno e chomas epad triwec'h miz.

N'oa ket fellet d'am mamm e heuliañ keit all ; distroet e oa da Waïen ; eno e voen ganet e 1923. Div c'hoar hag ur breur marvet nebeut amzer war-lerc'h e c'hanedigezha oa deuet d'ar bed araozon.

P'en em gavas va zad er gêr endro n' houlass ken menel en arme c'hall. Abaoe c'hwezek vloaz e oa soudard hag aet e oa skuizh gant ar vicher. A-hend-all en doa tizhet ar pal en doa merket dezhañ : ul leve dregementat hag un "implij miret" en devoa ar gwir da gaout. Setu penaos e teuas va zad da vezañ ur c'hargiad bihan gall. Va mamm a c'helle bezañ laouen : da vihanañ n'he dije ket anavezet buhez diasur gwreg ur martolod.

E-touez an"implijoù miret" e oa hini "skluzier" (evel merc'hed Nominoe Oe n'he doa ket va mamm kalz a istim evit ar c'halvedigezh a archer, eviti da vezañ koulskoude ur c'halvedigezh dereat kenañ). Va zad eta a c'houlennas ur plas ha kaset e voe da gCambrai, en hanternoz Bro-C'hall. Moarvat, mont keit all d'an harlu ne blije ket nemeur d'am mamm ha n'he doa ket kuitaet Gwaien biskoazh c'hoazh koulz lavaret. Gant ar spi da c'hellout tostaat ouzh Breizh a-c'houdevezh dre dapout ur plas en ur burev en em enrollas va zad, diwar atiz e bried, en ur skol dre lizher bennak a-benn gwellaat e anaoudegezh eus ar galleg skrivet, reizhskrivadur ha yezhadur dreist-holl, en devoa disoñjet mui pe vui abaoe amzer ar skol, m'en doa gouezet biskoazh rak treut awalc'h e oa e dammig galleg pa oa erru d'an arme c'hall. Hogen, ne dennas ket servij eus an dra-se : staliet e oa va zad a-benn neuze en o zi nevez ; bugale, va breur ha va c'hoar

yaouañ, Yann ha Nouela, a oa deuet da greskiñ an tiegezh; setu, n'o doa ken c'hoant ebet da ziannezañ ha digêriañ adarre.

* E ser ar vorianed am eus meneget er pennad-mañ eo ret din merkañ ne oant ket nemeur evit herzel ouzh ar sec'hed evito da vezañ genidik eus broioù tomm, hervez va zad bepred. Epañ a raent dour forzh pegement p'o deveze tro ha ken aes ha tra e tapent red-kof gwadek ha kleñvedoù all.

P e n n a d 11

Cambrai a oa d'ar c'houlz-se ur gêr a dregont mil a dud, a gav din. Ur gêr gozh istorel a zo anezhi, bet staget diwezhat awalc'h ouzh ar stad c'hall, er seitekvet kantved, war-dro 1660, ma ne fazian ket, e-kerzh brezelioù impalaerel ar roue gall Loeiz XIV. Aziagent e oa Cambrai darn eus an izelvroioù gall a oa deuet dindan beli an impalaeriezh spagnat abaoe amzer Charlez ar Pempvet, a gav din. Paeroned Cambrai a oa daou"vorian", a weled an delwenn anezho e lein an ti-kêr, a bep tu d'ar c'hloc'h ma skoent an eurioù warnañ gant pep a horzh a zalc'hent en o dorn, pep a dulban ivez war o fenn, hag a oa anvet "Martin" ha "Martine". Kaset e vezent da bourmen war ur d'harr da geñver gouel kêr.

Gronnet eo Cambrai gant kêrioù stank ha tost dezhi, war-hed pemp kilometrad warn-ugent, kement hag hi, Arras, Bapaume, Péronne, Valenciennes, Lens, Douai. Lille a zo hanter-kant kilometrad uheloc'h en hanternoz,

Saint-Quentin hanter-kant kilometrad er c'hreisteiz war hent Paris a oa daou-c'hant kilometrad alese. Al linenn houarn vras avat, an hini a zeue eus ar Beljik hag an Izelvroioù ne dremene ket e Cambrai, e Busigny, ur gêrig vihan, ugent kilometrad bennak er c'hreisteiz ne lavaran ket. Harzoù ar stad c'hall a dizhed en tu all da Valenciennes, war-hed 30-40 kilometrad bennak.

Ma lakaer a-ziforc'h al leurgêr vras e-kreiz kêr a oa ec'hon meurbet hag an ti-kêr war al leurgêr-se a zo kaer kenañ ivez ne oa savadur heverk ebet e Cambrai nemet an tour-ged, a dizhe pevar-ugent metrad uhelder. Ur wech pe ziv on savet betel al laez. Ret e oa krapat dre ziriou-viñs diziwezh ha skeulioù hir betek al lein. Erru di e kaved un diwaller o vevañ en ur gambrig dister. A c'horre e lojeiz e spurmantet ar maezioù tro-war-dro, plaen ha disliv.

Gwastet awalc'h e oa epad ar brezel kentañ, en diwezh dreist-holl pa oa bet kemeret gant ar Ganadianed, goude ma voe bet dalc'het gant al lu alaman epad pevar bloaz. Tiez zo ne oant ket bet adsavet c'hoazh e 1937 pa guitajomp kêr gCambrai. Kalz tud a veve d'ar mare-se zoken ebarzh stlabez-tiez savet war ar prim a-hed ar boulouardoù tro-dro, diouzhtu war-lerc'h ar brezel.

Ur gêr gozh eo Cambrai, am eus lavaret. Diskaret e oa bet ar ramparzhioù hogen chom a rae hepred un nebeut tourioù a-hed ar boulouardoù emañ e paouez me-negiñ. Mont a raen a-wechoù da c'hoari enno. Ur c'hreñvlec'h eus ar seitekvet kantved a oa en e sav en tu all da liorz-hêr. Un nebeut straedoù kozh, gant tiez egiz er

grennamzer, straed ar "Récollets", m'em eus soñj mat, war-dro ar skol gentañ-derezh a bleustren ez vihan, e rann-gêr an iliz-veur.

Ebarzh houmañ e kaved bez Fénelon, ar skrivagner gallek brudet, gant an delwenn anezhañ e marmor gwenn. Ne oamp ket avat eus ar barrez-se, eus hini Sant-Géry ne lavaran ket (1), a oa tostoc'h d'ar ganol. Tizhet e oa bet an iliz-mañ ivez gant ar brezel hag edod ouzh he c'hempenn war-dro ar bloavezhioù 33-35. Kounañ a ran bezañ gwelet micherourion oc'h heskennañ hag o vudañ melloù mein ken uhel hag un den, poultrennus, ha tener evel prenn. Seurt mein damwenn ha gwak a vez implijet er savadurioù en hanternoz Bro-C'hall, a gredan.

N'em boa eta nemet triwec'h miz p'em boa kuitet Gwaien. Anvet e oa bet va zad e skluz "Selle" en hanternoz kêr. Un ti hor boa tost d'ar skluz-se, ennañ peder c'hambren traon gant ur raksal, div gambr-doenn el laez gant ur c'hriagnol vras. A-zindan ouzhpenn e oa kavioù bras a roe digor war ur porzh hag ul liorz ec'hon. An ti-se a oa savet e brikennoù ruz ha toet gant teol ruz, evel an darn-vuiañ eus tiez ar gêr-se (2).

N'em eus ket soñj eus kalz tra o tenañ d'ar bloavezhioù kentañ am eus tremenet e "Selle" : ne oan nemet ur c'hrouadur. Eo, eus ur voger hag un ale a oa bet aozet e d'araog hon ti, war an tu a skoe war ar straed. Kounañ a ran ivez ur c'hezeg-koad un tammig pel-

(1) Ur barrez all a oa gouestlet da sant "Roch", ur sant eus ar vro, ivez, a gredan, evel Sant Géry.
(2) A-hed straedoù zo, war lez kêr, e oa savet kenkizioù kran, nemet heñvel poch, a lakae da soñjal e Bro-Saoz.

loc'h. Adreñv hon ti e tremene un tren, o vont da Valenciennes, a gav din, e lein ur savenn : a bell, n'ouzon perak, e seblante din bezañ bihan tre, evel un tren c'hoariell ; tro-aze ivez e oa ur pont hir, bevennet a bep tu d'ar riblenn gant gwaregoù uhel ma klasken a-wechoù krapat warno. Izeloc'h war-draon e taped Iwuy gant he furaereziou sukr war ribl ar ganol. Nepell diouzh ar skluz avat, en em lede ur stank vras e-lec'h e veze kempennet ar c'hobaroù ; eno ivez ez aed da ruzikat epad ar goañv pa veze skornet ar ganol.

Nes d'hon ti e chome un tiegezh eus ar vro a oa e anv Laruelle a denne e orin eus ur vourc'hadenn vras war ar maez, Carnières, seitek kilometrad bennak diouzh kêr, war-du Douai. Eno e oa bugale a oad ganeomp ha bep an amzer ez aemp da c'hoari en o zi. Ar pezh a skoe va spered krouadur d'ar mare-se e oa ar gouloù aezhenn-leskiñ a oa arveret eno hag a roe ur sklerijenn damwer iskis (du-mañ, d'an ampoent, ne oa nemet kleuzeurioù tireoul). Ma komzan avat eus an tiegezh-se eo drebenn ma ne oa ket dianav rannyezh c'hallek an tolead ennañ ; ar vugale o doa desket anezhi gant o mammgozh a veve a-gevret ganto. Ar rannyezh-se a oa disheñvel awalc'h diouzh ar yezh lennegel : - k - a yae da gemer lec'h - ch - ; kyeñ ha ka a zistaged e-lec'h "chien" ha "chat" ; ar ger "kaière" a glote gant "chaise" ar galleg lennegel. Alies e lavare din Roger Laruelle - ur paotr tev ha lart, bepred o c'hweziñ - (1) : "mout meu,

(1) Anv e vreur e oa Henri.

mout meu" ar pezh a lavare hepmuiken : "diskouez din". Ur wech ivez em boa lakaet an tad da c'hoarzhin dre m' em boa graet "elvio" eus un italian a oa e penn ur greant-ti bihan er c'harter-se (1) hag a oa e anv gwir "Levio". "El vio" avat, e rannyezh ar c'horn-bro, a lavare hepmuiken "al leue".

Nebeut a eñvoriou a zalc'han eus an amzer tremenet ganin e Selle, em eus lavaret endev. En em welout a ran o c'hoari e porzh ul labouradeg frilie-noù e-lec'h edo va c'hoarezed o teskiñ mont war varc'houarn ; da noz e vezen ankeniet paz ae va c'herent kuit d'un abadenn bennak e kêr ouzh va lezel va unan er gêr gant va breur. D'ar c'houlz-se ivez em boa kroget davont d'ar skol vabigoù, straed ar "Récollets" end-eeun, e-kichen skol ar merc'hed hag a oa anvet "L'asile", a gomprenen bepred "la zile". Eveljust ne veze ket graet kalz tra er skol-se. Chom a raen avat da zebriñ da greisteiz : fiez a veze roet deomp da zibenn-pred. E diwezh ar bloaz-skol, da geñver lodennadeg ar prizioù, e oamp bet lakaet da zisplegañ ur pezhig-c'hoari ha ni gwisket gant dilhad paper livet a gaven cheurc'h kemañ : Malbroug o vont d'ar brezel, a oa testenn ar pezh-c'hoari.

Ar skol-se a oa pell awalc'h diouzh du-mañ. Distreiñ a raen d'abardaez gant va c'hoarezed, dre straedoù hir ha strizh. Ne chomis ket gwall bell er "zile" a-hend-all. Ur bloaz bennak goude e teuis tre e skol ar Frered, hogen diwar-benn se e komzin diwezhatoc'h.

(1) Aozañ a rae un doare plakennoù e kendaspugnad a ser-vije da sevel tiez. Stank e oa Poloniz hag Italianed er rannvro-se.

P e n n a d 12.

E 1930 e tilojjomp evit mont d'ur skluz all a oa tostoc'h da greiz kêr, en ur c'harter a raed anezhañ 'Cantimpré'. Soñj am eus ez ambrougen va zad d'hon danvez ti nevez : ret e oa kempenn anezhañ, livañ, paperañ, evel ma vez graet e pep ti arack en em staliañ ennañ.

Heñvel e oa a-hend-all an ti-skluz-se ouzh egile e oamp o paquez kuitaat nemet ne roe ket ar c'hav digor war ur porzh hag ul liorz evel e 'Selle'. Adreñv an ti e oa ur porzh pavezet e brikennoù, na petra 'ta, hag un dachenn vras awalc'h gronnet gant ur voger kribennet hec'h unan gant ur gael graet a varrennoù begek: difennet mat e oamp! An dachenn-se a oa bet daouhanteret, graet ul liorz vleuniou eus al lodenn gentañ hag ur porzh ar yer eus an eil, rannet gant ur roued houarn ha tri zi bihan e brikennoù, pavezet e brikennoù, stok-ha-stok, gant ur c'hriñol war-laez. Eus an ti kentañ e oa bet graet un ti-kouez, klud ar yer eus an eil ; ar c'honikled o doa kavet bod en trede e-lec'h e oa dastumet ivez dafaroù ha binvioù a bep seurt. A ziwar he bugaleerezh he doa miret va mamm boaz an embourvezerezh. Etre ugent ha tregont yar a zo bet ganeomp ha bep bloaz, da vare Pask, e veze lakaet hini pe hini da c'horin. Hast hor boa da welout ar poñsined o tiglorañ hag hir e kavemp an teir sizhun a ranked gortoz arack m'en em ziskouezje ar pennouigoù koant gant o daoulagad krak ha ront, o titouial par ma c'hellent. Siwazh, a-benn ur pennad e oa ret o lazhañ, ar c'hilheion

kaezh atav, rak ar yer a veze miret da zozviñ, na petra 'ta : neuze n'oant ket mui mat nemet d'ober soubenn pa veze deuet poent o aberzhiñ. Diwadet e vezent ez vev, pezh n'oa ket un ebat hogen ar c'hiz e oa o dieneañ en doare -se.

Ur yar a yeas evelato diouzh an tonkadur kriz-se, ur yarig velen hor boa kavet tu da zoñvaat va breur ha me (ur poñsin bihan blin ha na greske ket mat a oa anezhi, a oa bet degaset d'ar gêr ha maget gant ... melen-vi). Goude-se e chomas ganeomp el liorz, ken doñv hag ur c'hazh pe ur c'hi. Pa varvas - flastret ha mouget war ar c'hlud gant he c'henyer o doa gwarizi outi ken sur ha tra! - ne voe ket debret, douaret el liorz ne lavaran ket.

Houidi hor boe ivez epad ur frapad, krak-houidi livet flamm o flu, ma oa un dudi sellout outo. Un devezh avat e c'hoarvezas ganto ur gwallzarvoud spontus : debriñ a rejont ar "c'hontamm d'ar razhed" er porzh. Ha setu va mamm nec'het bras. N'oa ket anv evelato a gerc'hat al loenezeg war o zro. Va zud avat o doa klevet lavarout e oa al laezh un enep-kontamm ehp e bar. Hama! Hep termal mui e voe aozet d'an houidi kaezh barnet d'ur marv euzhus ur soubenn laezh eus ar c'hentañ a lonkjont a heligentañ hep ober goulennoù didalvez. Ha neuze e voe gortozet. N'ouzon ket hag-eñ dre berzh al laezh an hini e oa, pe un dra all, hogen ne voe ket hon houidi klañv an disterañ gant louzoù ar razhed. Evel-se da vihanañ o devoe ur marv enorus : rostet e don ur gaoter.

Konikled hor boa ivez, dek pe ugent, o deveze toradoù re vihan serr o daoulagad na gemeremp ket kalz dudi enno. Hag eveljust evit klozañ ar roll ur c'hazh a voe friket gant ur c'harr-tan, pezh a c'hlac'haras an holl. Kemeret e voe en e lec'h ur gazhez a heulias ac'hanomp pa zistrojomp da Vreizh.

Ebarzh porzh ar yer e oa teir gwezenn gerez a roe ingal bep bloaz eostadoù a frouezh bihan du, chugek ha c'hwek. Ne vezent ket kutuilhet avat, debret war ar wezenn gant va breur ha me, ne lavaran ket. Ur wezenn gerez all a oa el liorzh etal an ti hogen houmañ a zouge frouezh c'hwerv awalc'h a oa mat d'ober kaotigell pe likor. War he zro e oa bet kempennet un tamm liorzh vleuniou, egiz m'em aus lavaret, enni jenofl ha dalia dreist-holl, gant ur bod lireu.

Hogen, ur c'harlev pelloc'h, war lez ar maeziou, tost d'ur "c'horon" (1) hor boa ul liorzh legumaj vras awalc'h, un devezh arat bennak enni, a gav diñ, e-lec'h e veze gonezet avalou-douar, fav, piz bihan ha sivi e-leizh, saladenn, awalc'h da bourchas pezh hor boa ezhomm a-hed ar bloaz, war-bouez nebeut.

Adal 1930-31 e oa savet endev ar rez-bevañ, en hanternoz Bro-C'hall bepred. Nebeut amzer goude ma voemp erru da "Gantimpré" e oa bet lakaet an tredan er gêr. A-ziaraok, egiz m'em eus merket, ne oa ganeomp

(1) Ar "c'horon" en hanternoz Bro-C'hall a zo ur c'harter micherourion, a-ziforc'h, anezhañ tiez stok-ha stok a-hed un alez hir, un doare "ghetto", mar karit.

nemet kleuzeurioù tireoul, re vihan a-wechoù, a oa anvet kleuzeurioù "Pigeon", e kouevr, a roe nebeut a-walc'h a c'houlou, a zivogede bep an amzer hag a ziaeze ar re a ranke studiañ ouzh ar sklerijenn anezho rak gwrez a roent. Ret e oa kempenn ar vouchenn, sevel pe ziskenn anezhi. Lod ivez, en amzer-se e Cambrai, a oa sklerijennet gant an aezhenn-leskiñ.

Goude ma voe staliet an tredan e fellas d'am zad kacout ur skingomzer, pezh na blije ket ne-meur d'am mamm a soñje dezhi e oa dispignoù tavoudusoc'h da ober. An hini kentañ hor boe a valee war zaspugneroù a ranked kargañ gant trenkenn sulfurek. Bep an amzer e vezent diviet eveljust ha ret e oa o skourrañ ouzh an tredan-red epad peder eurvezh warn-ugent bennak ; ne oa ket ur bam rak e-keit-se n'oa ket tu d'ober gant ar benveg. Evit kavout ar skignlec'hioù e ranked treiñ div rod a verke hed ar gwagennoù ; ne oa anv ebet d'en em zalc'h-hiañ war an dremm. An uhelgomzer a oa distag diouzh ar benveg e unan ha war-bouez un ere e veze degaset er gegin e-lec'h e kemeremp hor predoù peurvuiañ, a-benn selaou ar "c'heleier". War-c'horre ar skingomzer-se e oa lakaet an delez, ur stern hirgarrezek gronnet gant neudenoù. Ouzhpenn, er-maez, el liorzh, e oa bet gwintet un delez all, stag ouzh ur post uhel etal ar wezenn-gerez.

Seurt benveg a oa un tammig kentidik evitañ da gaout ur son mat tre a-hervez. Buan e teuas da vezañ war-lerc'hiet. Unan all a voe prenet en e lec'h eta, unan diorrestoc'h, na petra 'ta, en ur pezh en dro-mañ,

dezhañ stumm ur voest hirgarrezek, hiroc'h an uhelder anezhañ eget an diaz, e-lec'h e oa merket anvioù ar skignlec'hioù. Hemañ a chomas ganeomp pell amzer ; kaset e voe ganeomp da Vreizh e 1937 ha padout a reas betek fin ar brezel, dek vloaz bennak.

Er penn-kentañ ne oa er gêr nemet ur varaz da gannañ al lien, a ranked treiñ gant an dorn war-bouez un ahela sache ar c'hreziou a-gleiz hag a-zehoù a bep eil. Abarzh pell avat e voe pourchaset ur "mekanik-gwelc'hiñ" a gerzhe gant an tredan. Bez e oa anezhi ur varaz, e prenn dalc'hmat, nemet a-ziwar-c'horre, war ar golo, e oa lakaet ur c'heflusker tredan a roe lusk war-bouez ul lerenn d'ur fust m'oa stag outañ un doare solvazh e kouevr, kleuz, a 'skoe' al lien egiz m'he defe graet ur walc'herez. Unan eus ar mekanikou-gwelc'hiñ kentañ e oa anezhañ ha kentidik awalc'h eveljust.

N'ouzon ket ha bez e oa fornigelloù aezhenn-leskiñ en amzer-se e Cambrai. Tud ar vro a rae, darn anezho atav, gant fornigelloù "flamank", ront o stumm, kofek o diaraog, a domme mat tre a-hervez. Du-mañ n'hor boa ket unan seurt-se. Kerchet hor boa hor fornigell e Bro - "Veljik" a zo tost tre ; kerzhout a rae gant ar glaou eveljust ; an talbenn anezhi a oa goloet gant plakennou feilhañs bleuniet a oa cheurc'h tre da welout.

Me 'gav din e plije awalc'h d'am zad ar "c'hoarielloù" pourchaset deomp gant ar vuhez arnevez. Soñj am eus en devoa prenet ur marc'h-houarn ruz-flamm, ur marc'h-houarn redadeg, a voe laeret digantañ nebeut amzer goude, ken kaer e oa moarvat. Biskoazh ne voe adkavet.

Pa guitajomp Cambrai e oa bet arboellet un tamm arc'hant gant va zad ha va zad en em c'houlenne hag-eñ en dije prenet ur c'harr-tan - pe savet un ti. Va mamm a oa ali a sevel un ti eveljust : siriusoc'h e oa. A-benn ar fin ne voe ket graet nag aneil nag egile. Steuziañ a reas an arc'hant-se gant didalvoudekadur ar moneiz gall epad ha goude ar brezel. Se oa gwashoc'h eget laeradur ur marc'h-houarn moarvat.(1).

P e n n a d 13

Labour va zad e skluz Cantimpré a oa disheñvel diouzh an hini en devoa e 'Selle' rak bez e oa eus ar skluz-se ur "burev-diskleriañ" (marc'hadourezh, loc'hva, disoc'hva h.a.) ha war un dro un doare ti-post e-lec'h e kave ar gobarerion o lizhiri, pakadoù h.a. D'ar mare ma tegouezhjomp eno e oa bet tredanekaet penna-benn ar skluzioù ha ne oa mui d'ober nemet pouezañ war nozelennoù a bep seurt liv renket war ziv daol zu evit digeriñ an norioù, kargañ pe c'houlonderiñ ar skluzioù h.a. C'hoarvezout a rae ganin-me a-wechoù leviata ar skluz er mod-se, oc'h ober diouzh a lavare va zad din, hogen ne vezen ket gwall asur napred rak aon am beze atav rak faziañ, petra bennak ma ne oa netra da zoujañ emic'hañs : kenereadurioù-diogeliñ a oa rakwelet da ziwall diouzh hevelep kammgeradurioù.

Va zad a laboure da veure ha d'enderv

(1) Ul luc'hskeudenner Kodak egiz ma oa diouto en amzer-se a oa bet bet pourchaset ivez. Hogen ne voe ket graet gantañ nemeur nemet epad ar brezel, epad kleñved diwezhañ va zad. Ur benveg gant ur vegin e oa. Keuz am eus bet ne vije ket graet muic'h gantañ.

a bep eil, adal c'hwec'h eur pe seizh eur betek un eur, pe adal un eur betek seizh eur (1) - eur an heol e-pad ar goañv, eveljust. Ar c'hobaroù a dremene ingal e-doug an deiz, hep ehan ebet, kant-ugent, kant-tregont, sul ha bemdez, dezho daou-c'hant-pemont pe dri-c'hant a donneladoù marc'hadourez, glaou alies awalc'h, irvin-sukr ivez da goulz an diskar-amzer. Cambrai a zo ur porzh-stêr war an "Escault" etre Paris hag Antwerpen, e kreisteiz glaouegi hanternoz Bro-C'hall. Ur boblad arbennik tre a oa hini ar gobareron ha padal liesrenkadek ha liesvroadek war un dro. Bez e oa en o zouez Gallaoued ha Flamanked dreist-holl hag ar re-mañ eveljust ne gomzent nemet izelvroeg; va zad ne gomprens ket o yezh hag ober a rae anezho ar "godfordomou" en abeg d'al leoù touet a laoskent bep an amzer en o yezh. Ar c'hobaroù-se a veaje peur-liesañ etre Paris hag Antwerpen, lakaomp, met darn anezho ivez a dremene dre ar Mozel hag ar Roen, e Bro-Alamagn, eta, a oa gouarnet a-benn neuze gant Adolf Hitler. Merkañ a ran an dra-se rak d'ar mare-se eveljust e oa kaoz gant an holl du-se eus ar pezh a c'hoarveze er vro dost-se. Ar bobl vunut endro deomp, kalz anezho komunourion ha sokialourion, a oa nec'het gant an darvoudoù-se dre ma ne oant ket evit kompren ar ster anezho end-eeun. An holl a oa bet spontet pa oa bet aloubet traonienn ar Roen gant Hitler. O eneberezh ouzh ar gouarnerezh kenelwerinat avat a chome war ul live izel awalc'h. Lavaret e veze, da skou-

(1) Ar c'hobaroù-dre-dan a bae evit bezañ skluziet abretoc'h pe ziwezhatoc'h. Hogen stankadegoù-kanol a voe aozet gant ar re all - ar re a ranke bezañ sachet gant ar ar stlejerezed -tredan - a-benn lemel diganto an dreistwir-se.

er, e varve an dud gant an naon, war-bouez nebeut, e Bro-Alamagn (1). Ret e oa bet d'an Alamanned dibab etre an amann hag ar c'hanolioù; kanolioù o doa bet; amann avat ne c'hellent ket kaout. Kement-se oa poellata hervez reizhennoù a glote gant an endro bolitikel c'hall d'ar mare-se hogen na zereent tamm ebet ouzh emgav Bro-Alamagn. A-hend-all e tiogele ar gobareron a vagee a-dreuz Bro-Alamagn ne oa ket berr ar boued nag ar bevañs gant an Alamanned, e oa mat ar bed ganto ha ne oant ket gwall-evurus tamm ebet. Arabat e vefe krediñ e oa ar gobareron -se a-du gant ar genelwerinelourion alaman. Dezrevell a raent hepken ar pezh o devoa gwalet. O eneberion avat a varne an traoù diouzh savboent ar politikerezh gall d'ar mare-se a oa rannet etre ar sokialourion enep-arme ha Dehouiz klasel a felle dezho prientiñ ar brezel a-enep d'an Alamanned (ha n'eo ket a-enep d'o gouarnerezh a blije awalc'h dezho daoust ma ne oant ket evit prizout ar gwir natur anezhañ).

A bep seurt a oa e-touez ar gobareron An darn-vuiañ a oa "merourion" hepmuiken, implijet gant perc'henned prevez pe gompagnunezhioù (e prenn e oa o c'hobaroù), o leviañ o bag war-bouez ur baol, hag int o vevañ ebarzh tammigoù rannidister. O c'hobaroù a veze sachet gant stlejereziou-tredan o vale war roudennoù houarn a-hed brielloù ar ganol (darn eus ar stlejereziou -se a oa kreñvoc'h hag a c'helle kas war-raok div pe deir c'hobar). Al lañs avat a oa gant ar c'hobaroù-dre-dan,

(1) Ar stad alaman en em veve a-benn neuze diouzh reizh an armerzh emvastel: strishadurioù, predoù krennet en tiez-debriñ h.a.

An darn-vuiañ eus an dud ne ouient ket mat avat pezh a c'hoarveze er vro-se.

en houarn, dezho a-wechoù lojeizoù eus ar re gaerañ (dirioù e marmor ha me 'oar-me). Ar re-mañ a sake tizh eveljust hag a yae dreist d'ar c'hobaroù prenn diboan kaer ; n'oa ket dav dezho kennebeut gortoz bezañ sammet gant ur stlejerez. Lavaret em eus e c'hellent goulenn bezañ skluziet abred diouzh ar beure pe ziwezhat diouzh an noz, o paeañ evit ar servij-se, kement ha ken bihan ma oa savet bec'h etre an daou rumm : ar c'hobaroù-prenn o doa savet bardelloù ha stanket kanolioù ha stêrioù e-pad ur miz bennak, ma oa bet ret d'ar re all kodianañ a-benn ar fin.

Darn eus perc'henned ar "c'hefluskerioù" a zeue da vezañ pinvidik, a lakae sevel kobaroù all, a gemere o leve : da vondianed ez aent. Unan anezho a oa o chom e-skoaz deomp, en tu all d'ar ganol, en ur c'henkiz kaer. Ar mab a zeue a-wechoù da c'hoari du-mañ gant bugale all ar c'harter.

Ar skluzier all a oa o chom en ti a-stok ouzh hon hini a oa Carlier e anv. Ur c'hargiad sivil rik a oa anezhañ, da lavarout eo ne oa ket anezhañ ur soudard kozh evel va zad. Kozh awalc'h e oa endev d'ar c'houlz-se ha war-nes komer e leve. Bevañ a rae e unan ebarzh e di gant e vab hag e wreg a oa krog da gleñvel diwar neuze hag a zlee mervel enebout amzer abarzh ma kuitajomp Cambrai. Tud eus ar vro e oant, evel ma tiskouez o anv : genidik e oant eus Pont-Lévêque, ur vourc'h vihan, dek kilometrad bennak diouzh kêr.

Monsieur Carlier a oa un den bihan,

treut eskern, disec'het e zremm, mourroù brizh dezhañ - ha kintus awalc'h. Hañv-goañv ez ae d'e wele da eizh eur, hep mank. E miz Mae pe viz Mezheven avat e chomemp-ni ar vugale da c'hoari diwezhat awalc'h, o kas trouz endro d'an ti, na petra 'ta, maz ae droug er c'haezh den a-benn ar fin dre ma ne c'helle ket kousket ; dont a rae da gunujañ ac'hanomp e toull an nor, war lost e roched, ur boned noz war e benn. Ne zalc'hemp kont ebet eus e glemmoù; neuze e tistroe gant ur c'helorniad dour a glaske bannañ warnomp.

Madame Carlier a oa ur vaouez hegarat, troet da gaozeal, a gemere kalz preder gant ar mab nemetañ he devoa. Ebarzh he c'hegin e oa ur mell fornigell du kofek, ur fornigell "flamank", ha warni bepred ur cheftalenn rak douget e oa d'he banne kafe ha c'hoarvezout a rae ganti pediñ va mamm da evañ "une tiote tasse", egiz ma lavare, hini gwir ha n'eo ket "chirloutte" (kafe astommet) : he c'homz an hini e oa.

E-doug ar brezel kentañ he doa bevet gant an Alamaned epad pevar bloaz. Prest awalc'h e oa da brezeg diwar-benn an amzer-se. War a hañvale n'he doa ket dalc'het ur gwall-soñj eus an dalc'hidigezh alaman kentañ-se hag anat e oa n'he doa tamm kasoni ebet ouzh an Alamaned. Kriz e oa ar brezel evit an Alamaned ivez, a lavare Madame Carlier. Spouronet e vezent pa zeue keloù a gas anezho endro war an talbenn (Cambrai a oa un tamm war-dreñv), en tu all da Arras d'ur mare zo. Kent mont kuit e tiskouezent poltredoù o gwreg hag o bugale en ur leñvañ : lazhet e vijent, emezo, biken n'eo adweljent (1).

(1) Endro da Vimy e c'hoarveze an emgannoù-se. E krog gant Kanadianed e oa an Alamaned eno, a gav din. Tro am eus bet da weladenniñ korflannoù divent ar c'hadvaoù-se.

Neuze e lavare Madame Carlier e oa an Alamanned tud evel ar re all. Seurt komzoù a feuke en un amzer ma oa deuet a-benn bruderezh brezel ar C'hallaoued da reiñ d'an Alamanned brud ur bobl ouez.

Ur mab a oa en tiegezh-se, un tammig koshoc'h egedon, Charles e anv. Un unvab a oa anezhañ, deuet da gemer lec'h ur breur henañ a oa marvet dres war-lerc'h ar brezel, arack dezhañ bezañ ganet. Pa veze kounnaret e vamm outañ e klemme bep taol evel henn: "A! Ma ne vije ket marv da vreur da vihanañ n'em bije ket trubuilh evel-se ganit hiziv, sur ! " Hevelep rebechoù a blante morc'hed er paour kaezh paotr a chome a-wechoù da arvestiñ ouzh luc'hskeudenn e vreur er sal-debriñ en ur hu-anadiñ : "Ha bezañ ne vijen ket bev amañ ma ne vijes-te marv em raog ! " (1)

Daoust da se a-hend-allevetez ankeniet marv ar vaouez paour pa soñje e c'helle koll an eil mab-se. Aes awalc'h e teue dezhi pennfolliñ neuze. Un dro-vezh e oa c'hoarvezet ganti buanekaet dre ma kendalc'hemp da gas trouz endro d'an ti pa oa he mab gant an droug-dent : ur gor an hini eo en doa hemañ hogen awalc'h e oa se d'he spontañ gant ar soñj e c'hellfe bezañ grevus.

Petra bennak ma ne savas biskoazh tamm chabouz ebet etre va zad ha Monsieur Carlier ne oant ket evelato eus an hevelep kostezenn. Hemañ a oa ur sokialour S.F.I.O. ha kas a rae e vab d'ar skol 'lik' ha d'al Lise; an tad hag ar vamm a vage an huñvre e c'hellfe o bugel

(1) Ar c'hiz e oa en amzer-se e Bro-C'hall chom hep kaout bugale ha va zad a dremene un tammig d'un den dinatur o kaout un torad egiz m'en doa.

mont da skolaer un deiz, evel ma huñvreer ebarzh tiegezhioù all ober ur beleg eus mab an ti. Lakaet e veze ivez da bleustriñ war ar sonerezh (1). Seniñ a rae eta klarinetezenn e-doug mintinvezhioù pe endervezhioù penn-da-benn. Daoust ha barrek e oa war an arz-se n'oufen ket lavarout.

Ne chomas ket ar "c'hCarlier-ou" gwall bell ganeomp. Daou pe dri bloaz war-lerc'h e kemas Monsieur Carlier e retred a oa bet gortozet gantañ evel ur baradoz. Soñj am eus e renas ar mab e amzer o terriñ boutailhoù er porzh en deiz ma voe graet an dilojadeg. Madame Carlier a yeas kuit ebarzh ur c'harr-tan hag hi kafunet ebarzh skerboù ha jiletannoù, liv fall en he c'herc'henn : toc'hor e oa endev gant kleñved an talmerannoù. Dalc'houde e klevjomp keloù eus he marv. An tad ne vevas ket war he lerc'h : mervel a reas ivez abarzh pell. Tro am boe evelato da adwelout ar mab e Pont-Lévêque; ne oa ket aet da skol ar vistri ha dimeziñ a reas abred awalc'h goude-se. A-wechoù em eus soñjet gant truez ouzh tonkadur ar re gozh-se.

Pennad 14

Ankounac'haet em eus koulz lavaret anvioù ar vugale a zeue da c'hoari ganeomp. Unan anezho

(1) Du-se, en hanternoz Bro-C'hall, ne oa ket un dra zi-baot e-touez tud ar bobl. Merc'h an hini a gemeras lec'h Carlier - un "harper" hep muiken anezhañ - a zeske seniñ rebed.

a raed Le Maire anezhañ, mab bihan kobarerion deuet pinvidik hag a chome en ur c'henkiz en tu all d'ar ganol. A-hend-all e oa tud a bep seurt o chom war hon tro ebarzh tiez bihan gronnet gant ul liorz, micherourion peurvuiañ, ur gward polis a zichañsas dezhañ tremen nebeut amzer goude ma voemp erru eno. Izeloc'h e oa ur savadur bras, ranndioù ennañ. Hogen n'hor boa ket darempred gant an holl dud-se.

Anv unan eus an tiegezhioù a oa o vevañ en tiez bihan am eus nevez meneget a oa 'Lanselle'. An tad a oa micherour, dilabour d'an ampoent (an enkadenn armerzhel he doa tizhet Bro-C'hall ivez a-benn ar fin). D'ur mare e redas ar brud en doa emezelet an ozhac'h er "Parti Populaire français" savet gant Doriot war-dro ar bloavezhioù-se. Ha kontañ a rae darn - moarvat komunourion ha n'oant ket a-du gant Doriot - e veze paeet n'ouzon mui pegement evit mont da livañ enskrivadurioù en tro-war-droioù diouzh an noz.

Ne oa ket kalz Bretoned e Cambrai, a gav din. Da vihanañ, en amzer-se, ne oa kelc'h na kreizenn ebet d'o bodañ. Evelato, bep ar mare, e teue Bretoned du-mañ d'ober ur pennad marvailh gant kenvroiz. Eus daou anezho em eus dalc'het koun. An hini kentañ a oa e anv Cadoret hag eus Montroulez e oa genidik. Ur c'halvez a oa anezhañ, un denig bihan, ur metrad tri-ugent bennak dezhañ marteze, re hir evitañ e vragoù voulouz roudennek, ur metr pleg melen o tont dreist da vevenn e chakod, un tammig sigaretenn du peg ouzh e weuz traon, marv an tan enni, un tamm mourrou brizh ha reut stag ouzh e weuz krec'h, egiz ma oa ar c'hiz neuze, ur boned war gostez e benn.

Komz a rae gorrek ha sioul bepred, brezhoneg da gentañ pa errue du-mañ ; neuze, a-benn ur pennad, e troe war-du ar galleg. Ur c'homunour touet a oa anezhañ ha farsal a raed gantañ pa zeue war dreuzoù an ti : "Alors, Cadoret, à quand le Grand Soir ? " An "Abardaez meur" : pa vije lazhadeg et an holl vourc'hizion ha dreist-holl an "deux cents familles" a oa brudet awalc'h en amzer-hont. Meur a dro e save kaoz diwar-benn relijion. Ar C'hadoret -se a oa anezhañ ur Breizhad "dieubet", taolet ar feiz gantañ d'ar blotoù hag a vourre o kounañ an amzer ma oa kurust en e barrez e kornog Breizh, a-benn diskouez pebezh hent en devoa graet abaoe m'en doa kuitaet e vro : marteze, piv 'oar, e oa un tamm hiraehz en e fogaserezh. Ne verne ket e venozioù a-hend-all ha degemeret e veze mat du-mañ bepred dre ma oa ur c'henvroad.

Egile a oa ivez genidik eus Montroulez hag Hamon a oa e anv. Levier ur stlejerez-tredan e oa ha gwall dreut e oa e bae d'an ampoent. Yaouankoc'h eget Cadoret e oa, abafoc'h ivez ; bez e oa anezhañ ur paotr lagadet glas plijus awalc'h. Muturniet e oa bet unan eus e zaouarn en ur gwall-zarvoud bennak, friket e viz-meud gant ur fun-dir. Eñ ivez a oa degemeret mat er gêr peogwir e oa anezhañ ur c'henvroad, daoust ma ne glo-te tamm ebet e venozioù politikel gant re va zad. Hemañ evel ar Montroulezad all a oa un ezel eus ar P.C.F., si-riusoc'h avat - egile a oa oc'h ober fent dalc'hmat - ; ne glaske ket tabut ; sioulik e prezege, war e bouez ; anv a veze gantañ eus ar 'C'hevala' : "A-enep d'ar c'hevala emamp ; n'emaomp ket a-enep d'ar relijion..." Hennezh oa an diskan a zeue bepred gantañ, evel m'eo kaer

gortoz, o vezañ m'en doa afer ouzh un tiegezh kristen. Ne rae ket nemeur a verzh eveljust met ne zalc'he droug ouzhimp en abeg da se. Gant ar Breizhad-se e veze komzet brezhoneg ivez, nemet pa veze anv a draoù sirius : e galleg e veze breutaet dalc'hmat diwar-benn politike-rezh.

Ur paotr mat a oa eus an Hamon-se hogen ne dizhe ket mat derc'hel e diegezh kempouez ; bec'h a save etrezañ hag e bried - dimezet e oa d'ur c'hallezha bep an amzer e oa anv a zisparti etrezo nemet e teued a-benn d'o adunvaniñ bepred d'ar mare diwezhañ. Ret eo lavarout ez eo distabil awalc'h spered ar re o deus ranket kuitaat o bro en degouezhennoù gwashañ evel m'o deus ranket ober kantmiliadoù a Vretoned abaoe deroù ar c'hantved-mañ (1).

D'ar mare-se e oa trubuilhet an holl e Cambrai gant an darvoudoù politikel ha broudet e oa bet kalz ar speredoù, da skouer, gant kemeridigezh ar galoud gant Hitler e 1933 hag ivez, tri bloaz goude, gant aloubidigezh traonienn ar Roen. Dija e soñjed du-se e vefe brezel hag e tistrote ar soudarded alaman da aloubiñ ivez hanternoz Bro-C'hall : lavaret em eus e oa bev mat bepred eñvor an dalc'hidigezh kentañ.

Darvoudoù all o doa broudet ar gred politikel er rannvro-se evel e-lec'h-all : eus brezel Spagn a oa tarzhet ivez e 1936 e fell din komz ; kalz a zouje n'en me ledje ar walenn-se dre Europa a-bezh. Va

(1) An Hamon-se a yeas a-c'houdevezh da werzher kazetennoù. Gonit a rae gwelloc'h e vuhez neuze.

zad, evel ur soudard kozh el lu Gall ha ma oa, ne gare ket nemeur ar gomunourion nag an Alamaned. Tuat e oa ar gatoliked dre vras da welout e Franco saveteer ar gristeniezh. Evel-se eta e voen souezhet ha strafuilhet ur wechad m'edomp o selaou ouzh un danevelladur bennak displeget gant ur c'helaouenner e skingomz Luxemburg d'ar mare-se : an dezrevellour a oa a-enep d'ar "Vroadelourion" hag a ziskleris pebezh euzhusterioù a oa bet sevenet ivez gant ar re-se. betek neuze e kreden e oa bet kaset da benn hevelep euzhusterioù gant ar "Re Ruz" hepken ; setu pezh a lennen war gazetenoù zo a zegouezhe du-mañ. E pelec'h edo ar wirionez ? Evit ar wech kentañ e veizen ne oa ket an Istor un daolenn e gwenn ha du. D'ar c'houlz-se, eveljust, n'ouien ket muioc'h eget va c'herent e oa bet roet an emrenezh da Gatalounia ha da Euzkadi ; a zo gwashoc'h, ne ouimp ket zoken e hanveze seurt broioù. Bro-C'hall, Bro-Saoz, Bro-Spagn, Bro-Alamagn hepken a oa broioù.

E 1936 ivez e oa bet trec'h "Talbenn ar bobl" e Bro-C'hall. Kerkent e oa tarzhet harzoù-labour e pep lec'h e Bro-C'hall, hogen dreist-holl en hanternoz ar vro. Moarvat n'emañ ket Cambrai er glaouva en em astenn ugent pe dregont kilometrad uheloc'h hogen kalz gredantioù a oa eno evelato : lien, sikorea h.a. hep kontañ ijinerezh ar puraereziou-sukr war-dro Imuy, a-hed ar gamol. Abarzh pell e voe seizet ar c'hehenterezh war ar c'hanolioù ha setu penaos : da gentañ e oa paouezet al labour er mengleuzioù glaou ; kalz kobaroù avat a zezouge an danvez-se ; a-hed ar c'hanolioù ivez o doa ar vlenier-

ion stlejereziou dilezet o marc'hoù-tredan hag aloubet manva ar gompagnunezh (n'ouzon ket ha ne oa ket stag ui pe vui ouzh mererezh ar 'Pontoù-ha-chaoseriou' gall), un hanter-kant metrad bennak diouzh du-mañ ; tremenet e oant dirak hon ti, krog en o marc'hoù-houarn, en ur sevel o meilhoù-dorn, mav an tamm anezho ha stad enno, a c'hellit krediñ. Bannieloù ruz a oa ganto ; a-c'houdevezh e oa bet degaset bannieloù gall trilliv : ret e oa stourm a-enep da Hitler ivez, na petra 'ta. E-doug ar sizhun gentañ e oa bet kaniri gant an dilezerion-labour egiz pa vije bet kermes anezhi bemdez - pe an 'Dukas' evel ma lavarent en o ranyezh du-se. Betek hanternoz e tregerne doare gallek an "Internationale" :

Debout les damnés de la terre...

Ar "Marseillaise" a veze kanet ivez bep an amzer ha kement-se a oa nevez d'ar mare-se a-berzh ar gomunourion c'hall. Bezet pe vezet, distanet e oa bet tamm ha tamm d'an harzerion-labour. Berzet e oa bet a-hend-all degas gwin d'ar vicherourion gant renerion an harz-labour e unan ; bier a veze evet nemetken. A-benn ar fin e oa bet echu an abadenn p'o devoa bet ar vlenierion an darn-vuiañ eus o arc'hadurioù.

Ret eo anzav e oa korvoet ar rumm micherourion-mañ. Labourat a raent e-doug an deiz, adal sav an heol betek serr-noz, hep ehanañ. Moarvat n'oa ket kalet o labour hogen dister tre e oa ivez o faeamant, marteze pevar real an eurvezh.

Sioul e voe an harzoù-labour e Cambrai. Habask e voe ar vicherourion. Hogen an holl, er rannvro-se

n'o devoa ket afer ouzh ur mererezh dizanv. Va c'hoar he-mañ avat a oa o paouez mont da skolaerez en ur gêrig vihan war harzoù ar 'Veljik'a oa bet test da zegouezhennoù krisoc'h, war-dro 'Maubeuge', a gav din. Eno e oa bet prisoniet mestr ar greantti gant ar vicherourion, kraouiet en e vurev ha gwallgaset ganto. Evit meur a abeg ne geger ket mui nemeur gant dazweredoù seurt-se e-touez ar vicherourion hiziv an deiz(1).

 Pennad 15 /

Va zad, eveljust, n'en doa perzh ebet en 'emsavadeg'-mañ. Er-maez eus an afer edo. Ur brientad e oa e-keñver kalz eus ar re a veve war e dro. Da gentañ e oa stabil e blas o vezañ ma oa kargiad, perc'henn e garg. A-hend-all, trawalc'h a vounreiz a zeue d'ar gêr. Ouzhpenn e rannleve a soudard kozh e touche e c'hopr a skluzier gant adc'hoproù-tiegezh a oa roet d'an holl gargidi adal ar mare-se, a gav din ; n'en doa feurm ebet da baeañ evit e lojeiz ; porzh ar yer hag al liorz a bourchase deomp bevañs ; al lizherdi a zalc'he evit ar gobarerion a zegase dezhañ arc'hant ivez ; epad e amzer vak ez ae da jaojañ kbaroù nevez karget hag an

 (1) Perak n'odeus ket klasket ar gomunourion c'hall kas un dispac'h da benn d'ar c'houlz-se koulz hag e 1944 pe 1947, p'o devoa tro ? Rannet e oa o emsav etre kempennourion ha dispac'herion, n'o doa ket gwir renerion hag a-benn ar fin o deus kontet dreist-holl war Rusia.

dra-se a veze paeet dezhañ. En tu-hont da se e oa ret kontañ al leveoù en devoa degaset va zad kozh pa oa deuet da chom du-mañ, e leve martolod kozh hag an hini en devoa bet evit digoll marv e vab war al "Liberté". War ar marc'had en devoa va zad gwir da gemer teir sizhunvezh eha-noù bep bloaz. Setu, ne oa ket da glemm.

E venozioù eta a oa disheñvel bras diouzh re ar c'helc'hiadur ma oamp a-stok outañ. Eus ar pennad amzer hir en devoa tremenet el lu gall en devoa dalc'het ur spered-kengorf a zouge anezhañ da glask da-rempred bepred gant soudarded kozh eveltañ. E 1931, a gredan, e oa bet deroet dezhañ ar "Médaille militaire" ha medalennet e oa bet a-gevret gant gant daou soudard kozh all war leurgêr vras Cambrai, dirak ur mor a dud (en amzer-se a oa chomet romantel moarvat e veze sevenet lidoù seurt-se c'hoazh) ! Bep bloaz, d'an 11 a viz Du ez ae da vanvez an "emgannerion gozh". Heuliañ a rae kentelioù a oa miret d'an isofisourion gozh : anvet e oa bet da "vMaréchal des logis chef". En ur ger, chomet e oa er "framm". Evel-se eta ne oa ket evit degemer ur gomunou-riezh a seblante d'ar c'houlz-se dreist-holl bezañ stag ouzh ur galloud 'estren'. E breder e oa 'difenn ar vro' da gentañ penn. Brogarour e oa, siwazh er framm gall peo-gwir ne oa framm breizhat ebet. Lavaromp ouzhpenn ne c'helle ket nemeur kennebeut bezañ douget d'ur 'sokialouriezh' a oa bet atav o tismegañsiñ an 'arme'.

Resizañ a rankan evelato e oa chomet va zad stag ouzh eñvor brezelioù an trevadennoù dre vras: ar brezel 'pevarzek', evel ma lavared neuze, ne oa netra e-skoaz brezel Maroko, diouzh e glevout, ha ken buan all

en defe asuret ez ae dreist ar re a gonte ne c'helle ket bezañ er bed poanioù krisoc'h eget ar re o doa reuzet outo ar soudarded war an talbenn.

An doare eñvor hiraezhus a zalc'he eus al lu gall a wiske stummoù dic'hortoz awalc'h. Kalz pouez a roe, da skouer, da zornskrivadur hor poelladennoù skol, ivez d'an embregerezh-korf : ebarzh ar porzh, du-mañ, en devoa aozet zoken un doare 'lammva' deomp d'en em c'hour-doniñ, egiz ar soudarded a oa dindan e urzhioù gwechall.

Kement-se, evelkent, ne vire ket outañ ivez a gounañ deomp a-hed ar wech an trubuilhoù en devoa ranket herzel outo pa oa nevez erru d'al lu gall - na pet gwech em eus e glevet o kontañ penaos e raed anezhañ "sale Breton" ha "sale vendu" e Lunéville - a-benn dis-kouez moarvat ivez en doa prenet ker awalc'h an tammig plas a oa dezhañ. Ar menoz-se end-eeun a estaole allies.

Dre vras eta, en abeg d'e stummadur el lu gall end-eeun, e oa douget va zad d'ar gostezenn dehoù. Pezh a greñvae an doug-se ennañ e oa ar relijion. Ne fell ket din lavarout e oa va zad un den devot, en e-neb : mont a rae d'an oferenn sul p'en deveze amzer ha gwirionezioù ar feiz n'o devoa ket kalz a ster evitañ, a gav din, hogen en em renkañ a rae e unan e-touez ar gristenion, da gentañ o kas e vugale d'ar skolioù kristen hag eñ kargiad en ur stad lik (e 1931 e pade atav an eneberezh etre ar stad c'hall hag an Iliz). Ret eo din merkañ evelato e oa va mamm kiriec d'an dra-se da gentañ ; bez e oa anezhi 'ur vamm gristen' evel ma lavared e Gwaien er gador-brezeg hag evel ma lavared hec'h unan e brezhoneg end-eeun. Va zad avat a wele e kudenn ar skol un doare da zaeñ

e gelc'hiadur - egiz o kacout un tiegezh niverus en amzer -se -, da ziskouez e oa dieub ha n'en doa kont da rentañ da neb. D'ar mare-se avat e oa erreet an Iliz kalz tostoc'h eget bremañ ouzh ar gostezenn dehoù er stad c'hall.

War-dro ar bloavezhioù-se ivez, e 1931-1933 e tegemere va zad ar gazetenn "L'ami du peuple". Ar gazetenn-mañ a oa kentoc'h mignon ar vourc'hizion eget hini ar werin, a soñj din. Koun am eus e tamalle va eontr Henri - breur va mamm, a oa sokialour - d'am zad lenn ur gazetenn a oa a-enep d'ar bobl. N'ouzon ket ha tizhet e oa bet va zad gant ar rebech-se (1) hogen damc'houde e ehanas a lenn ar gazetenn-se a reas freuz-stal a-hend-all ur bloaz pe zaou war-lerc'h. Evidon-me em boe keuz rak lenn a raen bep taol ar bandennoù treset 'Mickey' e oad krog da voulañ war ar c'hazetennoù a-benn neuze.

Emzalc'h politikel va zad a oa renet gant un hinienngarouriezh diblegus. Evitañ e oa ar vuhez ur stourm da gas da benn en e unan a-enep d'an holl : evañ gwinn en defe graet p'o defe ar re all evet dour (en ur c'horn-bro na eved nemet dour e oa ar gwinn arouez ar berzh -mat). Stag e oa an hinienngarouriezh-se ouzh un argadusted antellet bepred ha ganet moarvat diwar e vout bet taollet ez yaouank en un amva gelenus e-lec'h e oa eus ar re all enebourion da faezhañ : arabat tagañ, en em zifenn

(1) Tamall a rae ivez d'am zad ober gant ar ger 'Roche' egiz kalz d'ar c'houlz-se. An Alamanned a oa tud evel an holl : menozioù dengar boutin awalc'h e-touez ar sokialourion.

En amzer-se ivez e teued da werzhañ du-mañ ur feuilh-ton sizhuniek a oa gouestlet da afer 'Dreyfus'. Va mamm a voe ganet e 1886 he doa klevet komz eus an afer-se ha kemeret he doa ur c'houmanant. Skuizhañ a reas gantañ evelato rak re hir e pade an danevell gant an aozerion.

hepken a zo d'ober, e oa boazet da zistagañ. Bezet pe vezet, seurt hinienngarouriezh he doa e bellaet ivez diouzh strolladoù urzhiet strizh evel hini ar gomunourion.

Abegoù all a oa evaljust. Va zad a oa un den diframmet e pep keñver. N'en doa mui darempred ebet koulz lavaret gant e vro hag e renkad wriziennel. E-pad ur mare en doa kavet el lu gall ur stern d'e harpañ. Kuitaet an arme-se gantañ en doa en em gavet digenvezet adarre en un amva nevez ha ne oa ket evit en em aozañ outañ nemeur. A-hend-all, o skoliañ e vugale e heñche anezho war-du ar renkadoù-etre hag a-se e teue da vezañ lodok e tonkadur ar renkadoù-se end-eeun. Liesseurtoc'h eget ar re all eo ar renkadoù-mañ ha rak-se ivez e kaver enno muioc'h a hiniennlezh.

An tech-se d'an hiniennlezh a arouezie temz-spered va zad a voe d'arbet dezhañ c'hoari troioù-kamm dezhañ a-wechoù. E-tro ar bloavezh 1934-35 e oa bet graet aozadurioù bras war ar c'hanolioù tro-war-dro. Fellet en doa d'an Ijinour en devoa perzh war va zad e lakaat d'ober labourioù n'en devoa ket d'ober, d'e soñj. Mac'het en doa a-grenn sentiñ outañ. Gwall-nec'het e oa bet va mamm gant ar gobidell-se : doujañ a rae na vefe klasket trubuilh ouzh va zad ha na vefe-ñ galvet dirak ur poellgor-reizh bennak. Netra ne c'hoarvezas. Hogen ar pezh a oa da verkañ en afer-mañ eo en doa kemeret va zad an emzoug-mañ eus e berzh e unan, hep gortoz urzh ebet a-berzh un emglevad-labour bennak. Hiniennel rik e oa adarre an emsaverzh-se, awenet hepken gant un doare beligasaouriezh ha ger-stur meur a Vreizhad a zamsant ez eo dav en em sevel e Breizh hep gouzout mat a-enep da biv na petra

"Me ' zo kontrol".

Daoust da gement-se holl ha war un dro o devoa va zad ha va mamm un emskiant werinel rik. Ur c'hemm a rae va zad etre an "dud uhel" hag an "dud vunut", nemet e renke dindan an anv "tud uhel" kargidi vras ar stad koulz ha mistri an armerzh ha n'en devoa anavezet e nev doare. Don e venoz, a gredan, a denne da ober eus an "dud uhel" - ar stad a-benn ar fin - un doare douezezh digomprenus na c'helle ket an "dud vunut" burutellañ nag herzel kalz outi. Pa droc en douezezh-se ho kas d'ar marv en ur brezel bennak ne oa nemet plegañ d'ober. Evel holl dud ar bobl e Breizh en devoa ur meizadur gouzañvat rik eus ar stad.

Koulskoude e klaske va zad ur framm politikel bennak. D'ur mare en doa kredet kavout ar framm -se en ur strollad gall nevez savet a oa e dalbenn, a gav din, ar "Parti démocrate chrétien". Degemer a rae ar gazetenn "Le petit démocrate" a oa sizhuniek pe viziek, n'on ket evit lavarout bremañ. O paouez bezañ savet e oa ar strollad-se ha ne oa ket oberiant tre ; n'en doa tamm levezon ebet zoken. Evel ma oa avat e klote gant pezh a c'helle hetiñ va zad e-keñver politikerezh.

Va mamm - evel an darn-vuiañ eus ar merc'hed e Breizh - n'he doa menoz ebet diwar-benn politikerezh. Disfiziout a rae dioutañ evel ur vammenn a drubuilh. Re galet e oa bet he bugaleerezh evit na c'hoantaje ket ar peoc'h evel mad kentañ an tiegezh. An talvoudoù nemeto a anaveze a oa kravezel ; ne oa ket eviti a dalvoudoù politikel. Ar politikerezh - ar stad - a oa un tonkadur da c'houzañv gwellikañ ma c'helled, eus an diavaez,

hep kemer perzh ennañ, o tennañ dioutañ hepken an tammig mad a c'helle reiñ. Ivez, a gredan, e chome garanet en hec'h eñvor ar soñj eus an dizunvaniezh a oa tarzhet e Gwaien p'o doa kroget an dud da blediñ gant ar politikezh.

Pennad 16

O lenn ar pennadoù araok e c'hellfe unan krediñ e oamp beuzet e Cambrai en un aergelc'h gall rik, dreist-holl adal 1930, en abeg d'an ñrvoudoù. Hogen n'oa ket hevelep kont ganeomp tamm ebet. Adal 1931 e teuas va zad-kozh a-berzh va zad da vevañ ganeomp hag hemañ ne ouie ger gallek ebet.

Etre 1925 ha 1930 ne oa ket va c'herent distroet d'ar vro tamm ebet. Re yaouank e oa ar vugale ivez. Adal 1930 avat e voe kemeret ar pleg a vont da dremen ehanoù an hañv e Gwaien e ti va zadoù kozh. Un hir a veaj e oa, dreist-holl en amzer-se. Peurvuiñ e kemeremp an tren da greisteiz pe da deir eur e Cambrai. Kemm a raemp trene Busigny ha degouzhout a raemp da Barris e-tro peder eur pe c'hwec'h eur. P'en em gavemp abred awalc'h eno ez aemp d'ober ur gwel d'un eontr ha da gen-dirvi a oadivroet da Vro-C'hall hag a oa o chom e Pierrefitte, pelloc'h eget Saint-Denis. Dre an tren-riboul hag ar c'harr-boutin ez aemp betek du-se. Va eontr Henri, breur yaouankañ va mamm, en devoa savet eno un tammig kenkiz. Dimezet e oa d'ur vigoudenn. Kendirvi all a oa

o vevañ eno, bugale d'am eontr Jean-Marie a oa atav martolod e Gwaien. Goude bezañ tremenet eno un nebeut eurvezhioù e redemp a-herr endro da Baris a-benn pakañ tren Breizh. E porzh-houarn Austerlitz e kemeremp anezhañ da gentañ ; soñj am eus e hedemp da gentañ ur riboul hir abarzh tizhout ar maezioù. Neuze, e-kreiz an noz, ha ni morgousket e Klevemp anvioù kêrioù dianav : Orléans, Blois, Tours hag an Naoned e Breizh. Diwezhatoc'h e kemerjomp an tren e Montparnasse. Neuze e tremenemp dre Roazhon ha, dre Wened hag an Oriant, e tiraezemp Kemper war-dro seizh eur hanter diouzh ar beure. Un tren all hor samme neuze hag hon douge da Zouarnenez. Eno hor gortoze un trenig bihan giz gwechall, evel ma oant marteze en naontekvet kantved, gant bagonioù prenn hep gwerenn ebet na kombod, digor d'ar seizh avel, sachet gant ur stlejerez vihan. Tremena raemp dre Boullan ha Beuzeg, ar Pont, ha Gwaien a dizhemp war-dro dek eur hanter. Ar pennad-se eus ar veaj a oa an hini dudiusañ. Adal ar Pont e heulieprbloù an aber glas o troidellañ etre ar runioù goloet gant al lann ; amañ hag a-hont e pare ur c'hoadig pin e lein ur gribenn ; anal ar mor a c'hwezhe betek ennomp. En un taol, war-lerc'h an naontegouezhemp en ur bed disheñvel krenn diouzh an hini hor beze kuitast en derc'hent, nevez a-grenn deomp.

Diskenn a raemp da gentañ e rannidi bihan va zad-kozh, war ar Stumm ; eno e feurme va zad-kozh div gambr e-skoaz da garrdi ar stlejerez a welemp o levianta en ur drealañ a c'horre hor prenestr.

D'ar Stumm e teuemp da gousket va breur ha me ; va c'hoarezed a gave bod e ti o maeronezed, er Stumm da gentañ, goude e Poullgwazeg, erfin e Kêrbuzulig. Hor pre-

doù a gemeremp e ti va zad-kozh all a oa o vevañ gant va moereb Louise a oa seizet, egiz m'em eus merket, er Gêrvihan. Netra ne oa kemmet en ti-se abaoe deroù ar c'hantved, a gav din. En traon e oa atav ul leurzi gant gweleoù kloz o peurvreinañ er glebor. Ur stal-galvez a oa bet staliet eno n'ouzon ket gant piv ha ne servije mui da zen. El laez e veze fardet boued egiz gwechall, keusteurenn, en oaled, war un trebez : distreiñ a raemp eta da sevenadur an trebez hag an drezenn ; a-greiz-holl edomp adarre en naontekvet kantved. Ne oa ket neuze, a gav din, nag aezhenn-leskiñ kêr na butan a nep merk. Va mamm evelato he doa staliet el lojeiz all ur fornigell vihan a yae endro gant aezhenn-alkol, un ijin arnevez tre en amzer-se. Ma ! N'oa ket aes ober gantañ kennebeut ha va mamm, koulz eo din lavarout, ne gave ebet lezel un ti klet ha dont da vevañ e Gwaien hep aezmant ebet. Hogen fellout a rae dezhi evelato gwelout he zad en doa ouzhpenn pevar-ugent vloaz d'ar c'houlz-se ha deomp, eveljust, e rae vad aer ar mor.

Va daou dad kozh a oa eta o vevañ e Gwaien ar wech kentañ ma oamp deuet da dremen chanoù an hañv eno. Va zad-kozh a-berzh va zad - un den bras awalc'h e oa e-keñver va zad-kozh all a oa bihan ; daoulagad glas a oa dezhañ - a oa gwisket c'hoazh evel ur martolod, gant ur bragoù hag ur porpant ruz ; ne vutune ket ; un den siarius ha sioul e oa. Va zad-kozh all a oa ivez war e leve d'ar mare-se. Ur bouchig en devoa, melen rouz, fichet gant evezh - an tad-kozh Olier er c'hontrol a droc'he e varv - hag e gorn-butun a oa atav gantañ en e c'henoù. Bemdez, koulz lavaret, ez ae d'ober un tammig tro war ar porzh, dirak an "Hôtel du Commerce". D'ar mare-se ne oa ket kalz

kirri-tan evel bremañ hag ar re gozh a azeze eno war van-koù ; un den seder e oa va zad kozh ha sevel a rae marvailh gant kenseurtes ; a-wechoù ez ae da evañ ur banne en ostaleri ha va c'has a rae gantañ ; c'hoari a rae ivez boullou e lein ar Gêrvihan en un ti a zo dismantret hiziv, an archerdikozh, pe uheloc'h c'hoazh, etal an hent a gas d'ar Roz-kribenn ha meur a wech ivez en ambrougis eno.

A-hend-all e tremenemp hon amzer war an aod, e Traezh-Kadeg. Neuze ne oa hent-tevenn ebet. Mont a raemp gant treuzell an 'Aod-vihan' hag hedañ ar chaoser betek an draezhenn. E-lec'h an hent e oa rozioù, noazh o c'herreg, a zevale betek ar mor, etrezo ur stankenn c'hlasvezhus hag er strad anezhi ur poull-kannañ : eme ez eus bet savet ur skol vicherel evit aesaat hent an harlu d'ar Vretoned yaouank.

Da vintin ha d'enderv e kouronkemp e Traezh-Kadeg. Hañvezhioù zo e oa tomm berv : an heol ha diwar chom noazh dindan e vannou e c'hoarvezas ganin a-wechoù bezañ devet gant ar wrez, leun va c'hein a glogor ha klañv fall gant an derzhienn. Ur wech all e voe darbet din beuziñ ; unnek pe zaouzek vloaz e oan neuze. En em la-kaet e oan en dour en Aod-vihan ha treuzet ganin an aber em boa tapet douar e Poullgwazeg. Va unan penn edon, d'ur beure. Aes awalc'h e oa bet mont hogen distreiñ a voe un abadenn all. Tre a oa neuze ha kaset e oan kuit gant tizh an dour etrezek an donvor. Daoust din ober bec'h e kave din e chomen diflach hep mont war-rack tamm ebet. Krog e oan da fallgaloniñ ha da spontañ p'em boa kejet abenn ar fin gant ur c'hanod. Goulennet em boa sikour ha

sachet e oan bet eus an dour. Abaoe n'em eus bet c'hoant ebet da dreuziñ endro ar 'Ganol'.

Eveljust ne oa komzet c'hoazh nemet brezhoneg e Gwaien en amzer-se, koulz lavaret ha kalz merc'hed yaouank a zouge c'hoazh ar c'hoef. Ar vugale a oad ganin a oa bepred brezhonegerion. Soñj am eus ag ur c'hrennard a oa o chom ur solieradur dindanomp er Stumm ha na gomze nemet brezhoneg pa veze o c'hoari er porzh (eno, a-hend-all, e oa maget bepred ur pemoc'h en ur c'hraou : ar c'hiz ne oa ket kollet). Va rummad-me a voe an hini diwezhañ e Gwaien o kaout ar brezhoneg da yezh ar gavell. Hogen an holl re-se a zeskas galleg d'o bugale p'eo devoe tro da sevel tiegezh. Dija avat ne gaved ken kalz tud yaouank e Gwaien : an holl a ranke divroañ. N'em boa zoken kenderv ebet er gêr-se. Evidon-me ez eo bet Gwaien a viskoazh ur gêr gozhidi, evel ur c'horf diwadet.

Va zad-kozh a-berzh va mamm - an dra-se am eus lavaret a-gent - a ouie drailhañ un tammig galleg, un nebeut lavarennoù e gwirionez, re nebeut evit gelout divizout a-zevri ganeomp. Setu n'oa ket kalz a zampred etrezomp. Eus yezh va zad-kozh n'em eus dalc'het soñj nemet eus ur 'Boullc'huron' ha 'kant mil bouc'huron' a laoske pa veze aet droug ennañ (distagañ a rae hep tamm friadur ebet evel ma reer e Gwaien e-lec'h e tistager 'gata' evit gantañ - ha gant ur c'hwezhadenn hir dirak an 'u').

Pa zegouezhe va zad war-dro fin miz Eost - da vare ar Pardon - evit chom ganeomp ur sizhunvezh pe ziv e c'hoarveze ganeomp mont d'ober un nebeut

pourmenadennoù war vor. Ur wech e oamp aet gantañ ha gant va contr Jean-Mari betek ar Pont en ur c'hanod, douget gant al lanv o vont ha gant an tre o tont endro. Va contr a yae bepred d'ar mor d'ar c'houlz-se. Etre an daou vrezel e kaved e Gwaien bigi sardineta, doare 'sloop', ur sern dezho er staon, div wern a-wechoù, unan er staon, eben c-kreiz, a yae arak gant ur c'heflusker 'Diesel'. Va contr en devoa unan a zaouzek tonellad hag a bake sardined e-leizh c'hoazh d'ar mare-se. Hogen re stank e oa ar pesketadennoù a-wechoù zoken ; ol-werzh a oa ha dav e oa teurel ar pesked d'ar mor endro. Soñj am eus ag ar c'hasedadoù sardined skedus a oa berniet neuze war ar c'haeoù. War ar sloup-se a oa anvet 'Jeanne' en amzer-se e oamp aet d'ober un tammig tro er-maez, dirak Traezh-Kadeg, war-dro an Ervili. Diskleriet en doa va contr penaos en em retere' dimar skleur an tourioù-tan evit dazlec'hiañ genoù ar mulgul ha leviañ e vag betek ennañ.

Er bloavezhioù-se ivez em eus klevet va contr o komz din eus mojenn Gêr Iz. N'ouzon ket perak e felle dezhañ krediñ e oa bet savet Kêr Iz dirak porzh Gwaien ; a-hervez e vefe bet tu da ziverzout diazezoù ur gêr e strad an dour ur c'hardlev pe zaou dirak ar mulgul. N'ouzon ket petra a zo gwir er pezh a gonte.

Gant va zad hag ur martolod kozh a oa e anv Kervevan ez aemp da besketa a-wechoù. Gwelout a ran c'hoazh ur silienn a oa bet kignet ha divouzellet hag en em wee c'hoazh war ribl ar c'hanod. Desket em boa polevat. Bev an amzer ez aemp va breur ha me da besketa gant linennoù sond a-us d'an dreuzell. Hogen peurvuiañ ne baken nemet

kranked marlonk ha mordousegi Ne oan ket ur gwall besketour.

Peurvuiañ e chomemp e Gwaien hep mont pelloc'h eget Traezh-Kadeg. Un drovezh evelato e oamp aet war hon troad ebet chapel Sant Tujan, ul lev bennak diouzh Gwaien, d'ar pardon : darnacuet e oa bet daomp alc'hwezioù bihan da deurel d'ar chas klañv a-benn bezañ diwallet diouto. Me 'gav din ez eo aet ar c'hiz-se da goll. Ur wech all gant un taksi, e oamp aet da bardon Itron Varia Rozkudon, d'ar Pont, betek ur feunteun ma verzed pezhioù moneiz er strad anezhi. Blenier an taksi - ur paotr eus ar vro - a oa ur c'homunour ha na blije ket dezhañ brizh-kredennoù a seurt gant ar pardonioù - en doa tabutet taer awalc'h gant va moereb Anna a oa ouzh hon ambroug. Ur gwir zispac'hor a oa eus ar c'homunour-se, kasoni ennañ ouzh an Iliz h.a. Me 'gav din ez eo aet da get mui pe vui ar ouenn anezho.

Meneget em eus ivez an droiad hor boa graet gant va zad kozh betek Beg-ar-Raz ; ar wech kentañ e oa dezhañ dont d'ar Raz dre zouar. En dro-se hor boa kemeret ar c'harr-boutin. D'ar c'houlz-se n'oa ket kement a weladennourion ha fentus awalc'h e oa gwelout va zad-kozh aet da dourist a-benn ar fin, war ziwezh e vuhez.

P e n n a d 17

An nebeut chomadennoù hon eus graet e Gwaien arak an eil brezel a zo bet pouezus evidon evelato dre m'o deus va lakaet da emskiantañ pebezh diforc'h a oa

etre ar rannvro c'hall e-lec'h edon o vevañ a-hed ar bloaz hag ur Vreizh a oa manet nes awalc'h c'hoazh ouzh ar stad m'edo enni en naontekvet kantved. Evidomp-ni bugale e oa an ehanou hañv ur marevezh marzhus a c'hortozemp bepredgant mall : bez e kontemp, hiraezhus, an devezhioù a oa da dremen araok m'hor befe loc'het. Birviñ a rae an ti gant difraeoù diniver a bep seurt : ret e oa prientiñ dilhad, aozañ pakadoù ha me 'oar-me. Breizh ivez a oa evidomp ur vro hud n'oa hini all ebet par dezhi hag a oa deomp koulskoude.

War-lerc'h ehanou 1930 eta e oa deuet va zad-kozh a-berzh va zad da chom ganeomp : hogos pevar-ugent vloaz en devoa d'an ampoent, aet e holl vugale dioutañ ha betek neuze en doa bevet e unan penn a-greñn e Gwalien e-doug ar bloaz.

Kement-se, evel dres, en doa roet un aergelc'h brezhonek d'ar gêr du-mañ rak va zad-kozh a oa unyezher ha ne ouie nemet brezhoneg. Se ivez avat a lakae kudennoù da sevel rak ne ouie-ni nemet galleg d'an ampoent : ne c'helle tad-kozh ha mibion vihan divizout etrezo tamm ebet. An daou rummad a veve kichen-ha-kichen hep gwir zarempredoù hag epad ar predoù e tebre va zad ha va zad-kozh ouzh un daol a-ziforc'h, dezho da c'hellout komz kenetrezo e brezhoneg. Va mamm a c'hallege ouzhimp ouzh un daol all, o kemer perzh bep an amzer en diviz brezhoneg a yae araok gant ar wazed. Ni ar vugale ne gomprenemp grik ebet er marvailhoù-se, nemet ur ger bep an amzer a oa amprestet digant ar galleg hag a roe deomp da soñjal eus petra oa anv. Neuze e c'houlennemp : "Petra a lavar tad-kozh ?" ha troet e veze deomp e gomzoù.

Ret eo ouzhpennañ ne vrezhonege ket va zad evit komz ouzh va zad-kozh hepken hogen etrezo ivez bep ar mare pa ne felle ket dezho o dije ar vugale intentet o c'homzoù, p'o deveze un dael bennak da ren, da skouer, ken e teue ar brezhoneg da vezañ ur yezh kuzh abenn ar fin ha moarvat e c'hoarvezas kemendall ebarzh dek-miliadoù a diegezhioù eus kornog ar vro er c'hantved-mañ.

Un tammig bihan a vrezhoneg am boa tapet evelato. Gouzout a raeñ kontañ betek ugent (e Gwalien avat e tistager 'fec'h' elec'h 'c'hwec'h'). Un nebeut lavarennoù a oa bet desket deomp, dreist-holl evit kemenn d'am zad-kozh e oa poent tostaat ouzh taol. "Deuit da zebriñ lein, tad-kozh, deuit da zebriñ koañ," hag un toulladig all a droiennoù e-giz "'m eus ket im (ezhomm)". Gwall verr e oa hon deskamant evel ma weler.

En un doare souezhus awalc'h ne c'houtaive den end-emouez eus an emgav espar-se er gêr : stag e oa ouzh natur an traoù, evel distro ar goañv war-lerc'h ar goañv, hini an deiz war-lerc'h an noz, traoù n'eur ket evit .. parrat outo e nep doare. Ne c'helle ket an traoù bezañ disheñvel diouzh pezh e oant : evel-se e oant ha setu holl. Fent a gavemp kentoc'h pa veze hon tad-kozh ouzh hor skandalat e brezhoneg drebenn m'hor boa difoeltret e vinvioù (kemer a raemp e vouc'hal a servije dezhañ da zrailhañ keuneud a-benn... tennañ fulennoù-tan diouzh kailhastr). "Touseg" a rae ac'hanon neuze. Ar ger-se a gomprenen da vihanañ. Eveljust n'en devoa arster politikel ebet ; farsus e oa hepken !

Daoust maz eo chomet ganeomp e Bro-C'hall meur a vloaz ne zeskas va zad-kozh tamm galleg ebet koulz lavaret. Un tammig lavarenn a zeue gantañ evelato pa ne zebre ket va breur yaouank buan awalc'h e soubenn ouzh taol : "Jean n'est pas faim..." a lakae ac'hanoomp da zirollañ da c'hoarzhin bep tro. Va zud a-hend-all ne glaskent ket zoken reizhañ e dammig frazenn : klevet e oa ne zeskje va zad-kozh biken galleg.

An iskisañ eo e veze desket un nebeud brezhoneg da C'hallaoued eus du-se evit komz ouzh va zad-kozh. Bep an amzer e profe ar gobarerion glaou eus o c'ho-baroù d'am zad (servijoù seurt se a oa diouzh ar c'hiz ganto neuze). Va zad neuze a gase a-wechoù ur blenier stlejerez a oa e anv 'Grandjean', ur Gall, na petra, da gomenn e oa poent erruout d'o c'herc'hat gant ur garrigell. Evit an dro e veze desket ur frazenn vrezhonek d'ar Gall. Hemañ avat ne zistage ket fraezh awalc'h ar ger 'glaou' a zeue gantañ peurvuiañ egiz ar ger 'glav'. Va zad-kozh a chome e c'henoù digor war nav eur o klevout anezhañ ; sellout a rae ouzh an oabl hinon hep kompren. Abenn ar fin e tagouezhe va mamm a yae da jubennourez hag a droe ervat komzoù ar Gall. Va zad-kozh neuze a groge er garrigell hag a yae d'ober e gefridi.

Evelkent e oa gouest va zad-kozh da kompren an niveroù e galleg ha jediñ a rae ervat en e benn. Kaset e veze eta da bourchas pourvezioù er stalioù a-wechoù. Ambroug a rae ivez va c'hoar yaouankañ betek ar skol ha mont a rae da ziambroug anezhi. Er gêr e plede gant a bep seurt

labourioù bihan : drailhañ keuneud, aozañ tan pa veze kouez d'ober ha me 'oar-me. Yac'h pesk ha kreñv e oa chomet daoust d'e oad. Lavaret em eus e oa anezhañ un den bras awalc'h, dezhañ daoulagad glas.

E zomani avat a oa al 'liorz' vras hor boa ur c'hardlev pelloc'h etal ar "c'hcoron". Palarat a rae enni, plantañ avaloù-douar, tennañ anezho. Ur maeziad e oa chomet ha stad a oa ennañ o c'hellout labourat an douar.

Un den e oa hag a oa boazet da arvestiñ ouzh an natur hag a-wechoù e atersed anezhañ da c'houzout peseurt amzer a rafe antronoz. Sellout a rae neuze ouzh bolz an neñvoù ha goude prederiañ ur frapadig e roe e ali. Dibaot a wech e veze faziet.

Deuet mat e oamp dezhañ eveljust hag hor mad a raemp eus an dra-se evit tintañ dezhañ ha kaout digantañ un nebeut gwenneion a viremp da brenañ limigoù. Un den mat a oa anezhañ, madelezhuz zoken, lent ivez, pezh n'oa ket souezhus rak un unyezher brezhonek en ur bed gall a zo heñvel ouzh un den nammet, seder ha sart peurvuiañ, prest awalc'h da c'hoarzhin bepred. War un dro e oa anezhañ un den a feiz hag a bedenn, deol evel ma oad gwechall e Breizh, a yae hep mank d'an oferenn ha d'ar gousperoù bep sul. Eus ur bed all e oa ha kalz traoù a anaveze moarvat hogen n'oamp ket evit divizout gantañ koulz lavaret. Ur wech evelato, soñj am eus, em boa goulennet outañ ha kavet en doa hir e vuhez (d'an oad am boa e hañvale pevarugent vloaz din ur wir beurbadelezh). Ma! Respontet en doa deomp - d'am mamm en aterse em lec'h - e kave dezhañ e oa

e yaouankiz evel un derc'hent dezhañ. Poan hor boa d'e grediñ.

Ur wechad em boa lakaet va zad-kozh da c'hoarzhin a-strak o lenn dezhañ ur pennad brezhonek am boa kavet en un tamm kelaouenn bennak (embannadur 'Penn-ar-Bed' eus ar "Journal de la Ligue des femmes catholiques" moulet gant ar "Bonne Presse", a gav din). N'ouzon ket ha lennet em boa mat ar pennad brezhonek-se; evelato moarvat en devoa intentet ur ger bennak ha pezh en doa kavet : farsus moarvat e oa klevout ac'hanon en un taol o tistagañ frazennoù brezhonek hep kompren mann er pezh a lennen, egiz pa vijen ur peroked pe em bije bet donezon ar yezhoù a-daol-trumm netra nemet dre m'em boa desket lenn.

P e n n a d 18 /

Dres, petra a soñje va zad diwar-benn ar brezhoneg d'ar c'houlz-se. Nebeut a dra eveljust. Ne ouient netra a-zivout orin o yezh. Soñjal a rae dezho peurvuiañ e tenne ar brezhoneg d'ar saozneg. Forzh pe-naos n'ouient ket saozneg. Biskoazh n'o doa klevet anv a yezhoù keltiek. A-hend-all, neuze, ne oant ket a-du pe a-enep d'o yezh ; n'o doa ket dispriz outi zoken peogwir e rankent ober ganti bemdez hogen ne roent pouez ebet

(*) Kelaouennoù mat kaset gant maeronez unan eus va c'hoarezed a zegouezhe ingal du-mañ: 'Le Pèlerin' ha 'La croix' pergen.

dezhi kennebeut. Ne oa ket ur gudenn anezhi ha, da skouer, n'en em c'houlennent ket ha bevañ pe vervel a rafe. Dezho ha na ouient tamm galleg ebet abarzh mont d'ar skol n'en devoa hevelep aters ster ebet. Evelkent e oa nec'het va zad dre ma n'en doa ar brezhoneg talvoudegezh ebet er vuhez foran ; neuze e lavare e c'helle servijout ar brezhoneg d'ar re o devoa da ober kenwerzh war ar maez ; alies e veze displeget ar menoz-se gantañ.

Moarvat e soñje d'am mamm a-wechoù ne gomprens ket va zad ar relijion ervat dre m'en doa desket e gatekiz e brezhoneg (1). An dra-se am eus merket endev. Ne gredan ket avat e emplege ar varnadenn-se ar soñj e oa ar brezhoneg un trefodadaj ; gwiriañ a rae hepken e oa bet graet eus ar galleg yezh-spered ar Vretoned ken ne c'hellent tapout deskadurezh nemet drezi hepken, ar pezh a oa hag a zo gwir bepred evit an holl Vretoned gwitibunan. Ur yezh desket dre laer, gant mezh, ne c'hell degas korvo meiz ebet d'an den. Eus ar varnadenn a zouge va mamm avat neuze em eus-me dezastumet a-c'houdevezh e ranked skarzhañ an divyezhegezh e Breizh ha distroadañ ar galleg ma venner ober eus hor yezh vroadel benveg diorren spered ar Vretoned.

Daoust ha levrioù brezhonek a oa du-mañ er gêr ? E gwirionez ne oa hini ebet koulz lavaret. Ouzhpenn an nebeut pennadoù a oa moulet war ar gelaouenn am eus meneget er pennad kent ne oa er gêr nemet ul levr bihan a gantikoù brezhonek a oa bet d'am mamm pa oa bet e

(1) Ne gav ket din e oa gwir ar menoz-se. Va zad-kozh a oa unyezher a oa gwell kristen eget ne vern pe d'halleger.

pirc'hirinaj e Lourdez. Dister tre e oa. Erfin em boa kavet un nebeut bommoù brezhonek gant o zroidigezh c'hallek ebarzh ul levr gallek savet diwar-benn Mikael an Noblez (n'em eus ket mui soñj eus anv an aozer nag hini an embanner, na zoken eus an bloavezhiañ embann ; hanter dispennet ha diswriet e oa al levr-se, a vent vihan, moulet fraezh e lizherennoù bihan). A-hend-all, dudi am boa kavet en oberenn-mañ dre ma oa kont enni eus kornioù-bro ha kêrioù a anavezen evel Gwaien, Douarnenez, Enez Sun. War-bouez he lenn e teuen da veizañ he devoa Breizh un tremened dezhi hec'h unan ; dizoloet em boa ur Vreizh a oa brezhonek rik c'hoazh en amzer-se, disheñvel krenn diouzh ar rannvro c'hall m'edon o vevañ enni d'an ampoent. Seurt lennadur, a-benn ar fin, en doa va dezouget d'ur Vreizh diseurt, diforc'h zoken diouzh an hini a anavezen hag en doa lakaet anat d'am spered dibarelezh va bro.

A-wechoù e klasken deskiñ brezhoneg gant va zad pe va mamm o c'houlenn diganto treiñ ar ger-mañ-ger pe al lavarenn-mañ-lavarenn. Hogen ne dapen ket kalz tra dre an hent-se eveljust. Kavet em boa evelato e oa derezioù en anvioù-gwan brezhonek, an dibenn -ac'h da skouer (a glot e Gwaien gant an dibenn -oc'h hag a skriven neuze -ar egiz an dibenn alamanek -er, rak krog e oan neuze da zeskiñ alamaneg er skolaj). Lakaat a raen va zad da zisplegañ ar verboù, pezh a rae gant youl-vat met gant poan awalc'h, egiz ma c'heller soñjal ; a-benn ar fin ne oa gouest da reiñ din nemet an displegadur di-c'hour an hini a denne ar muiañ d'ar galleg : "me a zo, te a zo, eoñ a zo, ni a zo, fi a zo (pe c'hwi rak er C'hab

e tistager 'c'hwi' ivez met va zad en devoa kemeret mui pe vui prezeg va mamm e brezhoneg, a gav din), ign a zo". Gwall ziaes e oa sevel ur yezhadur en degouezhioù-se.

Va zad ne oant ket displijet o welout e klasken deskiñ brezhoneg : ma oa albac'henn eus va c'hoant ne rae droug ebet da zen. Pa c'houlennas outo avat perak n'o doa ket desket din brezhoneg a-vihanik n'ouient ket kaer petra respont nemet na gomzent ket penn-da-benn an hevelep gouezh : moarvat ne oa ket kalz komm etre hini Gleden hag hini Waien nemet ez eo ledanoc'h un tamm brezhoneg maezioù ar C'hab, o tennañ da hini Leon, eget teodyezh kêr Waien (1), a gav din. Henezh avat ne oa ket ar gwir abeg daoust ma c'helled merzout en digarez-se arouez ur goustiañs trubuilhet hep gouzout mat dezhi. Ar wirionez e oa avat na c'helled ket deskiñ din ur yezh ha na raje nemet va skoilhañ er vuhez ha da gentañ em studioù. Me ' soñj din zoken n'o doa ket diuzet va c'herent chom hep komz brezhoneg ouzhin, daoust d'ar pezh a c'hellent krediñ ha lavarout : douget e oant gant froud an dour, gant un nerzh a oa trec'h dezho ha na c'hellent, dizifenn ha ma oant dre o bout dizek awalc'h, herzel outañ e doare ebet. Hag ar nerzh-se a oa hini ar stad c'hall.

Peogwir emeon er pennad-mañ gant menozioù an dud diwar-benn ar brezhoneg e Gwaien e c'hellan notañ amañ e soñje Gwaieniz - ha va zad ganto - e oa brezhoneg Leon an hini gwellañ, hini al levrioù, an hini lennegel.

(1) E Gwaien e tistaged "deuzouteu" ha "gatu" e-lec'h "deuzouto (dicuto)" ha "gato". Kalz 'z' ha 'v' etrevogalennek a oa kwezhet ivez : kuet (kuzhet), kaet (kavet) ael' (avel) h.a. Zoken e kejed gant 'terienn-terzhienn' Glediet e veze -rc'h- dimeriar (dimerc'her), meried (merc'hed) An dibenn -ar a oa distaget -ar digor tre : amzar, Kepar.

Kement-se a oa natur awalc'h. Kalz eus beleion Gernev a oa genidik eus bro-Leon ha kenderc'hel a raent da brezeg en o rannyezh a-c'horre ar gador-brezeg. A-hend-all, al levrioù nemeto a veze lennet e Gwaien hag er C'hab en naontekvet kantved a oa savet gant Leoniz ha liv o rann-yezh a oa war o yezh lennegel.

Petra bennak ma n'ouie va zud ~~metre~~ ^{hiwar-} benn istor o bro hag o yezh e choment stag tre evelato ouzh korn-bro o c'havell. Degemer a raent ur gelaouenn a oa he zalbenn "Je sers" e-lec'h e oa keleier diwar-benn Gwaien : merventioù, ganedigezhioù, euredoù h.a. Va zud a rae neuze addisplegoù a-zivout ar c'helc'her-se, oc'h ober anv eus karterioù kozh Gwaien, - hemañ a oa eus ar Stiri, hounnezh eus ar Stumm, henhont eus ar ru Doub, Kervrec'h ha me 'oar-me. Seurt nevezintioù eveljust n'oc'edvoa evidomp talvoudegezh ebet pa n'ouie eus piv e oa kont.

Gweladennoù hor beze ivez bep an amzer, dreist-holl a-berzh va moereb Anna a oa aet da vevañ e Paris. Pa zeue du-mañvat ne veze adarre nemet brezhoneg strezi ha va zud (ar voereb-se he devoa desket lenn brezhoneg war ar maez, e Braneleg, pa oa karget da lenn "Buhez ar Sent" diouzh an noz, epad ar goañv) (1). Un contr all, Henri, a oa bet oc'h en em gannañ e Diksmuijde, a zeue d'hor gwelout ivez. Ur wechad en devoa pourchaset din ur mell pistolenn dre stouvoù a rae un tarzsh spontus! Gant

(1) Kement-se ne viras ket outi a vezañ kemplezhet spontus en abeg d'ar yezh ha da dreiñ a-enep dezhi e-kerzh ar brezel dre spont rak an emrenerezh.

hemañ ivez re "preched" brezhoneg, nemet pa veze kel a bolitikerezh, pezh a c'hoarveze bep an amzer hag a zegase breud, egiz m'em eus merket, dre ma ne glote ket nemeur menozioù va zad gant re e vreun-kaer a oa sokialour ha kar-an-den.

Ar pezh a fell din pouezañ warnañ dreist-holl avat e sigur kement-mañ eo an implij a veze graet eus ar yezh dirazomp evel pa ne vijemp ket bet aze tamm ebet. Ar merzad hor boa - am boa-me da vihanañ - e oa hi-ni bezañ troc'het ha rannet diouzh bed an dud vras a haff-vale bezañ dreistdiraez deomp, serret ha ma oa en ur yezh ha na intentemp grik enni koulz lavaret.

Daoust ha va zad a oa brogarour breizhat ? Anat eo ne c'helle ket bezañ broadelour peogwir n'aveze netra eus istor e vro ha netra kennebeut diwar-benn an emsav. Evelkent e oa brogarour diouzh e zoare, evel ma c'helle bezañ ur Breizhad eus ar bobl en e amzer. Stag e oa e emskiant vreizhat ouzh ar c'hemplezh a izelder a waskas kement e rummad-eñ. Dalc'hmat e veze o lavarout e oa ur Breizhad anezhañ, ne oa ket Breizhiz sotoc'h eget ar re all, e oant gouest diwar neuze d'ober berzh evel ar re all, e oant zoken dreist d'ar re all. Kement-se, avat, a oa da gompren er framm gall e-lec'h e oa an unyezherion evel e dad hag e vamm tud nammet e gwirionez, a roe mezh dezhañ e don e askre.

Ur meizadur eus ar Breizhad en devoa va zad ivez. Alies tre em eus klevet anezhañ o tiskleriañ e oa ar Breizhad un den eeun ha gwirion, un den peoc'hus moarvat hogen prest bepred d'en em zifenn ouzh neb e dage.

Ha kement-se holl mesket gant an impalaerelouriezh c'hall a oa bet sanket en e spered gant^e servij a c'hwezek vloavezh en arme c'hall.

A-hend-all, d'ar gre-se e Cambrai, ne zeue deomp kel ebet eus an Emsav. Eo, brud an darzhadenn e 1932 a oa erru du-hont (ne oamp ket aet da Waien er bloaz-se). N'em boa nemet nav bloaz. Va c'herent, eveljust, ne oant ket bet evit reiñ din respont mat ebet d'am goulennoù. Mennad an Emsaverion a seblante iskis d'am spered stummet gant spered impalaerger ar C'hallaoued : Breizh ne oa netra, n'he doa netra, istor ebet, stad ebet, yezh ebet koulz lavaret. Penaos e c'helled dilenn an netra-se e-lec'h Bro-C'hall a oa diskouezet deomp er skol, **draist-holl goude** ar brezel bed kentañ, evel par da Zoue koulz lavaret, peurbadel, peurvat ha difazi eveltañ ?

Bezot pe vezet, ne oan ket chomet pell da brederiañ diwar-benn ar gudenn-se. Chalet eo ur bugel gant prederioù a bep seurt, ar skol, ar c'hoarioù, an tiegezh ha kalz diwezhatoc'h em boe tro da gejjout adarre gant kudennoù broadelezh Vreizh.

P e n n a d 19

Meng am eus graet eus ar skol ; lavaret em eus e oamp bet kaset d'ar skolioù kristen gant ur "vamm gristen", evel ma raed e Gwaien eus ar mammoù a gase o bugale d'ar skolioù parrez.

Aet e oan da gentañ d'ur skol a oa anvet "Sainte-Croix", e kreiz kêr, e straed ar 'Récollets', ur straed vihan a zisoc'h un tamm pelloc'h war ar boulouardoù ha tourioù ar ramparzhioù. Eno e oan chomet pemp bloaz, etre 1930 ha 1935. Dalc'het e oa ar skol-se gant frered dilivrez (al lezennoù douget a-enep d'an urzhioù ha bodadoù kravezel gant ar stad c'hall ne oant ket bet lamet). Ar rener a oa un den bihan gant ur bouchig, dezhañ un doare madelezhuz kenañ (1).

N'eo ket hep un tamm aon bennak em boa kroget er bloaz 1930 da bleustriñ ar skol-se ha me toueziet en un taol e-mesk ar 're vras'. Padal e kaven un dudi espar e deroù ar bloaz-skol, pa groge delioù ar gwez maros da velenañ er porzh, o kaout levrioù nevez flamm, petra bennak ma n'oant ket ken brav, pell emañ zoken, hag ar re a vez aozet d'ar vugale hiziv.

N'em eus ket dalc'het koun eus anvioù va skolaerion nemet eus hini Monsieur Combes am boe da gelenner er bloavezh 1932-1933 (daoust d'e anv n'oa ket kar d'ar c'hozh ministr gall, bezit dinoc'h), an den-bras ha kreñv, livrin, lunedoù ront war e fri hag a veze bepred o vreugeudiñ : trubuilh en devoa gant e skolidi moarvat daoust ma oamp hanter spontet gantañ. Hemañ a lakae ac'hanomp bep lun da zegas gwenneion evit ar 'Sainte Enfance', evit Sinaiz vihan (a zo deust bras abaoe, 'm eus aon), ha reiñ a raemp dezhañ pezhioù en arem gell eus deroù ar c'hantved pe zoken eus amzer Napoleon III, uzet

(1) Ouzh ar skol hec'h unan e oa staget un ti-anez a oa ivez un ti istorel : n'ouzon mui peseurt feur-emglev a oa bet sinet eno er c'hwezekvet kantved.

holl hag hanter diverket, teuc'het, evit e 'oberoù mat'; en eskemm hor beze un nebeut kozh kraon a denne eus ur mell tiretenn e-harz e gador-vestr, a-benn broudañ hor gred d'ober an aluzen da Sinaiz paour.

Ar souezhusañ avat ne oa ket an dra-se. Gant ar skolaer-se eo e teskis kanaouennoù ... Botrel ha setu e peseurt degouezhennoù. Bez e tlee dont ur Frer enseller bennak da weladenniñ ar Skol ; hemañ avat a oa ur Breizhad (n'on ket evit kounaat tamm ebet ppeurt anv en devoa). En e enor eta ha d'ober plijadur dezhañ e oa bñ desket d'ar C'hallaoued vihan du-se div ganaouenn, kanaouennoù a skouer vat eveljust ha kristen rik ; unan anezho a oa he zalbenn "Quand Jesus reviendra au monde..." (egiz ma welit ne oa ket reizhkredennek tre evelato) a veze diskanet evel hen :

You!You!You! Sonnez les binious-ouï
Car le Divin Maître
Va renaître

Re hir e vefe addisplegañ an holl bo-
zioù amañ ; Botrel a ziskouez er ganaouenn-se e c'hellfe
Hor Salver kavout ebestel e Breizh egiz gwechall er Gali-
le, nemet Youdas eveljust :

Mais s'il lui faut un nouveau traître,
un Judas pour trahir son Maître,
Qu'Il renaisse ailleurs, voyez-vous...

Eus ur ganaouenn all desket d'ar mare
-se em eus koun, hini ar "Petit Grégoire" a oa gouestlet
da eñvor ar chouanterezh :

La maman du petit homme lui dit un matin
A seize ans t'es haut tout comme notre
(huche à pain
A la ville tu peux faire un bon apprenti

Mais pour labourer la terre
t'es ben trop petit, mon ami,
Dame oui !

Ha va Gallaoued vihan, kredit ac'hanon,
a gane gant kalz a dan ar c'hanaouennoù-mañ.

Ur Gall a oa eus Monsieur Combes, evel
m'em eus merket, met gwelet hoc'h eus e oa gouest da zis-
kouez e zoujañs evit ar Vretoned egiz ma c'helle. Breizh
neuze a oa sellet evel ur vro gristen ha brud ar saver
kanaouennoù kozh ne oa ket c'hoazh dilufret a-grenn.

Kement-se ne vire ket ouzh hor skolaer
da vegañ ur gasoni ruz ouzh an Alamaned (ne oa ket dibaot
en amzer-se) ken en deveze morc'hed a-wechoù an den kaezh
o soñjal e lezenn ar pardon hag ar garantez embannet en
Aviel.

A bep seurt traoù am boa kroget da zes-
kiñ epad m'edon er skol-se, zoken ar vicher galvez (kente-
lioù evit labourat ar prenn pe an houarn a c'helled kemer)
hogen n'oan ket donezonet tre evit ar vicher-se rak a-benn
bloaz n'oan ket gouest c'hoazh da gomezañ ervvt va zamm
plankenn ; war-bouez raskañ anezhi en tu-mañ, goude-se
en tu-se ne chome mui netra anezhi, ket zoken peadra d'
ober un tammig bank bennak.

Kentelioù sonerezh a oa bet roet din
(n'eo ket me em boa goulennet). Se avat a oa siriusoc'h.
Desket e oa din lenn an notennoù. Un tammig bihan e teuis
a-benn da lenn ar sonerezh hogen e skrivañ ne dizhis bis-
koazh : dreist d'am ampartiz e oa kement-se. Ma! Ret eo
d'ar gelennerion war ar sonerezh bevañ evel ar re all hag
hemañ, na petra 'ta, en doa soñjet moarvat e vefe suroc'h

da zerc'hel e skoliad ma c'hellfe deskiñ din seniñ ur benveg bennak. Kaset en doa ac'hanon ebarzh e di ha sonet en doa evidon a bep eil saksofon ha fleüt o c'houlenn diganin dibab unan eus an daou. Gwall zaubennet e oan : gouest e oan hepken da lavarout e rae ar saksofon kalz muioch a drouz eget egile. A-benn ar fin, evel ma ne seblanten ket entanet tre evit ar sonerezh e kavas va mamm gwell chom hep pourchas ur benveg a oa kerik awalc'h goude holl. Evel-se e echuas va galvedigezh sonour.

Er bloavezh 1935 e tremenis an testi-studi gall, koulz hini ar stad hag hini ar skolioù kristen. E gwirionez n'em boa ket labouret re start er bloaz-se : ar jedoniezh ne blijed din nemeur ha va c'hellenner a glemme dre ma ne labouren ket awalc'h d'e soñj. Evel ma rae din a-hend-all gourc'hemmennoù o lavarout n'oa ket ar spered a vanke din ne oan ket re chalet gant e rebechoù. Un den mat e oa ar c'hellenner-se, bihan ha tev, mourroù dezhañ, kozh ha skuizh, ma c'hoarveze gantañ fatañ epad ar c'hlas.

Ar wirionez eo e oan douget kalz muioch d'ar yezhoù ha d'al lennegezh adal ar mare-se eget d'ar skiantoù. Lakaet em boa em penn er bloaz-se end-eeun deskiñ yezhoù va unan. Du-mañ er gêr em boa kavet teir mell levrenn un "Encyclopédie autodidactique" embannet gant 'Quillet' e Paris, a gav din, bet prenet gant va zad un nebeut bloavezhioù arak, marteze pa oa e

(1) A-benn lidañ an darvoud em boa pourmenet e kêr hag en tro-war-droioù gant kamaladed, - bannieloù ganeomp, gall e-voljust - hag o lakaat da darzhañ nouspet strakerez ken e oan bouzaret mik d'abardaez.

soñj tremen arnodennoù e sell da gaout ur plas er burevioù. A bep seurt danvezioù a oa displeget er c'helc'hgeriadur-se : istor, douaroniezh, yezhadur gallek - hag ouzhpenn e oa moulet en trede levrenn dornlevrioù da zeskiñ yezhoù : saozneg, alamaneg ha spagnoleg. Er bloazskol-se 1934-1935 avat e oa troet ennon deskiñ unan eus ar yezhoù-se. Dibabet em boa an alamaneg : natur e oa en un amzer ma oa kement a reuz endro d'an Alamaned. Boulc'het mat e oa ar studi ganin nemet abarzh pell, siwazh, e chomis boud : al levr a rae anv eus "génitif", "accusatif", ha me 'oar-me hep diskleriañ petra oa al loened-se (evit ul levr emzeskiñ, ret eo anzav e oa aze ur mank). Sac'het e oan manet eta ha dav e voe din gortoz bezañ er ru er c'hwec'hvet klas er bloaz war-lerc'h evit ma vije diskleriet din peseurt ster resis o devoa ar gerioù-se.

Goude m'em boe tremenet an testi-studi e voe nec'het va zad evit gouzout petra ober ac'hanon. Etre an daou vrezel ne oa ket diorreet tre an deskadurezh eil d'ere er stad c'hall ha va zad n'ouient ket zoken re vat petra oa anezhi. Va c'hoar henañ a oa o studiant war wel ar "Brevet" d'ar c'houlz-se a zisplogas dezho. E gwirionez ne oan mat nemet d'ober studioù. Ur "gonez-vara" kentoc'h eget ur vicher en devoa va zad ha dav e oa eta dibab un hent evit va amzer-da-zont.

Soñjet e oa bet er bloavezh-se end-eeun - hini va fask kentañ - e c'hellfen mont da veleg. Kurust e oan e parrez 'Saint-Géry' d'ar mare-se, pezh a gaven aes rak dont a rae din evel-se un toullad gwenneion a lakaen da breñañ timbroù : un dastumad kaer am boa savet

evel-se. Ur wech bennak eta, e deroù an nevez-amzer, e oa bet aozet ur retred e Bavai - ar gêr ez eus kel anezhi ebarzh "Commentarii de bello gallico" eus Kezar - nepell diouzh Cambrai, en ur c'hloerdi bihan ; ratozh an aozerion, a gav din, e oa diuz an danvez kloer a c'hellje en em gavout e-touez ar vugale a zeuje di. Bezet pe vezet, n' oan ket emouez ouzh kement-se ha n'ouien ket re vat petra oan aet d'ober du-se. A-hend-all n'en em blijis tamm ebet epad an tri devezh ma vanis eno ; sarmonioù ha kelenadurioù ar brezezerion a blantast kalonad ennon ; n'oa anv ganto nemet eus kleñvedoù espar o tegas deoc'h ur marv trumm, dic'hortoz naet, d'ho stlepel etre krabanoù Satanaz. Soñjal a ra din e felle d'hor c'helennourion diskouez deomp pegen sirius e oa ar vuhez. D'ur bugel en doa ur faltazi re virvidik avat e tizhent diskouez hepken pegen spontus e oa. Ivez, evidon da vezañ ar c'hentañ e katekiz, ne oan ket deol tamm ebet ; ur feiz furmel am boa hepken, a oa darn eus an endro ma veven enni, hep ster buhez ebet (1).

Va zad avat en defe bet c'hoant awalc'h a gredan, e ven aet da ofisour el lu gall, na petra 'ta. Klasket e oa bet eta lakaat degemer ac'hanon da skoliad lojet eus ur skolaj a oa mennet a-ratozh da zegener mibion isofisourion h.a. Un devezh eta e oan aet gant va zad betek burevioù an arme c'hall tost d'ur c'hreñvlec'h kozh eus ar seitekvet kantved, a gav din, en tu all da liorzhekêr. Eno e oa bet roet deomp an diskleriadurioù rekis.

(1) Brizh-relijion a oa gant ar veleion-se. Bremañ avat e sarmonioù hor beleion nevez ez eus bet kemmet penn d'ar vazh ha n'eus mui meneg enno nemet eus 'Broadoù Unanet', UNESCO, Trede Bed, K.Y.H.h.a. hep tamm relijion ebet.

A-benn ar fin, evelato, n'oa ket bet tennet amp led diouto. Va mamm he devoa diegi, a gredan, d'am lezel da vont tre en ur c'helc'hiadur n'anaveze ket ha na vefe ket bet kristen awalc'h marteze, war a soñje. Dalc'het e voen er gêr eta, a-benn an diwezh. Evit lavarout ar wirionez n'em boa menoz ebet d'an oad-se diwar-benn ar vicher am befe gallet dibab ha va c'herent ne bouezjont tamm ebet evit va heñchañ war un tu n'oa ket douget dezhañ da vat.

Mont a ris eta da skoliad diavaez er skolaj 'Notre-Dame'. A-ziaraok, evel ma oan war-lerc'h un tammig - daouzek vloaz am boa d'an ampoent - e oa bet roet din kentelioù latin gant ur c'hloareg yaouank, mab ur gemenez a oa anavezet du-mañ hag a oa o chom er penn all eus kêr.

Ar skolaj 'Notre-Dame' a oa dalc'het gant beleion eus an eskopti. Pellik awalc'h diouzh du-mañ e oa, war lez kêr, ha prenet e oa bet din ur marc'h-houarn da vont di. Hedañ a raen ar bouloardoù e-biou da dourioù kozh ar ramparzhioù : un hantar lev bennak en holl. Bez e oa eus ar skolaj-se ur mell savadur karrezek e brikennoù ruz, gant ul liorz dirak an talbenn anezhañ, porzhioù hag ur gwerjez e-kreiz. Da gelenner am boe da gentañ ur beleg yaouank, Laude e anv. Berzh awalc'h a ris en e glas ken e voe divizet va lakaat da dremen war-eeun er pevare klas hep ober tamm pempvet ebet. E 1936 eta e teuis tre er pevare klas ha da benn-gelenner am boe ur beleg adarre, Calonne e anv. Hemañ avat a oa un emganner kozh eus ar brezel kentañ ; gloazet e oa bet grevus d'ar

mare-se ha disneuziet holl e oa e zremm gant ur mell kleizhenn e lein e jod dehoù. N'ouzon ket hag-eñ eo en abeg d'an dra-se e sponte e skolidi ; buanek e oa - darn a lavare e oa dre ma oa bet trepanet epad ar brezel - ha prest e oa bepred da daeriñ. Pezh a zo sur eo e talc'he mat e skolidi hag e lakae anezho da labourat. Deuet mat e voen dezhañ abarzh pell rak hep dalc e teuis da gemer ar plasoù kentañ. Ar studi a blije din diwar neuze ha chom a raen va unan er gêr da bleustriñ war ar gresianeg am boz boulc'het ar studi anezhañ er bloaz-se. Kavout a ra din e oa gouiziekok'h ar skolidi er pevare klas eget hiziv er genurzh c'hall a-vremañ. Gouest e oa skolidi Monsieur Calonne da ziskleriañ an "Eneid". Desket em boa zoken daou-c'hant gwerzenn gentañ an eil kanenn dindan eñvor. N'em eus mui soñj hiziv nemet eus ar re gentañ :

Conticuere omnes intentique ora tenebant.
Inde toro pater Aeneas sic orsus ab alto
...

Ar "c'hcommentarii" a oa studiet ganemp ivez, en o fezh.

Un den genidik eus ar rannvro e oa Monsieur Calonne ha bourrañ a rae o kounañ e orin. En ur gouel bennak, ~~soñj am~~ eus, en devoa kanet "Dors mon p'tit quinquin, mon gros rojin h.a." a zo kanenn "rannvroadel" tud hanternoz Vro-C'hall. Hini pe hini eus va c'henskolidi en defe karet en em stagañ ouzh un 'diriegezh' bennak hogen n'oant ket evit diferiñ hag-eñ e aparchantent ouzh ar 'Flandrez' pe an 'Hainault'. Pelec'h edo a-hend-all harzoù ar rannvro-mañ? Va c'helenner istor er pevare klas ne blije ket dezhañ e ve graet dezhañ goulennoù war

gudennoù seurt se egiz p'en defe doujet chom hep gellout reiñ respont mat ebet dezho (1). Hogen, war un dro, e oa kavet iskis tre e rafen anv eus va breizhadelezh, e lavarfen e oan Breizhad, pezh a raen koulskoude hep ~~adunñ~~ ebet a vroadelouriezh, didro kaer, peogwir e rae va zud anezho o unan Bretoned, hepmuiken.

E-touez ar gelennerion all e c'hellan menegiñ Monsieur Cardon a zeske din an alamaneg, ul lañsenn a baotr, seven kenañ e zoareoù, beleg ivez, a blede dreist-holl gant an darempredoù etre gallegerion hag alamanegerion ; lent ha gorrek e kaven e c'hizioù kelenn ha kavout a rae din hol lakae da goll hon amzer war zigarez e rankemp da gentañ, hervezañ, peurzeskiñ diazezoù ar yezh.

Da gelenner jedoniezh em boa ur skoliad kozh eus "Polytechnique", savet gentañ meur a zornlevr war e zanvez, aet da veleg war an diwezhadou, un den dennus, yaouank c'hoazh, a rae war-dro ar skautelezh d' ar poent-se er skolaj. Epad ar bloaz-se end-seun em boa heuliet bodadennoù ha baleadennoù ar skauted (ul lifrez hag un harnez klok em boa pourchaset, ur mell-tog feltr eus ar c'haerañ holl ha me 'oar-me) hogen hep tennañ diouzh ar pleustrezh-se ar gounid hag ar vourrusted am befe gortozet awalc'h marteze ; darn eus ar gourdonadur a oa roet d'omp a hañvale din bezañ didalvez hag aner ; ne santen ket a-hend-all ezhomm da zistreiñ d'an natur o vezañ ma oan bepred tost tre outi. Moarvat e klote gwell mennad ar skautelezh gant degouezh ar re a oa eus tiegzhioù bourc'hizion a bell zo.

(1) Diwezhatoc'h, e Roazhon, em boe ur c'helenner war al latin, Maréchal e anv, a rae eus e rannyezh - eus hanter-oz Bro-C'hall e oa - gwir yezh lennegal Vro-C'hall.

P e n n a d 20

E gwirionez n'em boe ket kalz tro da ergerzhout ar vro m'edon o chom enni neuze. Koulskoude e rankan menegiñ un nebeut troiadoù a ris a-gevret gant skolidi va c'helenndi pe vugale ar patronaj a henten neuze, hini ar barrez 'Saint-Géry'. Aet e oan, da skouer, betek Saint-Omer da weladenniñ un abati Beneadiz. Ned is biskoazh avat betek aodoù mor an hanternoz pe Vrussel evel ma reas va zud ha va c'hoarezed. Ur wech bennak evelato em boa graet un tamm tro a-gevret gant bugale ar patronaj betek ur gêrig (ne gounan ket mui mat an anv anezhi, "Notre Dame de Bon secours" ?) a oa a-c'haol war linenn an harzoù, ma oa an hanter anezhi e "Bro-C'hall" hag an hanter all er "Veljik". An dalc'h e oa prenañ un nebeut bitrakoù, dafar, butun ivez da zegas d'ar gêr hep gouzout d'ar valcouterion : uheloc'h e oa gwerzh al lur c'hall d'ar mare-se eget hini al lur velgiat. Ar vutunerion lucis dreist-holl a oa en o bleud eno. Evidon-me ne raen forzh; ne vutunen ket eveljust ha va zad en devoa awalc'h a vutun velgiat gant ar gobarerion velgiat.

Un touristerezh arbennik er rannvro-se e oa hini an tachennoù brezel kent, en tu all da Arras(1) e-lec'h e oa bet emgannoù arloupet etre an Alamaned hag ar Saozon. Aet e oamp du-se e 1937, a gav din e fin ar bloaz-skol hag ambrouget e oamp gant un 'emganner kozh',

(1) Arras a zo ur gêr-greñv spagnat kozh. A-hervez ne zleje ar C'hallaoued bezañ kemeret anezhi biskoazh, pezh a rejont koulskoude er XVIIvet kantved. Al leurgêr vras a oa bet aozet egiz e Bro-Spagn.

Da Vimy am eus meneget endev ez aemp. Dalc'het e oa ar pennad-se eus an talbenn gant Kanadiz.

va c'helenner pevare, na petra ! Diskouezet e oa bet deomp toulloù don egiz islonkoù graet gant minennoù : ar geot a oa krog mat da ziwanañ ar strad. Ha neuze e tiskennemp dre ribouloù strizh ha leiz betek nouspet dek metrad dindan an douar ; hag en diwezh e tegouezhed ebarzh "kambr" ar jeneral (pe ar c'hornal, n'ouzon ket mui), un tammched enk gant ur fled houarn merglet en ur c'horn. Eno ez echue hor pirc'hirinaj. Hirgouzañverezh emgannerion ar brezel kentañ a zo dreistfaltazi (1).

Tro-war-dro en em astenne beredoù di-vent gant o stelennoù gwenn hag o anvioù sãoznak, a ziwar wel, m'en em c'houlenned da beseurt Moloch e oa bet aberzhet an holl yaouankizoù-se. Met, nann, ne raemp ket deomp hevelep goulennoù. Bugale ne oamp ken, bugale laouen o tremen un devezh hañv war ar maez gant o c'hamaladed.

Cambrai a oa bet dieubet gant Kanadiz hag endro da gêr ivez e oa sêrewet beredoù bihan e-leizh, bepred gant o stelennoù gwenn, kempenn evel liorzhoù. Beredoù ar soudarded alaman am eus gweladennet ivez : tris-toc'h e oant avat gant o c'hroazioù du.

Troiadoù drantoc'h am eus graet eveljust. E 1936 hor boa graet un ergerzhadenn e diwezh ar bloaz-skol ivez betek Avesnes, ur gêr e gevred Cambrai, war-du menezioù Ardennes. Eno e oa glasvezhus ar gweledva, doareet gant ar brouskoad, damheñval ouzh hini Breizh betek bremañ.

Dre vras avat ne oa ket brav tre ar rannvro m'edon o chom enni. Etre 1935 ha 1937 e anavezadennis ar maezioù tro-dro war varc'h-houarn, va unan penn.

(1) Savet omp bet e gwirionez gant gwallgoun ar brezel. Er gêr e oa listri graet gant ... obuzioù kizellet. Lennet-dlennet e oa bet ganeomp er gêr daou vell levr eus an 'Illustration' gouestlet d'ar brezel. Unan eus hon diduelloù e oa toullañ fozioù ha zoken ribouloù ebarzh ar porzh du-mañ !

peurliesañ, nemet ur wech e oan aet gant va zad betek Douai, pemp kilometrad warn-ugent en hanternoz : ur gêrlous awalc'h gant ar poucher glaou am boa kavet eno, brasoc'h ha pouezusoc'h eget Cambrai, dezhi ivez ur 'befreiz', un tour-ged uhel; war he zro e oa strewet ar gwrac'helladoù kailh du-se a zo o tisneuziañ ivez gweladvaoù Kembre ar c'hreisteiz. Un hent brav, simantet penn-da-benn a stage an div gêr hogen etrezo, koulz ha ha war-du Bapaume, Péronnes, Saint-Quentin, Valendinnes, ne oa nemet parkeier noazh a-grenn rannet gant orjalenoù, hep kleuz na mein, gouestlet d'ar gounezerezh boetrabez-sukr, diwez ha dic'heot koulz lavaret, rakskeudenn ur Vreizh da zont deuet en diwezh da vezañ ur vro gorvoüs ha leveüs, goude ma vo bet peurgaset da benn an diskar-kleuzioù hag an dastum-tachennoù, pal ar c'henezelerezh (1).

Kleizek eo kondon ar rannvro-se ha kounañ a ran bezañ merzet anezhañ e strad ar skluzioù bras a oa bet savet d'ar mare ma oa anv a gleuziañ ur ganol vrasoc'h eget an hini a dremene e Cambrai; chomet e oa al labourioù a-istribilh abaoe ar brezel kentañ; un dekmetrad bennak a zonder a oa d'ar skluzioù-se a c'helle degemer meur a gobar war un dro. Hag un iskis a dra e oa e gwiorionez merzout ar c'hleiz gwenn-se a oa e diaz ar skluzioù du-hont.

E-kerzh ar bloavezhioù 1935-1937 eta em boa ergerzhet pastell-vro Cambrai a zo poblet stank kentañ, bourc'hioù enni bep hanter-lev, stok-ha-stok koulz (1) Epad an diskar-amzer e veze ur flae displijus tre gant bouedenn valet ar boetrabez-se a servije, a gav din, da demzañ an douar.

lavaret. Eñvorañ a ran c'hoazh hiziv darn eus o anvioù a hañval din bezañ iskriv hiziv : Proville, Marcoing, Le Gateau h.a., Iwuy e-lec'h ez ae endro ar puraerezhioù-sukr. Hogen biskoazh n'em boe tro da weladenniñ gwir vereuri ebet evel maz eus e Breizh na zoken da gejouet gant kouer ebet.

C'hoarvezet eo ganin ivez mont d'ober un dro betek Paris. Ar wech kentañ e voe e 1936 : aet e oan gant va zad da ziambroug va mamm a oa o tistreiñ diouzh Gwaien e-lec'h e oa bet o prederiañ he zad epad daoue pe dri miz; klañv fall e oa bet va zad-kozh d'ar mare-se. War-dro Pask e oa distroet. An eil gwech e voe e 1937, war-dro ar Pantekost, a gredan, da weladenniñ diskouezadeg-veur Paris. Chomet e oamp du-se daou pe dri devezh. An nozvezh kentañ ma oamp degouezhet hor boa arvestet ouzh un tan-artifis war ribloù ar Seine.

Gouelioù dilevenez e gwirionez. Diougan a vrezel a oa dija d'ar c'houlz-se. Reuz ar brezel e Spagn a oa en e washañ. Ebarzh pabell Spagn end-seun ne oa netra da welout koulz lavaret, nemet un nebeut taolenoù, a gav din - hag ur varzad arc'hant-bev ma taoled enni pezhioù mounreiz a chome war-neuñv eveljust. N'hor boa ket gweladennet pabell Rusia, hini Vro-Alamagn a oa staliet e-skoaz dezhi, ne lavaran ket. Eno avat e oa traoù da welout diouzh an druilh, ur 'planetarium' en o zouez, m'em eus soñj mat. Tagnouz e oa avat implijidi ha kargidi er babell-se. Goude bezañ aet d'ober un dro en ur sal e-lec'h ez ae endro ur benveg skinwelerezh - ar wech kentañ e voe din gwelout unan war vale - e oamp bet diantket hag

ambrouget e oamp bet war an hent reizh gant ur c'hefri-
 diad alaman rok bennak a oa bepred oc'h adc'houlenn ou-
 zhipp ha kompren a raemp galleg, ya pe mann ; dleout a
 raje va zad bezañ respontet dezhañ e brezhoneg. Ken kint-
 us all e oa implijidi unan eus ar pabellou gall a oa deu-
 et da skandalat ac'hanon dre m'em boa troet follennoù ur
 c'helc'hgeriadur bennak a oa war wel eno. Ar merzad a sa-
 ve d'ar spered, diouzh ma c'hellan kounañ tregont vloaz
 war-lerc'h, eo e oa bet fardet pep tra war ar prim, hep
 feiz ebet en ur peoc'h a oa neuze oc'h ober e dalaroù ;
 e pabell Italia e oa bet gronnet boulomoù pri vil da sa-
 batuiñ gant danvezioù ha dilhad uhelbriz, a-hervez. Men-
 net e oa seurt diskouezadeg da c'horren d'ar barroù uhe-
 lañ sevenadur ar C'hornog d'an ampoent hogen dre vras ne
 save diouti nemet c'hwezh ar vreinadurezh hag an distruj.

Da vihanañ hor boa gweladennet pabell
 Vreizh ha kavet dudi enni ; gwir eo e vroude al lorc'h
 broadel e spered Breizhiz ha tizhet e oa bet va zud evel
 Brezhoned all gant an awen a save diouti. Evidon-me, gant
 boem, evel ur marzh, em boa dizoloet an enskrivadurioù
 brezhonek a ginkle ar mogerioù anezhi. Adarre, en he stumm
 skrivet, e pare yezh va bro evel ur c'hevren da drec'hiñ.

P e n n a d 21

Disheñvel awalc'h e oa an endro hag
 an aergelc'h e Cambrai evit pezh a sell ouzh an Iliz, da

skouer, diouzh ar pezh ez int hiziv e Breizh ha da e ve-
 fe marteze klask taolennañ anezho en un nebeut linennoù(1)
 En amzer-se eta n'he doa ket an Iliz kement a vertuz ha
 m'he deus bremañ abaoe Vatikan II. Lakaomp, da geñver ar
 Pask kentañ end-eeun - am boa graet er bloaz 1935 - e ve-
 ze fougeet d'ar gerent ha d'ar vugale. Plasoù a veze roet
 er c'hatekiz hag ar re gentañ o deveze an enor a zibunañ
 nevezadur gouestloù ar vadeziant h.a. dirak an holl dud
 fidel bodet en iliz hag int krapet war ur gador. Da geñ-
 ver ar gouel bras-se e veze pourchaset d'ar baotred ur
 gwiskamant cheurc'h kenañ - me 'm boa bet unan martolod,
 na petra 'ta, gant ur c'holier bras ha medalennoù, bet
 prenet er "Palais du vêtement", war al leurgêr vras, ha
 c'hoazh e oa bet roet ouzhpenn, egiz 'prim' un eurier ja-
 panat bennak, ur mell hini, en doa kerzhet epad pemzektez
 da vihanañ.

Edon o vont da zisoñjal ar pileoù.

Darn eus ar gerent a fogase gant pouez ar piled a veze
 roet da zougen d'ar vugale da geñver o fask kentañ. Peur-
 vuiañ e oa tri c'hiload bennak enno. En hor c'harter avat
 he devoa bet un italianez vihan kerent digalon awalc'h
 evit plantañ dezhi ur piled pemp kiload. Ar wech-se, hep
 ket a var, e oa aet ar maout ganti. Siwazh n'oa ket ar
 plac'h paour evit dougen hevelep samm ; setu e oa bet

(1) En amzer-se e oa Mgr. Chollet arc'heskob e Cambrai
 a oa renet a-hend-all gant ar strollad gall SFIO (stank
 e oa ar vicherourion er gêr-se, egiz m'em eus lavaret ;
 ar maer hag ar c'hannad a oa izili eus ar SFIO.)
 Ur gêr dieub renet gant hec'h arc'heskob e cabet Cam-
 brai er c'hwezekvet kantved ha doujet e oa bet he brientoù
 gant Loeiz XIV, da gentañ, p'en doa he staget ouzh e rouan-
 telezh.

dileuriet ul lakez da zougen he filed a-benn kefridi, ar pezh a lakae an dud da c'hoarzhin eveljust.

Soñj am eus ivez eus ar 'Suis' a rene an ofisoù en iliz parrez 'Saint-Géry', mourroù rodellet dezhañ, gwisket kran en e zilhad giz an triwec'hvet kantved, alaouret ha galoñset holl, un tog daougornek war e benn hag a valee dre alezioù an iliz gant kalz a veurdezh hag a emc'hloar, e gleze rikamanet ouzh e gostez, en ur skeiñ bep an amzer ouzh al leur gant e vazh poumellet a-benn kemenn d'an dud e oa plad ar c'hester o tostaat ha poent bras dezho tennañ o yalc'h diouzh o chakod. He 'gav din ez eo aet gouenn ar 'Suised' da gent. Un Iliz sirius hon eus bremañ hag he deus plantet tro e gouzoug ar folklor.

Eveljust ne oa kudenn a yezh ebet en iliz du-se. Evelato e taoled evezh ouzh an arallyezherion a oa stank awalc'h e Cambrai hag azet e veze oferennoù evito ebarzh chapelioù bihan. Kurust e oan en amzer-se, war-dro va fask kentañ, egiz m'em eus lavaret, ha c'hoarvezet eo ganin-me servijout oferennoù evit Poloniz. An oferenñ a oa **lavaret** e latin, setu n'oa kudenn ebet (daoust ma ne intenten grik er yezh-se d'an ampoent). Poloniz avat o devoa beleion dezho o unan du-se (daveet moarvat gant ar gouarnamant poloniat a neuze rak kavout a ra din e oa un emglev bennak etre Gallaoued ha Poloniz evit kelenn yezh ar re-mañ er skolioù d'an divroerion deuet d'ober o annez en hanternoz Vro-C'hall, er mengleuzioù hag an oferenner er chapel vihan-se a zistage e sarmonioù

e poloneg, na petra 'ta, sarmonioù fonnus hag hir daonet peurvuiañ (da vihanañ o c'haven-me hir kenañ); ar pezh am lakae sabatuet avat eo e troe ar sarmon a-wechoù d'ur vrentadeg etre selaouerion an oferenñ hag ar beleg a oa o tibunañ e sarmon; marvailhoù taer a save neuze, n'oan ket evit intent mann ebet enno eveljust.

Muioc'h e pleustred an ofisoù d'ar mare-se eget bremañ hag ar vugale a oa boazet da vont d'ar gousperoù, a oa kouskus kenañ evit anzav ar wirio-**nez**, gant ar salmoù lavarganet e latin ha digomprenus d'an holl. War-lerc'h ar gousperoù ez aemp peurliesañ d'ur patronaj, hini ar barrez, a-stok ouzh an iliz. Ne gemeren ket kement-se a blijadur er c'hoarioù. Klask a raed hon diduiñ e pep doare evelato, dre hol lakaat da zisplegañ pezhioù-c'hoari zoken, pezhioù-c'hoari santel eveljust: ebarzh unan anezho em boa dalc'het roll sant Tomas, an hini na vez ket tremenet lost al leue dre e c'henoù ha na gred nemet ar pezh en deus gwelet. Ma, goude holl e komprenan **anezhañ** awalc'h.

Enc ivez e c'hellemp arvestiñ ouzh filmoù mut bihan o devoa da bennc'hoarier ur c'hi a raed 'Reñteñteñ' anezhañ. Ar c'hi-se a zo marv pellzo eveljust. An Amerikaned avat o deus fardet abaoe nouspet bandennad skinwel e-lec'h eo dalc'het ar pennroll gant ur c'hi all kenanv da henhont hag a blij kement d'ar vugale hiziv.

Diwezhatoc'hik em boe tro da vont da welout filmoù bras ebarzh ur fiñvskeudenndi bet savet gant bennozh ar barrez hag a oa anvet "Le cinéma des familles".

A-ziarack avat e oan aet, tro pe dro, da arvestiñ ouzh filmoù mut er fiñvskeudenndi "Familia" e kreiz-kêr, tost d'an iliz-veur (un talbennskedus e lizherennoù ruz-tan a oa da hemañ), gant va zud evel dres. Gwelet em boa evel-se ar film 'Verdun' diwar-benn ar brezel kentañ. Fromet tre e oa an dud gant ar film-se, koun mat am eus c'hoazh : gwall dost e oa bepred an darvoudoù.

Adal 1935 avat e kemerjomp ar pleg da vont alies awalc'h d'ar "Cinéma des Familles" da sul enderv. Eno em boe tro da arvestiñ ouzh doare mut "Ben Ur" a oa ur film kaer kenañ ha trivilius, a gav din. Hogen diwar neuze e oad krog da aozañ filmoù-komz. Unan eus ar re a dremenas war ar skramm du-se e voe "Le roi des resquilleurs" a ziskoueze mat awalc'h a-hervez spe-red ar C'hallaoued ha n'int ket evit gouzañv al lezenn-où, sañset; ennañ e oa brudet ar sistem'd' gall a ro tu deoc'h da douellañ ervat ar stad hag he c'hargidi, dre vras ar gevredigezh penn-da-benn 'm eus aon. En diwezh e lamme ar 'floder' war an daol epad ur fest bennak ha kanañ a rae ur ganaouenn c'hallek a reas berzh, a gredan, d'ar poent-se : "J'ai la combine".

Ur film all a oa ar voull gantañ d'ar c'houlz-se e oa "An div emzivadeg", bet aozet diwar ur brizh-reuzc'hoari eus an naontekvet kantved. Soñj mat am eus ag ar film rak lakaat a rae ar merc'hed da skuilhañ daerou e-leizh, ken strafuilhet e oant gant an arvest. Abaoe, moarvat, ez eo kaledet kalonoù an arvesterion hag an arvesterezed rak ne c'hoarvez ket mui ganin gwelout hini o tirollañ da ouelañ epad un abadenn fiñvskeuden-nerezh, ne vern pegen kriz bennak e ve an darvoudoù tao-

lennet enni. Moarvat n'en deus ket mui ar rummad-mañ kalz truez da foraniñ en ur sevenadur a ra van a leñvañ e ser tonkadur ar c'hantmilionoù a zo barnet da vervel gant an naon a-hervez hogen na ra netra a-zevri - en eb - evit berzañ an armoù a c'hell distrujañ an denelezh en he fezh.

P e n n a d 22 /

Nemet ar fiñvskeudennerzh er bloa-vezhioù diwezhañ m'edomp o vevañ e Cambrai n'hor boa ket kalz diduamantoù du-se (1). Eveljust ez aen da besketa bep an amzer er ganol : un nebeut gwenniget a dapan. Ur wech evelato hor boa graet ur besketadenn vurzhdus. Goul-londeret e oa bet skorf ha skluz 'Cantimpré' evit kas da benn labourioù zo. E don ar skluz eta e oa bet dastumet pesked e-leizh, diouz an druilh, a gelornioù, peadra d'ober fritadennoù e-doug ur sizhun.

Ouzhpenn pesked bihan a bep seurt - gwenniget dreist-holl - hor boa paket ur mell karpenn, nouspet lur enni, marteze ugent pe dregont, ha lorc'h ennomp gant ar preizh kaer -mañ, me ' respont deoc'h. Re vras e oa evidomp ivez hag ingalet hor boa anezhañ gant hon amezeion, Monsieur ha Madame Carlier, hervez ar reizhded vrasañ. Ar karpenn-se _____ a oa emichañs ur _____
(1) Bez e oa ur c'hoariva a zisplege bezhioù-c'hoari bou-louard Paris. Ivez e veze displeget alies awalc'h "vaudevilles" Labiche h.a. er salioù-parrez gant amatourion.

vamm-gozh he doa ruzet he c'hof meur a zek vloaz moarvat e strad ar ganol rak ur blaz iskis da sabatuiñ a oa ganti. Blaz al lec'hid hepmuiken, tudañ kaezh. N'oamp ket kroget mat gant hor pred eta ma erruas Madame Carlier he doa bet an eurvad a rannañ ganeomp ar pesk burzhudus-se hag hi, hegarat meurbet, da ziskleriañ e oa re vras o lodenn : n'oant nemet tri er gêr goude holl. Ha setu plantet ganti war an daol ar pep brasañ eus he zamm pesk, a oa jentil eus he ferzh, a soñje deomp. Abarzh pell avat hor boer merzet an abeg don eus hevelep brokusted dic'hortoz : kaer hor boa temzañ ar pesk milliget-se gant hilienn ha me 'oar-me n'oa ket tu da lemel digantañ an advlaz heugus-se a lec'hid a oa intret en e gig. Berr-ha-berr, hag evit komz en ur yezh fraezh, ar pesk-se ne oa ket "debrapl". Gant tud da vihanañ, rak difoeltret e voe d' ar ye a reas kofad gantañ.

E gwirionez, pa gounan an amzer-hont tremenet e Cambrai, e kav din e oa ar vuhez neuze kalz gorrekoc'h eget bremañ. Marteze e oa kiriek da se an eur diouzh an heol epad ar goañv : noziñ a rae da beder eur hanter e miz Kerzu. Ne oa ket lastret ar straedoù ken nebeut gant ar c'hirri-tan. A-hend-all, d'ar mare-se e veze degaset ar boued ebarzh karriolennoù gant pourvezerion a bep seurt (1), al laezh hag ar bara da veure, da skouer, ivez ar bier a veze pourchaset a gasedadoù (seitek gwenneg al litrad). Empennit hiziv ur garriolenn o chom

(1) En amzer-se e Cambrai e oa kalz kigerdion arbennik evit ar c'hig marc'h hag o devoa ur penn marc'h da ardamez a-us d'o stal, na petra 'ta!

a-sav dirak pep ti evit degas laezh pe vara ! A-hend-all penaos e c'hellfed ober kemend-all hiziv pa vez lojet an dud ebarzh tourioù a bemzek solieradur pe vuic'h e Roazhon, lakaomp. Aet eo da get an amzer-se da vat ha ne fell ket din lavarout em eus keuz dezhi. Aesoc'h ha plijusoc'h eo bevañ bremañ ne vern penaos hogen ret eo anzav e paeomp priz an diorreadur-se.

Dre vras evelato n'hor boa ket kalz diduelloù e Cambrai hag enoññ a raemp, dreist-holl epad an hañv pa ned aemp ket da dremen an ehanou e Gwaien e 1932 pe e 1934 da skouer. Mont a raemp da neuñ en ur c'houronkva dizolo, war lez ar maezioù hogen kement-se ne oa ket koulz hag ar mor, eveljust. Tud Cambrai a yae d'an aod e Calais pe e Dunkerk, a-wechoù da Ostend e Flandrez. Mor an izelvroioù avat n'eo ket koulz hag hini Breizh hag hiziv an deiz e sko hanternoziz Vro-C'hall gant o c'hirri-tan war-du ar mervent pe ar c'hreisteiz, evel an holl, a gav din.

A-hend-all n'hor boa ket mignoned na kelc'hiadur ebet e Cambrai e-lec'h e chomemp estrenion. N'eo ket diaes kompren eta ne ve ket deuet a-benn va zud d'en em stagañ ouzh ar vro-hont. Va mamm he doa hiraehet bepred da Vreizh. Adal 1936 e oa ar brezel o kinnig tarzhañ adarre ha doujañ a rae na vefe aloubet ar rannvro-se gant an Alamaned a nevez : bev e oa bepred, egiz m' eus merket, koun an dalc'hidigezh alaman kentañ. O kreskiñ e oamp ivez : un nebeut bloavezhioù c'hoazh ha war

var e vefemp bet da eurediñ du-hont. Neuze o defe dleet va zud en em staliañ ivez da vat e Cambrai. Ouzhpenn-se e oa kouezhet va zad-kozh klañv meur a wech er bloavezhioù-se ha va mamm he doa ranket mont d'e brederiañ, pezh n'oa ket aes o tont a geit all, eizh kant kilometrad ben-nak. Va mamm eta a bouezas war va zad evit ma c'houlennfe kemm plas. Hemañ a zegemeras aes mennad va mamm hag a yeas meur a wech d'ar mavdiernva gall e Paris da welout e pelec'h e c'hellfe bezañ anvet e Breizh. Kinniget e oa plasoù en Henbont etal an Oriant, war ar Blañvoezh, hag e-kichen Roazhon. A-benn ar fin e voe dibabet Roazhon en abeg d'ar skolioù. Va c'hoar yaouañ ivez, a-hervez, n'houle ket mont d'an Henbont. Bezet pe vezet, Roazhon an hini eo a voe diuzet. Daoust ha disheñvel e vefe bet hon tonkadur ma vefemp aet da chom en Henbont ? Seurt goulennoù a zo diaes respont dezho.

Abaoe pell e huñvreen-me ivez distreiñ da Vreizh. Soñj am eus e studien kartennoù Breizh en amzer-se o teurel evezh e oa graet kondon Breizh a vein strin-kennek pe eus ar c'hentañ hoalad na gaved tamm ebet e Cambrai (er bloaz diwezhañ m'edon du-se, er pevare klas, o studien endev an douarouriezh end-eeun).

Dedennet e oan bet ivez diwar neuze gant istor ar Gelted, n'ouzon ket perak (anv Jullian, da skoue, a anavezen ; a belec'h vat, diaes eo din respont). Hervez sorc'henoù an istorour-se e kreden e oa ar C'hallaoued diskennidi ar C'halianed (setu ivez pezh a zeske deomp hanez Bro-C'hall a oa kelennet deomp er skol).

Abred awalc'h a-c'houdevezh e tistaolis ar ouennelouriezh ceunik-se a vire ouzhin a veizañ ervat kudezñ Vreizh. Kement-se avat ivez, en ur stumm, am heñchas war-du karan-tezh ar Vreizh keltiek.

Meur a abeg eta a genoberias da zevoudañ hon distro da Vreizh. Ne vern peseurt a oa anezho, hevelep distro a zlee, eveljust, kaout ul levezon vras war va flanedenn da zont.

~~~~~

DIVANKADURIOU HA NOTENNOU

Reizhañ evel henn :

- P.7.L.13 : epad e-lec'h eapd  
P.8 : lemel all war-lerc'h ' wallzarvoud' l.17 ha laka t  
anezhañ war-lerc'h 'gwallzarvoud', l.18.  
P.20 : lemel an eil -met- e linenn diwezhañ ar bajenn.  
P.22 : 'dezo' a vefe da lakaat e-lec'h 'dezv'. L.5.  
P.23, l.17 : ar geusteurenn.  
P.24, l.19 : lakaat pesked war-lerc'h e veze lakaet.  
P.27, teir linenn araok traon ar bajenn, lakaat ur paotr  
etre kamalad hag e oa komzet.  
P.30 : lemel c'hall e diwezh an trede linenn.  
P.33 : lemel dre e diwezh al linenn 13.  
P.37 : lenn er bobl elec'h ar bobl.(Linenn 1.)  
L.13 : lenn kement-se e-lec'h kment-se  
P.40, l.19 : lenn greantioù e-lec'h greantioù ha reizhañ  
evel-se skrivadur ar ger-se penn-da-benn al levr.  
P.42 : lenn emouestlañ e-lec'h enoustlañ.  
P.44 : linenn 16, lenn a zouge e-lec'h a zougen  
P.45 : linenn 22, ar c'ammed e-lec'h ar c'hammaed  
P.46, l.12 : kaset e-lec'h kaet.  
P.48, l.22 : reizhoc'h eo skrivañ : dont da vezañ e-lec'h  
da zont da vezañ.  
P.49. E ser ar ger gallek 'fourrier' an diskleriadur a  
roan a oa hini va zad eveljust. E gwirionez  
'fourrier' a zo kar d'ar ger 'fourrage'. 'Fourrier' a  
lavar an hini a ra war-dro bod ha boued en arme.  
P.57, l.21 : hep e-lec'h ehp.  
P.58, l.16 : ur c'hardlev.  
P.62, l.6 : marc'hadourezh e-lec'h marc'hadourez.  
P.63, l.8 : Alamagn e-lec'h Alamgn.  
l.24 : arveret em eus al liester en -où- evit stlejer-  
ez dre maz eus traoù anezho ; hogen koulz e vefe moarvat  
implijout an dibenn -ed-  
P.64, l.24 : nebeut e-lec'h enebeut.  
P.84, l.5 : ur wern e-lec'h ur sern.  
P.87, l.20 : lenn an hañv e-lec'h ar goañv.  
P.116, l.17 : ar yer e-lec'h ar ye.  
P.118, l.25 : da skouer.  
P.119, l.5 : karantez e-lec'h karantezh.

=====



